


# *bit*defender



***INTERNET SECURITY*** <sup>2008</sup>

*Dornlevr implijout*

## BitDefender Internet Security 2008

### *Dornlevr implijout*

Embannet 2008.06.12

Copyright© 2008 BitDefender

#### **Notennig lezennel**

Pep gwir miret strizh. Ne c'haller eiladuriñ pe treuzkas lodenn ebet eus an dornlevr-mañ, e nep stumm hag e nep doare, elektronek pe fizikel, ha pa vefe al luc'helelenniñ, an enrollañ, ar saveteiñ pe an adsevel, hep kaout un aotre dre skrid digant un dileuriad ofisiel eus BitDefender. Aotreet e vez ober gant arroudennoù bihan e taolioù-arnod gant ma vo meneget ar vammenn. Ne c'haller, e mod ebet, degas kemmoù en arroudennoù-se.

**Diwall.** Gwarezet eo ar meziant-mañ hag e deulioù gant copyright. An titouroù a vez roet en teul-mañ zo graet evit kelaouiñ an dud, hep gwarant. Daoust ma'z eo bet prientet an teul-mañ en ur ziwall ne c'hall den ebet lakaat an aozerien da sammañ ar giriegezh ma c'hoarvezfe gantañ koll pe gwastañ tra pe dra, pe ma seblantfe dezhañ bezañ kollet pe gwastet tra pe dra, en un doare eeun pe en un doare dieeun gant an titouroù zo en teul-mañ.

An dornlevr-mañ zo ennañ liammoù war-du lec'hiennoù Web tud all na vezont ket kontrollet gant BITDEFENDER, ha n'emañ ket endalc'had al lec'hiennoù-se dindan atebegzh BITDEFENDER. Ma'z it war unan eus al lec'hiennoù Web zo pourchaset gant un den all a zo meneget en teul-mañ e lakait hoc'h urzhiataer en arvar. Ne veneg BITDEFENDER nemet titouroù zo graet evit kelaouiñ an dud, ha n'eo ket peogwir eo meneget al liamm-se ennañ ez asant BITDEFENDER da sammañ atebegzh endalc'h al lec'hienn Web zo pourchaset gant un trede den.

**Merkoù kenwerzhel.** Anvioù merkoù a c'haller lenn en dornlevr-mañ. An holl verkoù zo marilhet pe n'int ket marilhet en teul-mañ a aparchant d'o ferc'henn dezho hepken.



# Taolenn an Danvezioù

<b>Aotre-implijout ha gwarant .....</b>	<b>viii</b>
<b>Rakskrid .....</b>	<b>xii</b>
1. Kendivizadoù implijet en dornlevr-mañ .....	xii
1.1. Reoladoù tipografek .....	xii
1.2. Gouzavadennoù .....	xiii
2. Framm an dornlevr .....	xiii
3. Displegadennoù .....	xiv
<b>Staliadur .....</b>	<b>1</b>
<b>1. Staliañ BitDefender Internet Security 2008 .....</b>	<b>2</b>
1.1. Kefluniadur rekis .....	2
1.2. Pazennoù staliañ .....	3
1.3. Skoazeller staliadur kentañ .....	5
1.3.1. Tennad 1 diwar 6 - Marilhañ BitDefender Internet Security 2008 .....	6
1.3.2. Tennad 2 diwar 6 - Krouiñ ur gont BitDefender .....	7
1.3.3. Tennad 3 diwar 6 - Gouzout hiroc'h war an RTVR (danevell viruzoù war amzer real) .....	9
1.3.4. Tennad 4 diwar 6 - Diuzit an trevelloù da seveniñ .....	10
1.3.5. Tennad 5 diwar 6 - Gortozit fin an trevell .....	11
1.3.6. Tennad 6 diwar 6 - Sellet ouzh an diverradenn .....	12
1.4. Hizivadur pennañ .....	12
1.5. Dresañ pe dilemel BitDefender .....	13
<b>Merañ diazez .....</b>	<b>15</b>
<b>2. Evit kregiñ .....</b>	<b>16</b>
2.1. Arlun BitDefender er Varrenn stad Reizhiad .....	17
2.2. Scan Activity Bar .....	18
2.3. Dielfennadur BitDefender gant an dorn .....	19
2.4. Modulenn hizivaat .....	19
2.4.1. Oc'h implijout Modulenn Hizivaat .....	19
2.4.2. O kemmañ ar verradenn Modulenn Hizivaat .....	20
<b>3. Statud surentez .....</b>	<b>21</b>
3.1. Bouton stad Kontroll ar gerent .....	23
3.2. Bouton stad surentez ar PC .....	23
3.3. Bouton stad surentez ar rouedad .....	24
3.4. Bouton statud ar c'hontroll identelezh .....	24
<b>4. Trevelloù raktermenet .....</b>	<b>26</b>
4.1. Surentez .....	26

4.1.1. Hizivaat BitDefender	26
4.1.2. O tielfennañ gant BitDefender.	28
<b>5. Roll-istor</b>	<b>34</b>
<b>6. Marilhañ ar produ</b>	<b>36</b>
6.1. Step 1/3 - Register BitDefender Internet Security 2008	36
6.2. Step 2/3 - Create a BitDefender Account	37
6.3. Step 3/3 - Register BitDefender Internet Security 2008	39
<b>Merañ araokaet eus ar surentez</b>	<b>40</b>
<b>7. Letrin an arventennoù</b>	<b>41</b>
7.1. Kefluniañ an arventennoù hollek	42
7.1.1. Arventennoù hollek	43
7.1.2. Arventennoù eus danevell ar viruzoù	44
7.1.3. merañ an arventennoù	44
<b>8. Enepviruz</b>	<b>46</b>
8.1. Dielfennañ ar moned	46
8.1.1. Kefluniañ al live gwareziñ	47
8.1.2. Personelaat al live gwareziñ	48
8.1.3. Diweredekaet ar gwareziñ war amzer real	52
8.2. Dielfennañ diwar c'houlenn	52
8.2.1. Trevelloù dielfennañ	54
8.2.2. Implijout lañser ar berradennoù	55
8.2.3. Krouiñ an trevelloù dielfennañ	56
8.2.4. Kefluniañ trevelloù dielfennañ	56
8.2.5. Dielfennañ traezoù	67
8.2.6. Diskwel ar renabloù dielfennañ	74
8.3. Traezoù lakaet e-maez an dielfennadur	76
8.3.1. Lakaat e-maez hentoù an dielfennañ	78
8.3.2. Lakaat astennoù an dielfennañ e-maez	80
8.4. Takad dispell	83
8.4.1. Merañ ar restroù en dispell	83
8.4.2. Kefluniadur arventennoù an dispell	84
<b>9. Maltouter</b>	<b>86</b>
9.1. Alberz eus ar Maltouter	86
9.1.1. Petra eo ar profiloù maltouter ?	86
9.1.2. Petra eo an takadoù rouedad ?	88
9.1.3. Mont en-dro ar maltouter	89
9.2. Stad ar Maltouter	90
9.2.1. Kefluniañ al live gwareziñ	92
9.3. Kontroll an tremenezh	93
9.3.1. Ouzhpennañ reolennoù ent emgefreak	93
9.3.2. Ouzhpennañ reolennoù gant an dorn	94

9.3.3. Merañ reolennoù .....	99
9.3.4. Kemmañ ar profiloù .....	99
9.3.5. Adderaouekaat ar profiloù .....	101
9.4. Arventennoù araokaet .....	102
9.4.1. Kefluniañ an arventennoù silañ ICMP .....	103
9.4.2. Kefluniañ arventennoù araokaet ar maltouter .....	105
9.5. Kontroll ar c'hevreadennoù .....	106
9.6. Takadoù rouedad .....	108
9.6.1. Ouzhpennañ takadoù .....	110
<b>10. Enepstrob .....</b>	<b>112</b>
10.1. Ober anaoudegezh gant an enepstrob .....	112
10.1.1. Siloù enepstrob .....	112
10.1.2. Mont en-dro an enepstrob .....	114
10.2. Stad an Enepstrob .....	116
10.2.1. Tennad 1 diwar 2 - Lakaat al live gouzañvusted .....	118
10.2.2. Tennad 2 diwar 2 - Leuniañ ar roll chomlec'hioù .....	119
10.3. Arventennoù an Enepstrob .....	123
10.3.1. Arventennoù an Enepstrob .....	124
10.3.2. Siloù enepstrob diazez .....	125
10.3.3. Siloù enepstrob araokaet .....	125
10.4. En em lakaat en arvalien postelerezh .....	126
10.4.1. Barrenn ostilhoù Enepstrob .....	126
10.4.2. Skoazeller kefluniañ an Enepstrob .....	134
<b>11. Kontroll Buhez Prevez .....</b>	<b>140</b>
11.1. Statud Kontroll Buhez Prevez .....	140
11.1.1. Kontroll Buhez Prevez .....	141
11.1.2. Gwareziñ enepesketa .....	142
11.2. Kontroll Identelezh – Arventennoù araokaet .....	143
11.2.1. Krouiñ reolennoù Identelezh .....	144
11.2.2. Termeniñ an nemedennoù .....	147
11.2.3. Merañ reolennoù .....	148
11.3. Kontroll an diaz marilhoù – Arventennoù araokaet .....	149
11.4. Kontroll an toupinoù – Arventennoù araokaet .....	151
11.4.1. Skoazeller kefluniañ .....	153
11.5. Kontroll ar skriptoù – Arventennoù araokaet .....	155
11.5.1. Skoazeller kefluniañ .....	157
11.6. Titouroù rouedad .....	158
11.7. Barrenn ostilhoù enepesketa .....	159
<b>12. Kontroll ar Gerent .....</b>	<b>161</b>
12.1. Gwareziñ arventennoù Kontroll ar Gerent .....	161
12.2. Stad Kontroll ar Gerent .....	162
12.2.1. Diuzañ kontrolloù gwarez .....	163
12.2.2. Kefluniañ ar sil Kenrouedad heuristik .....	164

12.3. Kontroll Web .....	165
12.3.1. Skoazeller kefluniañ .....	166
12.3.2. Diferañ nemedennoù .....	167
12.3.3. Roll du Web BitDefender .....	168
12.4. Kontroll an Arloadoù .....	168
12.4.1. Skoazeller kefluniañ .....	169
12.5. Silañ gerioù-alc'hwez .....	169
12.5.1. Skoazeller kefluniañ .....	170
12.6. Kontroll an taluadoù Web .....	172
<b>13. Hizivaat .....</b>	<b>174</b>
13.1. Hizivaat emgefreak .....	175
13.1.1. Goulennoù hizivaat .....	176
13.1.2. O tiweredekaat an hizivaat emgefreak .....	176
13.2. Kefluniañ an hizivadurioù .....	177
13.2.1. Kefluniañ al lec'hioù hizivaat .....	178
13.2.2. Kefluniañ an hizivaat emgefreak .....	178
13.2.3. Kefluniañ an hizivaat gant an dorn .....	179
13.2.4. Kefluniañ an arventennoù araokaet .....	179
13.2.5. Merañ ar servijerioù proksi .....	180
<b>CD Sikour BitDefender .....</b>	<b>183</b>
<b>14. Gwel a-vras .....</b>	<b>184</b>
14.1. Kefluniadur rekis .....	184
14.2. Meziantoù endalc'het .....	185
<b>15. Penaos implijout CD sikour BitDefender .....</b>	<b>188</b>
15.1. Loc'hañ CD sikour BitDefender .....	188
15.2. Herzel CD sikour BitDefender .....	189
15.3. Penaos ober un dielfennadur enepviruz ? .....	190
15.4. Penaos hizivaat BitDefender war-bouez ur proksi ? .....	191
15.5. Penaos enrollañ ma roadennoù ? .....	192
<b>Goulenn skoazell .....</b>	<b>194</b>
<b>16. Skoazell deknikel .....</b>	<b>195</b>
16.1. Diaz anaoudegezh BitDefender .....	195
16.2. Goulenn skoazell .....	196
16.2.1. Mont d'al lec'hienn Web "Emservij" .....	196
16.2.2. Ober ur goulenn skoazell .....	196
16.3. Titouroù daremprediñ .....	197
16.3.1. Chomlec'hioù Web .....	197
16.3.2. Burevioù BitDefender .....	197
<b>Geriaoueg .....</b>	<b>200</b>

## Aotre-implijout ha gwarant

Ma ne asantit ket an termenou nag ar penndivizoù, na stailhit ket ar produ-mañ. En ur zibab "Asantiñ a ran", "Mat eo", "Kenderc'hel", "Ya" pe en ur staliañ pe en ur implijout ar produ e doare pe zoare, e roit da c'houzout e komprenit ervat hag ez asantit termenou ha penndivizoù an aotre-implijout-mañ.

Gant termenou an aotre-implijout-mañ e roer aotre deoc'h da implijout Disoc'hoù ha Servij BitDefender en un doare personel, a-gevret gant an teulioù a denn d'ar produioù, an hizivadurioù, al liveoù arloañ pe ar servijoù a vez kinniget gant an aotre-implijout, hag ivez an holl eiladurioù eus an elfennoù-se.

An emglev aotre-implijout zo un emglev etrezoc'h (hinienn pe implijer dibenn) ha BITDEFENDER evit implijout ar produ BITDEFENDER anavezet aze a-us, zo ennañ ar meziant hag a c'hall bezañ ennañ an elfennoù media, an dafar moulet hag an teulioù "enlinenn" pe elektronek ("BitDefender"). Gwarezet e vezont holl gant lezennoù Frañs hag ivez gant al lezennoù hag ar feurioù-emglev etrebroadel. En ur staliañ, eilañ pe en ur implijout ar meziant BitDefender e doare pe zoare ez asantit da dermenou an emglev-mañ.

Ma ne asantit ket da dermenou an aotre-implijout-mañ, na stailhit ket pe na implijit ket BitDefender.

**Aotre-implijout BitDefender.** Gwarezet eo BitDefender gant lezennoù ar c'hopyright ha gant ar feurioù-emglev a denn d'ar c'hopyright, hag ivez gant al lezennoù hag ar feurioù-emglev a denn d'ar berc'henniezh kefredel. BitDefender a vez aotret an implij anezhañ ha ne vez ket gwerzhet.

**GWIRIOÙ AOTRE-IMPLIJOUT.** BITDEFENDER a chom perc'henn war ar meziant-mañ. Gwirioù implijout zo hoc'h eus, koulskoude, n'int ket deoc'h-c'hwi hepken ha ne c'hallit ket treuzkas anezho d'unan all, ur wezh asantet d'an emglev aotre. Ho kwirioù hag ho tleadoù a denn da implij ar meziant-mañ zo :

**MEZIAN.** Gallout a rit staliañ hag implijout BitDefender war gement a urzhiataerioù ha mar bez ezhomm diouzh niver termenet an implijerien o deus un aotre. Gallout a rit ober un eilenn savete.

**EMGLEV AOTRE EVIT URZHIATAER.** Lakaet eo an aotre-mañ da dalvezout evit ar meziant BitDefender a c'haller staliañ war un urzhiataer hepken na vez ket implijet en ur rouedad. Gallout a ra pep implijer pennañ ober gant ar meziant-mañ war un urzhiataer hepken ha gallout a ra ober un eilenn savete. Klotañ a ra niver an implijerien bennañ gant niver an implijerien zo termenet en emglev aotre.

PAD AN AOTRE. Kregiñ a ray an aotre zo bet roet amañ a-us pa stalio, eilot pe implijout BidDefender mod pe vod evit ar wezh kentañ hag echuiñ a ray e dibenn prantad an aotre hoc'h eus akuitizet.

TERMEN KLOZAÑ. Paouez a ray ar produ da vont en-dro kerkent ha ma vo klozet termen an aotre.

HIZIVADENNOÛ. Ma aoz BitDefender un hizivadenn e rankit bezañ aotreet mat a-benn implijout ar produ anavezet gant BITDEFENDER evel bezañ degemerus evit hizivaat, evit implijout BitDefender. Ur produ BitDefender zo anezhañ un hizivadenn zo lakaet e-lec'h ar produ a ro gwir deoc'h da hizivaat ho meziant. Ne c'hallit implijout ar produ-se nemet m'hoc'h eus asantet da dermenoù an emglev aotre-se. Ma'z eo BitDefender hizivadenn parzh ur prestiant hoc'h eus prenet evel ur produ hepken e c'haller implijout ha treuzkas BitDefender evel ul lodenn eus ar prestiant-se ha ne c'haller ket rannañ anezhañ war meur a urzhiataer. Gant termenoù ha penndivizoù an aotre-se e vez nullet hag e vez erlerc'hiet an emglev a c'hallfe bezañ bet skoulmet a-raok etrezoc'h ha BITDEFENDER hag a denn d'ur produ klok pe d'ur produ hizivaat.

COPYRIGHT. Holl wirioù oberour BitDefender (zo enno met n'int ket bevennet dezho an holl skeudennoù, luc'hskeudennoù, logoioù, fiñvskeudennoù, restroù video, restroù klevet, sonerezh, testenn ha "programmigoù" ), an dafar moulet a vez pourchaset gant BitDefender hag an eilennoù eus BitDefender zo perc'hennet gant BITDEFENDER. Gwarezet eo BitDefender gant al lezennoù copyright hag ar feurioù-emglev etrebroadel. Setu perak e rankit ober ouzh BitDefender evel ar produioù zo gwarezet gant copyright. Ne c'hallit staliañ BitDefender nemet war un urzhiataer, o vezañ ma virit ar stumm orin anezhañ evit diellaouiñ hepken. Ne c'hallit ket eilañ an teulioù moulet a vez pourchaset gant BitDefender. Rankout a rit produiñ ha lakaat e-barzh an holl notennigoù copyright en o stumm orin evit an holl eilennoù a genglot gant ar media pe gant ar stumm zo BitDefender anezhañ. Ne c'hallit ket reiñ an aotre-implijout, feurmiñ mod pe vod ar meziant BitDefender en e bezh pe ul lodenn anezhañ. Ne c'hallit ket kempunañ, distrollañ, argemmañ, treiñ pe klask kavout kod tarzh ar meziant-mañ pe krouiñ binvioù deveret eus BitDefender.

GWARANT BEVENNET. Gwarantiñ a ra BITDEFENDER n'eus tamm dafar siek ebet ha n'eus si aozañ ebet war ar skor a dalvez da zaspazhañ ar meziant e-pad tregont (30) deiz adalek deiziad degas ar meziant. An dra nemetañ a c'hallo BITDEFENDER ober ma'z eus ur mankad d'ar gwarant-mañ eo erlerc'hiañ ar skor fazius e-pad an tregont (30) deiz adalek deiziad degas ar meiziant. Ne warrant ket BITDEFENDER e vasto ar meziant d'hoc'h ezhommoù hag ez aio en-dro hep ehan pe hep fazi. NAC'HAÑ A RA BITDEFENDER AN HOLL WARANTOÛ ALL EVIT BIFDEFENDER, HA PA VEFENT EMPLEG PE EZPLEG. AR GWARANT AMAÑ A-US ZO DISPELLAUS HAG ERLERC'HIAÑ A RA AN HOLL WARANTOÛ, HA PA VEFENT EMPLEG PE EZPLEG, GWARANTOÛ KENWERZHELAAT HAG ARLOAÑ DIBAR E-BARZH.

War-bouez termenoù an emglev aotre-mañ, BITDEFENDER a nac'h an holl warantoù all, ha pa vefent empleg pe ezeleg, a denn d'ar produ, d'e welladennoù, d'e drezalch'h, pe d'e skor kerkoulz ha d'an dafar (fetis pe difetis) pe d'ar servij pourchaset gantañ. Nac'h a ra BITDEFENDER en un doare empleg an holl warantoù pe amlegadoù zo enno, hep bevonn, ar gwarantoù liammet ouzh ar c'henwerzhelaat, an azasaat ouzh un implij dibar, an nann diarbennadur, resisaat ar roadennoù, resisaat an endalc'hoù titouroù, an enframmani reizhiad, ha chom hep gwallañ gwirioù an trede en ur silañ, diweredeakaat pe dilemel ur meziant, spiant, meziantoù bruderezh, toupinoù, posteloù, teulioù, ur bomm bruderezh pe ur produ all a seurt-se, evel un trede lodenn, ne vern petra e vefe ar mod da implijout anezho.

**NAC'H AN DIC'HAOUIOÙ.** An holl dud a implij BitDefender, a ra taolioù-arnod gantañ pe a briz anezhañ, a asant e c'hall o dafar bezañ lakaet en arvar evit a sell kalite hag efedusted BitDefender. E mod ebet ne sammo BITDEFENDER ar giriegezh eus se ma c'hoarvez tra pe dra ganeoc'h en un doare eeun pe dieeun pe ma savit klemm ma teu kudennoù diwar implij anezhañ pe ma ne c'hallit ket mui implijout ar meziant ha pa vefe kemennet dic'haouiou da vBITDEFENDER. **NE RO KET STADOÙ ZO AN AOTRE DA VEVENNIÑ PE DA EZLAKAAT AR GIRIEGEZH MAR BEZ GAOUIOU. NE SELL KET AR REOLENN AMAÑ A-US OUZH AR BEVENNOÙ PE OUZH AN EZLAKADENNOÙ OUZHOC'H - NE VERN PETRA E VEFE AMLEGADOÙ AR GIRIEGEZH N'EN DO KET BITDEFENDER DA BAEÑ DEOC'H UR SAMMAD UHELOC'H EGET AR SAMMAD HOC'H EUS PAEET EVIT KAOUT BITDEFENDER.** Lakaet e vo ar bevennadurioù enskrivet amañ a-us da dalvezout ma'z asantit pe ma ne asantit ket da implijout, priziañ pe arnodiñ BitDefender.

**NOTENNIG A BOUEZ EVIT AN HOLL IMPLIJERIEN.** N'EO KET BET KROUET AR MEZIAN-MAÑ EVIT MONT EN-DRO E METEIER DAÑJERUS, A C'HOULENN SEVENIÑ OBERIADENNOÙ HEP FAOT HA BEZAÑ PEUREFEDUS. N'EO KET ERBEDET OBER GANT AR MEZIAN-MAÑ EVIT SEVENIÑ OBERIADENNOÙ A DENN DA VERDEIÑ AN NIJEREZIOÙ, ER STALIADURIOÙ NUKLEEL PE ER REIZHIADOÙ KEHENTIÑ, REIZHIADOÙ AN ARMOÙ, AR REIZHIADOÙ A WAREZ AR SKOR RET EN UN DOARE EEUN PE DIEEUN, KONTROLLAÑ TREMEN AN AERLINENNOÙ, NE VERN PE ARLOAD, STALIADUR PE FALLAENN ALL A C'HALLFE LAKAAT BUHEZ TUD ALL EN ARVAR, GLOAZAÑ FALL ANEZHO PE GWALLAÑ AR BERC'HENNIEZH.

**PENNDIVIZOÙ.** Renet eo an emglev-mañ gant lezennoù Roumania ha gant ar reoladurioù hag ar feurioù-emglev etrebroadel evit a sell ouzh ar c'hopyright. N'eus nemet lez-varn Roumania a vo ar varnadurezh kembeliek ma ne saver ket a-du gant an aotre-emglev-mañ.

Ar prizioù, ar c'houstoù hag ar mizoù evit implijout BitDefender a c'haller kemmani hep na vefe kemennet deoc'h en a-raok.

Ma c'hoarvezfe gant an holl reoladurioù eus an emglev-mañ bezañ direizh-holl e chomo reizh ar peurrest eus an emglev-mañ.

BitDefender ha logo BitDefender zo merkoù marilhet gant BITDEFENDER. An holl verkoù hag ar produioù kevredet all a aparchant d'o ferc'henned dezho.

Soetiñ a ray an aotre diouzhtu-dak hep kemenn deoc'h ma ne rit ket diouz un amplegad eus an emglev-mañ pe diouz meur a hini. Ne c'hallot ket goulenn digant BITDEFENDER pe digant e zileuridi daskoriñ arc'hant deoc'h ma vez klozet an aotre-se. An termenou hag ar penndivizoù a sell ouzh doujañs ar brevezded hag ar strishadurioù a rank bezañ dalc'het war-lerc'h fin ar gevrat zoken.

BITDEFENDER a c'hall adwelet termenou an aotre-mañ ma sav c'hoant dezhañ. Arloet emgefreak e vo ar re-se d'ar produioù dasparzhet zo enno an termenou kemmet. Ma c'hoarvez gant ul lodenn eus an emglev-mañ bezañ direizh e chomo reizh ar peurrest eus an emglev-mañ.

BITDEFENDER a c'hall adwelet termenou an aotre-mañ ma sav c'hoant dezhañ. Arloet emgefreak e vo ar re-se d'ar produioù dasparzhet zo enno an termenou kemmet. Ma c'hoarvezfe gant ul lodenn eus an emglev-mañ bezañ direizh e chomo reizh ar peurrest eus an emglev-mañ.

Darempred BITDEFENDER : [office@bitdefender.com](mailto:office@bitdefender.com).

# Rakskrid

An dornlevr-mañ zo evit an holl implijerien o deus dibabet **BitDefender Internet Security 2008** da ziskoulm surentez evit o urzhiataer personel. An titouroù el levrig-mañ zo mat, ken evit an implijerien arroutet mat war an urzhiataerezh, ken evit an neb a oar ober gant Windows.

An dornlevr-mañ a zeskrivo evidoc'h **BitDefender Internet Security 2008**, ar gompagnunezh hag ar skipailh o deus e savet. Heñchet e viot a-hed an argerzh staliañ, ha desket e vo deoc'h penaos e gefluniañ. Deskiñ a reot penaos implijout **BitDefender Internet Security 2008**, penaos e hizivaat, e amprouiñ hag e bersonelaat. Evel-se e ouezot tennañ ho mad eus BitDefender.

Hetiñ a reomp deoc'h deskiñ gant plijadur implijout Bidefender eus ar gwellañ.

## 1. Kendivizadoù implijet en dornlevr-mañ.

### 1.1. Reoladoù tipografek

Meur a stil testenn a vez implijet en dornlevr-mañ evit aesaat al lenn. Kinnig a reomp deoc'h doare ar stiloù-mañ hag o zalvoudegezh er roll amañ dindan.

<i>Tres</i>	<i>Deskrivadur</i>
<code>sample syntax</code>	Ar skouerioù hag un nebeud roadennoù niverel a vez moulet gant un esaouenn etre an arouezennoù.
<a href="http://www.bitdefender.com">http://www.bitdefender.com</a>	Al liamm URL a boent war-du ul lec'hiadur diavaez evel ur servijer http pe ftp
<a href="mailto:support@bitdefender.com">support@bitdefender.com</a>	Ar chomlec'hioù postel a vez enlakaet en destenn evit gouzout hiroc'h diwar-benn an darempredoù.
“Rakskrid” (p. xii)	Gant ul liamm diabarzh a gas war-du ul lec'hiadur bennak en teul emac'h.
<code>filename</code>	Ar restroù hag ar c'havlec'hioù a vez moulet gant un esaouenn etre an arouezennoù.
<b>option</b>	An holl ditouroù war ar produ a vez moulet en ur implijout arouezennoù <b>strong</b> characters.

Tres	Deskrivadur
sample code listing	An testennoù meneget a vez roet evel daveennoù.

## 1.2. Gouzavadennoù

Ar gouzavadennoù zo anezho notennoù testennoù merket en un doare grafek. Talvezout a reont da sachañ hoc'h evezh war an titouroù ouzhpenn a denn d'ar rannbennad-mañ.



### Notenn

Un evezhiadenn verr eo an notenn. Daoust ma c'hallit chom hep lenn an notennoù e tegasont titouroù a c'hall talvezout deoc'h, evel an arc'hwelioù dibar pe ul liamm a boent war-du un dodenn nes.



### Pouezus

Taolit evezh ouzh an arlun-mañ. Ne erbedomp ket deoc'h chomp hep ober gantañ. Peurliesañ ne zegas ket titouroù diarvarus, titouroù a bouez ne lavaromp ket.



### Diwall

Un evezhiadenn a bouez eo a rankit lenn gant evezh. Ne c'hoarvezo netra fall ma heuilhit ar pezh a vez skrivet. Lennit pizh rak deskrivañ a ra un oberiadur a c'hall bezañ gwall arvarus.

## 2. Framm an dornlevr

Meur a lodenn gant an dodennoù pennañ a ya d'ober an dornlevr. Ouzhpenn da se ez eus lakaet ur c'heriaoueg ennañ evit displegañ un nebeud termenoù teknikel.

**Staliadur.** Displegadennoù kammed-ha-kammed evit staliañ BitDefender war ur post-labour. Un tutorial sklaer diwar-benn ar staliañ hag ar c'hefluniañ **BitDefender Internet Security 2008**. Kregiñ a ra gant an amplegadoù d'ur staliadur deuet da benn vat. Heñchet e vlot a-hed an argerzh staliañ hag e-pad an dalc'h kentañ. Er fin e teskriver an argerzhad distaliañ betek-gouzout ho pefe ezhomm da zistaliañ BitDefender.

**Merañ diazez.** Deskrivadur merañ ha trezerc'hel diazez BitDefender.

**Merañ araokaet eus ar surentez.** Kinnig dre ar munud eus an arc'hwelioù surentez a vez pourchaset gant BitDefender. Er pajennoù-mañ e teskrivomp an holl zibaboù eus letrun an arventennoù araokaet dre ar munud. Deskiñ a reot penaos kefluniañ hag

implijout holl vodulennoù BitDefender a-benn gwareziñ hoc'h urzhiataer gant efedusted enep an holl seurtoù gourdrouzioù (drougiant, strob, preizherien, endalc'hadoù dizereat, ha kement zo...).

**CD Sikour BitDefender.** Deskrivadur ar CD sikour evit BitDefender. Mod implij evit kompren penaos implijout ar CD loc'hañ sikour.

**Goulenn skoazell.** Pelec'h sellet ha digant piv goulenn skoazell ma teu un dra dic'hortoz war wel.

**Geriaoueg.** Gant ar c'heriaoueg e klasker displegañ an termennoù teknikel hag an termennoù rouez a gavot en teul-mañ.

### 3. Displegadennoù

Pediñ a reomp ac'hanoc'h da skoazellañ ac'hanomp da wellaat al levrig-mañ. Graet hon eus taolioù-arnod ha gwiriet hon eus an holl ditouroù. Arc'hwelioù avat a c'hall bet kemmet ganimp. Na dermit ket, skrivit dimp evit lavaret dimp hoc'h eus kavet fazioù el levrig pe ar gwellaennoù a c'hallfemp degas. Evel-se e c'hallimp pourchas deoc'h teulioù gwelloc'h-gwellañ.

Lakait ac'hanomp da c'houzout en ur gas hoc'h evezhiadennoù dimp d'ar chomlec'h [documentation@bitdefender.com](mailto:documentation@bitdefender.com).



#### **Pouezus**

Skrivit ho posteloù a denn d'al levrig e saozneg evit ma c'hallimp ober war-dro hoc'h evezhiadennoù an efedusañ ar gwellañ.

# Staliadur

# Rann 1. Staliañ BitDefender Internet Security 2008

Er rann **Staliañ BitDefender Internet Security 2008** eus an dornlevr-mañ emañ ar rubrikennoù-mañ :

- Kefluniañ reizhiad
- Pazennoù staliañ
- Skoazell evit loc'hañ ar wezh kentañ
- Hizivaat
- Dresañ pe dilemel BitDefender

## 1.1. Kefluniadur rekis

Evit ma yelo mat ar produ en-dro, gwirit e ya en-dro unan ar reizhiadoù korvoiñ-mañ war hoc'h urzhiataer hag eo bet kefluniet mat hoc'h urzhiataer a-raok staliañ ar produ-mañ warnañ.

- **Plateforme** - Windows 2000/XP SP2 2b & 64bit/Vista 2b & 64bit; Internet Explorer 6.0 (pe uheloc'h)
- Arvalien postelerezh sammet : Microsoft Outlook 2000 / 2003 / 2007 ; Microsoft Outlook Express ; Microsoft Windows Mail ; Thunderbird 1.5 ha 2.0

### Windows 2000

- Prosesor 800 MHz pe uheloc'h
- Memor izek : 256Mo RAM (512Mo erbedet)
- 60Mo a lec'h a c'haller kaout da nebeutañ war ar bladenn.

### Windows XP

- Prosesor 800 MHz pe uheloc'h
- Memor izek : 512Mo RAM (1 Go erbedet)
- 60Mo a lec'h a c'haller kaout da nebeutañ war ar bladenn.

### Windows Vista

- Prosesor 800 MHz pe uheloc'h


- Memor izek : 512Mo RAM (1 Go erbedet)
- 60Mo a lec'h a c'haller kaout da nebeutañ war ar bladenn.

BitDefender Internet Security 2008 a c'hall bezañ pellgarget ur stumm priziañ anezhañ diwar al lec'hienn <http://www.bitdefender.fr>.

## 1.2. Pazennoù staliañ

Lec'hiit ar restr staliañ ha daouglikit warni evit loc'hañ ar skoazeller staliañ, a heñcho ac'hanoc'h evit staliañ ar meziat.

A-raok loc'hañ ar skoazeller kefluniañ e klask BitDefender stummoù nevez ar programm staliañ. Ma c'haller kaout ur stumm nevez anezhañ oc'h pedet da bellgargañ anezhañ. Klikit war **Oui** evit pellgargañ ar stumm nevez pe war **Non** evit kenderc'hel da staliañ ar stumm a c'haller kaout er rest staliañ.



Sifr 1.1. Pazennoù staliañ

Grit diouzh an tennadoù-mañ da staliañ BitDefender Internet Security 2008 :

1. Klikit war **War-lerc'h** evit kenderc'hel pe war **Nullañ** m'hoc'h eus c'hoant da guitaat ar staliadur.
2. Klikit war **War-lerc'h**.

BitDefender Internet Security 2008 a ro da c'houzout deoc'h hag-eñ ez eus produioù enepviruz all staliet war hoc'h urzhiataer. Klikit war **Dilemel** evit distaliañ ar produ a glot. M'hoc'h eus c'hoant da genderc'hel hep dilemel ar produ dinoet, klikit war **War-lerc'h**.



#### **Diwall**

Erbediñ a reer deoc'h groñs distaliañ an enepviruzoù all a-raok staliañ BitDefender. Peurliesañ ne c'haller ket mui implijout un urzhiataer ma lakaer meur a enepviruz da vont en-dro warnañ.

3. Lennit an Emglev Aotre-implijout, mar plij, dibabit **Asantiñ a ran da dermenoù an Emglev Aotre-implijout** ha klikit war **War-lerc'h**. Ma ne asantit ket d'an divizoù-se, klikit war **Nullañ** . Dilezet e vo ar staliadur ha mont a reot kuit eus ar staliadur.
4. Dre ziouer e vez staliet BitDefender Internet Security 2008 er c'havlec'h-mañ : C:\Program Files\BitDefender\BitDefender 2008. M'hoc'h eus c'hoant da zibab ur c'havlec'h all, klikit war **Furchal** ha diuzit ar c'havlec'h m'hoc'h eus c'hoant da staliañ BitDefender Internet Security 2008.

Klikit war **War-lerc'h**.

5. Diuzit dibarzhioù an argerzh staliañ. Dibarzhioù zo a c'hall bezañ diuzet dre ziouer.
  - **Digeriñ ar restr lennit-me** - evit digeriñ ar restr lennit-me e fin ar staliadur.
  - **Krouiñ ur verradenn war ar burev** - evit lakaat ur verradenn war ar burev e fin ar staliadur.
  - **Disteuler ar CD goude ar staliadur** - evit disteuler ar CD e fin e staliadur e teu an dibarzh-se war wel da vare staliadur ar produ.
  - **Diweredekaat maltouter Windows** - evit diweredekaat maltouter Windows.



#### **Pouezus**

Erbediñ a reomp deoc'h diweredekaat maltouter Windows, rak gant BitDefender Internet Security 2008 ez eus ur maltouter araokaet dija. Kudennoù a c'hall sevel pa vez daou valtouter o treiñ war un dro war ar memes urzhiataer.

- **Diweredekaat Windows Defender** - evit diweredekaat Windows Defender ; Gant Windows Vista hepken e c'haller kaout an dibarzh-se.

Klikit war **Staliañ** evit kregiñ da staliañ ar produ.



### **Pouezus**

E-pad an argerzhad staliañ e teuy ur **skoazeller** war wel. Ar skoazeller ho sikouro da varilhañ **BitDefender Internet Security 2008**, da grouiñ ur gont BitDefender ha da arventennañ BitDefender, dezhañ da seveniñ an trevelloù surentez pouezusañ. Klokaat ar skoazeller staliañ evit mont d'an tennad amañ da heul.

6. Klikit war **Echuiñ**. Moarvat e vo goulennet diganeoc'h adloc'hañ ho reizhiad evit echuiñ an argerzh staliañ. Erbediñ a reer deoc'h ober kement-mañ an abretañ ar gwellañ.


Klikit war **Echuiñ** evit klokaat staliadur ar produ. M'hoc'h eus asantet d'an arventennoù dre ziouer evit ar c'havlec'h staliañ e vo krouet ur c'havlec'h nevez zo anvet `BitDefender` krouet e `Program Files`. An iskavlec'h `BitDefender 2008` a vo er c'havlec'h-se.

## **1.3. Skoazeller staliadur kentañ**

E-pad an argerzhad staliañ e teuy ur skoazeller war wel. Ar skoazeller ho sikouro da varilhañ **BitDefender Internet Security 2008**, da grouiñ ur gont BitDefender ha da arventennañ BitDefender, dezhañ da seveniñ an trevelloù surentez pouezusañ.

N'eo ket ret seveniñ ar skoazeller-mañ. Koulskoude ez erbedomp deoc'h ober evit gounit amzer hag en em asuriñ eo yac'h ho reizhiad a-raok staliañ BitDefender Internet Security 2008.

## 1.3.1. Tennad 1 diwar 6 - Marilhañ BitDefender Internet Security 2008



### Sifr 1.2. Marilhañ ar produ

Dibabit **Marilhañ ar produ** da varilhañ **BitDefender Internet Security 2008**. Skriverezit alc'hwez an aotre-implijout ar vaezienn **Ebarzhiñ un alc'hwez nevez**.

Evit kenderc'hel da briziañ ar produ, diuzit **Kenderc'hel da briziañ ar produ**.

Klikit war **War-lerc'h**.

## 1.3.2. Tennad 2 diwar 6 – Krouiñ ur gont BitDefender

Sifr 1.3. Krouiñ ur gont

## Ne'm eus kont BitDefender ebet

Evit tennañ gounit eus ar skor teknikel digoust hag eus servijoù all ez eo ret krouiñ ur gont BitDefender.



### Notenn

M'hoc'h eus c'hoant da grouiñ ur gont diwezhatoc'h, diuzit an dibarzh a glot.

To create a BitDefender account, select **Create a new BitDefender account** and provide the required information. Chom a raio kuzh an titouroù a vo ebarzhet ganeoc'h amañ.

- **E-mail** - type in your e-mail address.
- **Password** - type in a password for your BitDefender account.



**Notenn**

The password must be at least four characters long.

- **Re-type password** - type in again the previously specified password.
- **First name** - type in your first name.
- **Last name** - type in your last name.
- **Country** - select the country you reside in.



**Notenn**

Use the provided e-mail address and password to log in to your account at <http://myaccount.bitdefender.com>.

Evit krouiñ ho kont e rankit da gentañ gweredekaat ho chomlec'h postel. Gwirit ho chomlec'h postel ha heuilhit ar c'hemennadoù degemeret er postel zo bet kaset deoc'h gant ar servij marilhañ BidDefender.

Click **Next** to continue.

## **Ur gont BitDefender am eus dija.**

BitDefender will automatically detect if you have previously registered a BitDefender account on your computer. In this case, all you have to do is to click **Next**.

If you already have an active account, but BitDefender does not detect it, select **Sign in to an existing BitDefender Account** and provide the e-mail address and the password of your account.




**Notenn**

M'hoc'h eus roet ur ger-tremen direizh e vo goulennet diganeoc'h ebarzhiñ anezhañ en-dro pa glikot war **War-lerc'h**. Klikit war **War-lerc'h** evit kenderc'hel pe war **Nullañ** evit kuitaat ar skoazeller.

Ma n'hoc'h eus ket c'hoant d'ober kemmoù, klikit war **Echuiñ** evit serriñ ar skoazeller.

Click **Next** to continue.


### 1.3.3. Tennad 3 diwar 6 – Gouzout hiroc'h war an RTVR (danevell viruzoù war amzer real)



#### Sifr 1.4. Titouroù war an RTVR

Klikit war **War-lerc'h** evit kenderc'hel pe war **Nullañ** evit kuitaat ar skoazeller.

## 1.3.4. Tennad 4 diwar 6 – Diuzit an trevelloù da seveniñ



Sifr 1.5. Diuzañ an trevelloù

Arventennit BitDefender Internet Security 2008 da loc'hañ trevelloù surentez pouezus evit hoc'h urzhiataer.

An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

- **Hizivaat ar c'hefluskerioù BitDefender (moarvat e vo ret adloc'hañ)** - hizivaet e vo kefluskerioù BitDefender en tennad a zeu evit gwareziñ hoc'h urzhiataer a-enep ar riskloù diwezhañ.
- **Lañsañ un dielfennadur prim (moarvat e vo ret adloc'hañ)** - Un dielfennadur prim a vo lañset e-pad an tennad a zeu. Gwiriañ a raio BitDefender, evit gwir, n'eus viruz ebet er restroù zo er renkell Windows and Program Files.
- **Lañsañ un dielfennadur klok eus an urzhiataer bemdez da 02e00-** Lañsañ un dielfennadur klok eus ar reizhiad bemdez da 02e00.




### **Pouezus**

Erbediñ a reer deoc'h groñs gweredekaat an dibarzhioù a-raok tremen d'an tennad a zeu evit gwiriañ surentez ho reizhiad.

Ma tiuzit an dibarzh diwezhañ hepken pe dibarzh ebet e vo lamet an tennad a zeu. Klikit war **War-lerc'h** evit kenderc'hel pe war **Nullañ** evit kuitaat ar skoazeller.

### 1.3.5. Tennad 5 diwar 6 - Gortozit fin an trevell




Sifr 1.6. Stad araokaat an trevell

Gortozit fin an trevell(où). Gallout a reot gwiriañ amañ pegen araokaet eo an trevell hoc'h eus diuzet en tennad a-raok.

Klikit war **War-lerc'h** evit kenderc'hel pe war **Nullañ** evit kuitaat ar skoazeller.

## 1.3.6. Tennad 6 diwar 6 – Sellet ouzh an diverradenn



### Sifr 1.7. Echuiñ

Tennad dibenn ar skoazeller kefluniañ eo.

Klikit war **Echuiñ** evit echuiñ ar skoazeller ha kenderc'hel da staliañ ar produ.

## 1.4. Hizivadur pennañ

Gallout a reer lañsañ an hizivadur pennañ en doare-mañ :

- **Staliañ hep distaliañ ar stummoù a-raok – evit BitDefender v8 pe ar stummoù nevesoc'h, nemet Internet Security**

Daouglidikit war ar restr staliañ ha heuilhit ar skoazeller deskrivet er rann "*Pazennoù staliañ*" (p. 3).



### **Pouezus**

Pa vo staliet ar meziante teuo war wel ur c'hemennad fazi abalamour da *Filespy service*. Klikit war evit kenderc'hel gant ar staliadur.

- **Distailhit ho stumm kozh ha stailhit an hini nevez – evit an holl stummoù BitDefender**

Rankout a rit da gentañ distaliañ ar stumm a-raok, da c'houde adloc'hañ an urzhiataer ha staliañ ar stumm nevez evel ma'z eo deskrivet er rubrikenn “*Pazennou staliañ*” (p. 3).



#### **Pouezus**

Ma hizivait BitDefender v8 pe uheloc'h ez erbedomp deoc'h enrollañ an arventennoù BitDefender, Roll ar Vignoned ha Roll ar Spamerien. Ur wezh hizivaet e c'hallot kargañ anezho.

## 1.5. Dresañ pe dilemel BitDefender

M'hoc'h eus c'hoant da zresañ pe da lemel **BitDefender Internet Security 2008**, kit gant an hent-mañ adalek lañser Loc'hañ Windows : **Loc'hañ** → **Programmoù** → **BitDefender 2008** → **Dresañ pe lemel**.

Goulennet e vo diganeoc'h kadarnaat ho tibab en ur glikañ war **War-lerc'h**. Ur prenestr nevez a zeuio war wel hag ennañ e c'hallot dibab :

- **Dresañ** - evit adstaliañ an holl barzhioù hoc'h eus dibabet da-geñver ar staliadur a-raok.



#### **Pouezus**

A-raok dresañ ar produ ez erbedomp deoc'h enrollañ Roll ar Vignoned ha Roll ar Stroberien. Gallout a rit ivez enrollañ an arventennoù BitDefender hag an diaz titouroù bayesian Ur wezh peurdreset ar produ e c'hallit pellgargañ anezho en-dro.

Ma tibabit dresañ BitDefender e teuio ur prenestr nevez war wel. Klikit war **Dresañ** evit reiñ lañs d'an argerzhadur.

Adloc'hit an urzhiataer pa vo goulennet diganeoc'h, ha goude-se klikit war **Staliañ** da adstaliañ BitDefender Internet Security 2008.

Ur wezh peurstaliet ar meziant e teu ur prenestr nevez war wel. Klikit war **Echuiñ**.

- **Remove** - evit dilemel an holl barzhioù staliet.



#### **Notenn**

Erbediñ a reomp deoc'h dibab **Dilemel** evit ma vo yac'h an adstaliadur.

Ma tivizit dilemel BitDefender e teuy ur prenestr nevez war wel.



### **Pouezus**

Ma lamit BitDefender, ne vo ket gwarezet hoc'h urzhiataer ken diouzh ar viruzoù, ar spiantoù hag ar breizherien. M'hoc'h eus c'hoant da weredekaat ar Maltouter ha Windows Defender (war Windows Vista hepken) goude distaliañ BitDefender, askit al logoù a glot ganto.

Klikit war **Leemel** da zistaliañ BitDefender Internet Security 2008 diwar hoc'h urzhiataer.

Pa vo distaliet BitDefender e vo goulennet hoc'h ali ouzhoc'h. Klikit war **Mat eo** evit respont d'un enklask enlinenn. 5 goulenn berr a ya d'e ober hepken. Ma n'hoc'h eus ket c'hoant da respont d'an enklask-se, klikit war-eeun war**Nullañ**.

Ur wezh distaliet BitDefender e teu ur prenestr war wel. Klikit war **Echuiñ**.



### **Notenn**

Ur wezh distaliet BitDefender ez erbedomp deoc'h dilemel an iskavlec'h BitDefender eus ar c'havlec'h Restroù programm.


## ***Ur fazi zo bet pa'z eo bet distaliet BitDefender***

Ma'z eus ur fazi pa zistalier BitDefender eo dilezet an argerzhadur hag ur prenestr nevez a zeu war wel. Klikit war **Seveniñ ar benveg distaliañ** evit gwiriañ hag-eñ eo bet dilamet BitDefender penn-da-benn. Dilemel a ra ar benveg distaliañ an holl restroù, koulz hag an alc'hwezioù enrollañ n'int ket bet dilamet da vare an distaliadur emgefreak.

**Merañ diazez**

## Rann 2. Evit kregiñ

Ur wezh staliet BitDefender eo gwarezet hoc'h urzhiataer. Gallout a reot digeriñ ar greizenn surentez BitDefender ne vern pegoulz evit gwiriañ ho reizhiad, kemer diarbennoù gwarez da c'hortoz pe kefluniañ ar produ penn-da-benn..

Evit mont da Greizenn surentez BitDefender, implijit lañser Loc'hañ Windows ha heuilhit an hent-mañ : **Loc'hañ** → **Programmoù** → **BitDefender 2008** → **BitDefender Internet Security 2008** pe, evit mont buanoc'h, daouglikit war  **arlun BitDefender** e barrenn stad ar reizhiad.



### Sifr 2.1. Kreizenn surentez BitDefender

Kreizenn surentez BidDefender zo daou dakad enni :

- An takad **Statud**: zo ennañ titouroù diwar-benn kudennoù gloazusted hoc'h urzhiataer a-fet surentez ha skoazellañ ac'hanoc'h da ziskoulmañ anezho. Gallout a rit gwelet aes a-walc'h pet kudenn a laka diaes hoc'h urzhiataer. En ur glikañ war ar bouton ruz a glot **Reizhañ** e vo reizhet war-eeun ar c'hudennoù gloazusted war hoc'h urzhiataer pe heñchañ a raio ho reizhiad ac'hanoc'h evit reizhañ anezho aes

a-walc'h. A-hend-all e c'haller kaout pevar bouton stadud, a glot gant pevar live surentez. Diskouez a ra ar boutonoù gwer n'eus riskl ebet. Ar boutonoù melen pe ruz a zikouez a-getep ez eus riskloù etre pe uhel. Klikit war ar bouton melen/ruz, goude war ar bouton **Reizhañ** evit dilemel anezho unan-hag-unan pe klikit war ar bouton **Reizhañ pep tra**. Ar bouton gris a ziskouez ur parzh n'eo ket kefluniet.

- An takad **Trevelloù raktermenet** a skoazell ac'hanoc'h da virout yac'h ha da wareziñ ho reizhiad hag ho roadennoù.

Ar Greizenn BitDefender, ouzhpenn da se, zo enni berradennoù niverus ha talvoudus enni.


<i>Liamm</i>	<i>Deskrivadur</i>
<b>Prenañ</b>	a zigor ur bajenn ma c'hallit prenañ ar produ.
<b>Ma c'hont</b>	a zigor pajenn ho kont BitDefender.
<b>Enrollañ</b>	a zigor ar skoazeller enrollañ.
<b>Skoazell</b>	a zigor ar restr skoazell.
<b>Skor</b>	a zigor pajenn Web ar skor BitDefender.
<b>Arventennoù</b>	a zigor letrín an arventennoù araokaet.
<b>Roll-istor</b>	a zigor ur prenestr ennañ roll-istor ha darvoudoù BitDefender.

## 2.1. Arlun BitDefender er Varrenn stad Reizhiad

Evit merañ primoc'h ar produ penn-da-benn e c'hallit implijout an arlun BitDefender zo er Varrenn stad reizhiad.

Daouglikit war an arlun-mañ evit digeriñ ar Greizenn surentez BitDefender. Ma rit ur c'hlik dehou war an arlun-mañ e teuio al lañser kendestenn war wel ha gant-se e c'hallot merañ primoc'h ar produ BitDefender.


- **Diskwel** - a zigor ar Greizenn surentez BitDefender.
- **Skoazell** - a zigor ar restr skoazell elektronek.
- **Diwar-benn** - a zigor ar bajenn Web BitDefender.
- **Reizhiañ pep tra** a sikour ac'hanoc'h da reizhañ kudennoù gloazusted hoc'h urzhiataer a-fet surentez.
- **Gweredekaet/Diweredekaet Modulenn hizivaat** - turns **Modulenn hizivaat** Gweredekaet/Diweredekaet.



Sifr 2.2. BitDefender Icon

- **Digeriñ an arventennoù araokaet** - a c'haller mont gantañ d'al letrín arventennoù araokaet.
- **Hizivaat bremañ** - a ra un hizivador diouzhtu. Ur wezh echuet an dielfennadur e teu ur prenestr nevez war wel evit diskwel disoc'hoù an dielfennadur.
- **Kuitaat** - a serr an arload.

Whenever Game Mode is on, you can see the letter G over the  BitDefender icon.


If there are critical issues affecting the security of your system, an exclamation mark is displayed over the  BitDefender icon. You can hover the mouse over the icon to see the number of issues affecting the system's security.

## 2.2. Scan Activity Bar

**Barrenn zielefennañ an obererezh** zo anezhi un heweladur grafek eus dielfennadur obererezh ho reizhiad.

Gant **barrenn zielefennañ an obererezh** e weler ar grafik savet war-lerc'h dielfennadur obererezh ho reizhiad.

Ar barrennoù ruz diskwelet en **Takad Rouedad** a ziskouez an niver a Ko treuzkaset (kaset ha resevet diwar ar Genrouedad) bep eilenn, war ur skeuliad a ya eus 0 da 100.



Sifr 2.3. Barrenn zielefennañ



### Notenn

Ar varrenn zielefennañ an obererezh a ro deoc'h da c'houzout hag-eñ eo diweredekaet ar gwarez en amzer wirion pe ar Maltouter dre ziskwel ur groaz ruz war an takad a zere (**Restroù** pe **Rouedad**).


Gallout a rit implijout **barrenn zielefennañ an obererezh** evit dielfennañ traezoù. Trawalc'h eo tapout an traezoù hoc'h eus c'hoant da zielefennañ ha teurel anezho er prenestr-mañ. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh *“Dielfennadur dre riklañ ;teurel”* (p. 68).

Ma n'hoc'h eus ket mui c'hoant da welet ar varrenn-mañ, grit ur c'hlik-dehou warni ha dibabit **Kuzhat**. Evit kuzhat penn-da-benn ar prenestr, klikit war **Araokaet** e letrín an arventennoù ha goude diaskit al log **Gweredekaet barrenn zielefennañ an obererezh (grafik obererezh ar produ)**.

## 2.3. Dielfennadur BitDefender gant an dorn

M'hoc'h eus c'hoant da zielfennañ prim ur c'havlec'h resis e c'hallit implijout an dielfennadur BitDefender gant an dorn.

Evit mont da zielfennadur BitDefender gant an dorn, heuilhit an hent-mañ el lañser Loc'hañ Windows **Loc'hañ** → **Programmoù** → **BitDefender 2008** → **Dielfennadur BitDefender gant an dorn**. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 2.4. Dielfennadur BitDefender gant an dorn

Trawalc'h eo klask er c'havlec'h ha diuzañ ar c'havlec'h klasket en ur glikañ war **Mat eo**. An **Dielfenner BitDefender** a zeuio war wel hag a heñcho ac'hanoc'h a-dreuz an hizivadur.

## 2.4. Modulenn hizivaat

Ar vodulenn hizivaat a gemm evit ur mare an arventennoù gwareziñ evit bihanaat o levezon war galloud seveniñ ar reizhiad. Pa'z enaouit ar vodulenn hizivaat e vez arloet an arventennoù-mañ

- Diweredekaet eo an holl gemmennoù hag al lañserioù kendestenn.
- Evit gweredekaet/diweredekaet ar gwareziñ war amzer real **Kemmañ**.
- Lakaet eo maltouter BitDefender er **Mod c'hoari**.

Whenever Game Mode is on, you can see the letter G over the  BitDefender icon.

### 2.4.1. Oc'h implijout Modulenn Hizivaat

M'hoc'h eus c'hoant da weredekaet ar vodulenn Hizivaat, grit evel-henn :

- Grit ur c'hlik-dehou war an arlun BitDefender barrenn stad reizhiad **Kuitaat**.
- Grit **Alt+G**(berradenn klavier dre ziouer)



#### **Pouezus**

Na zisoñjit ket diweredekaet ar Vodulenn Hizivaat pa vo echu. Grit evel m'ho peus graet evit gweredekaet anezhi.

## **2.4.2. O kemmañ ar verradenn Modulenn Hizivaat**

Evit ouzhpennañ un takad, grit evel-henn :

1. **Diskwel** - a zigor ar Greizenn surentez BitDefender.



#### **Notenn**

Grit ur c'hlik-dehou war an arlun BitDefender er varrenn stad reizhiad ha diuzit **Kuitaat**.

2. Klikit war **Ouzhpennañ**.
3. Dindan ar**verradenn gweredekaet evit Modulenn Hizivaat** dibarzh, kefluniañ ar verradenn hoc'h eus c'hoant:
  - Dielfennañ ar c'havlec'hioù `Windows,Restroù programm et Holl implijerien`).
  - Er vaezienn kemmañ, enskrivit al lizherenn a glot gant an alc'hwez hoc'h eus c'hoant da implijout ingal.

Da skouer, m'hoc'h eus c'hoant da implijout ar verradenn `Ktrl+Erl+D` e rankit gwiriañ hepken `Ktrl` hag `Erl` hag enskrivañ `D`.



#### **Notenn**

Diaskit al log a glot gant **Gweredekaet ar c'hemenoù dre bostel**.

## Rann 3. Statud surentez

Gant ar stad surentez e vez diskwelet ur roll aozet-sklaer hag aes da verañ hag a stroll kudennoù hoc'h urzhiataer a-fet surentez. BitDefender Internet Security 2008 a roio deoc'h da c'houzout pa vo ur gudenn a c'hall kaout un efed war surentez hoc'h urzhiataer.

Pevar bouton a denn d'ar statud surentez zo :


- SURENTEZ AR PC
- SURENTEZ AR ROUEDAD.
- KONTROLL AR GERENT
- KONTROLL AR GERENT

War an tu kleiz, a-hend-all, e c'hallit gwelet an niver a gudennoù a laka surentez ho reizhiad en arvar hag ur bouton ruz **Reizhañ pep tra**.

Gallout a ra ar pevar bouton statud dont da wer, melen, ruz pe louet hervez al live gwareziñ red.

- **Gwer** a verk eo izel ar riskl evit hoc'h urzhiataer.
- **Gwer** a verk eo etre ar riskl evit hoc'h urzhiataer.
- **Gwer** a verk eo uhel ar riskl evit hoc'h urzhiataer.
- **Gris** a verk ez eus ur parzh n'eo ket kefluniet.

Gallout a reer aes a-walc'h renkañ ar c'hudennoù surentez gant ur c'hlik hepken war ar bouton **Renkañ pep tra**. Ur prenestr nevez a zeuy war wel.



### Sifr 3.1. Kudennoù surentez

You can see a list of security issues and a short description of their status.

Evit renkañ ur gudenn surentez dibar nemetken, klikit war ar bouton **Reizhañ** kenglotus. Renket e vo ar gudenn surentez war-eeun, pe e vo renket goude m'ho po heuliet tennadoù ur skoazeller. Ma tibabit renkañ an holl gudennoù surentez, klikit war **Reizhañ pep tra** ha heuilhit tennadoù ar skoazeller kenglotus.

If you need additional help, click the **More Help** button, placed at the bottom of the window. A contextual help page is displayed providing you with detailed information about these issues and how to fix them.



#### **Pouezus**

Evit pep kudenn ez eus diasket ul log dre ziouer. Ma n'hoc'h eus ket c'hoant e vefe dalc'het kont eus ur gudenn dibar pa vez prizet al live riskl, digevaskit al log kenglotus. Teuler evezh pa vez implijet ar parzh-mañ. Aes eo kreskiñ al live riskl a laka hoc'h urzhiaer en arvar.

<b>Dielfennañ an astennoù dielfennet gant an implijer</b>	Ne vo dielfennet nemet an astennoù zo bet dielfennet gant an implijer. An astennoù zo da vezañ dispartiet gant ";".
<b>Digeriñ ar restroù gwasket</b>	Dielfennañ ar restroù gwasket.
<b>Digeriñ ar restroù dielloù</b>	Dielfennañ diabarzh ar restroù dielloù.
<b>Digeriñ dielloù ar posteloù</b>	Dielfennañ en dielloù posteloù.
<b>Dielfennañ ar rannoù loc'hañ</b>	Dielfennañ rannoù loc'hañ ar reizhiad.
<b>Dielfennañ ar memor</b>	Dielfennañ ar memor evit diskoachañ ar viruzoù hag ar meziantoù drouk all.
<b>Dielfennañ ar marilh</b>	Dielfennañ enmontoù ar marilh.
<b>Dielfennañ an toupinoù</b>	Dielfennañ an toupinoù

- Spisait ar pezh a vo d'ober war ar restroù kontammet, ar restroù zo diskred warno pe zo kuzhet, zo diskoachet er rummad **Dibarzhioù ober**. Gallout a rit spisait un ober disheñvel evit pep rummad.
  - Dibabit an ober da gas da benn war ar restroù kontammet zo diskoachet. An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

Ober	Deskrivadur
<b>Tra ebet</b>	Ne vo kaset da benn ober ebet war ar restroù kontammet. Dont a raio ar re-se war wel e restr an danevelloù.
<b>Digontammiñ</b>	Evit digontammiñ restroù kontammet.
<b>Dilemel restroù</b>	Dilemel a ra ar restroù kontammet diouzhtu, hep kemenn
<b>Dilec'hiañ en dispell</b>	Lakaat ar restroù kontammet en dispell.

- Diuzit an ober da gas da benn war ar restroù zo diskred warno. An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

Ober	Deskrivadur
<b>Tra ebet</b>	Ne vo kaset da benn ober ebet war ar restroù zo diskred warno. Dont a raio ar restroù-se war wel er restr stad.
<b>Dilemel restroù</b>	A zilam diouzhtu ar restroù zo diskred warno, hep kemenn.
<b>Dilec'hiañ en dispell</b>	Dilec'hiañ ar restroù zo diskred warno en takad dispell.



**Notenn**

Diskoachet e vez a restroù evel restroù zo diskred warno en dielfennnur heuristik. Erbediñ a reomp deoc'h kas ar restroù-se da arnodva BitDefender.

- Diuzet an ober da gas da benn war an traezoù kuzhet (rootkitoù) zo bet diskoachet. An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

Ober	Deskrivadur
<b>Tra ebet</b>	Ne vo kaset ober ebet da benn war ar restroù kuzhet. Dont a raio ar restroù-mañ war wel er restr stad.
<b>Dilec'hiañ en dispell</b>	Dilec'hiañ a ra ar restroù kuzhet en takad dispell.
<b>Lakaat war wel</b>	Diskwel a ra ar restroù kuzhet evit ma c'hallot gwelet anezho.



**Notenn**


Ma tibabit dianavezout ar restroù kuzhet pe ma c'hwit an ober diuzet e rankit dibab un ober er skoazeller dielfennañ.

- Evit bezañ pedet da gas an holl restroù zo diskred warno da arnodva BitDefender ur wezh echuet an dielfennadur, klikit war **Kas ar restroù zo diskred warno da arnodva BitDefender** er rummad **Dibarzhioù all**.

Ma klikit war **Diouer** e kargot an arventennoù dre ziouer. Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr.

## Termeniñ ar pal da ziefennañ

Evit termeniñ ar pal da ziefennañ eus un trevell dielfennañ dibar, klikit gant afell zehou al lododenn ha dibabit war **Hentoù**. Dont a ra ar prenestr war wel :



**Sifr 8.8. Dielfennañ ar pal**

Gallout a rit diskwel roll al lennerioù lec'hel, rouedad pe lem-lak, koulz hag ar restroù pe an teulioù ouzhpennet a-raok, diouzh an dro. Dielfennet e vo an elfennoù asket pa vo an trevell o seveniñ.

El lodenn-mañ emañ ar boutonoù amañ da heul :

- **Ouzhpennañ elfennoù** - a zigor ur prenestr a ro tro da ziefennañ ar restroù/teulioù hoc'h eus c'hoant da ziefennañ.



### **Notenn**

Gallout a rit ouzhpennañ ar restroù hag an teulioù en-dro d'ar roll da ziefennañ en ur lakaat anezho da riklañ hag en ur deurel anezho ennañ.

- **Dilemel elfennoù** - a zilam ar restroù/teulioù dibabet a-raok eus roll an traezoù da ziefennañ.



### **Notenn**

Ne c'haller dilemel nemet ar restroù/teulioù bet ouzhpennet en-dro. Ne c'haller ket dilemel avat ar restroù kinniget emgefreak gant BitDefender.

Gant an dibarzhioù-mañ e c'haller dibab buan ar palioù da ziefennañ.

- **Pladennoù lec'hel** - evit dielfennañ ar pladennoù lec'hel.
- **Pladennoù rouedad** - evit dielfennañ an holl lennerioù rouedad.
- **Pladennoù lem-laka** - evit dielfennañ ar pladennoù lem-laka (CD-ROM, lenner pladennigoù).
- **An holl enmontoù** - evit dielfennañ an holl lennerioù, ne vern ha lennerioù lec'hel, rouedad pe lem-laka int.



### **Notenn**


M'hoc'h eus c'hoant da ziefennañ hoc'h urzhiataer a-bezh, askit al log **An holl enmontoù**.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr. Evit reiñ lañs d'an trevell, klikit war **Dielfennañ**.

## ***Diskouez enmontoù an dielfennadur***

Ne c'hallit ket kempañ pal dielfennañ an trevelloù dielfennañ er rummad **Trevelloù reizhiad**. Gallout a rit gwelet ar pal da ziefennañ hepken.

Evit dielfennañ pal da ziefennañ un trevell dielfennañ dibar, grit ur c'hlik dehou war an trevell ha dibabit **Hentoù**. Klikit war **Nemedennoù....** Dont a raio ar prenestr da heul war wel :



Sifr 8.9. Pal da zielfennañ evit dielfennañ ar reizhiad penn-da-benn


**Lañsañ un dielfennadur buan (ezhomm a vo adloc'hañ marteze)** - Roet e vo lañs d'un dielfennadur e-pad an tennad kentañ evit ma sur BitDefender ne vo ket kontammet ar restroù zo en teuliad `Windows and Program Files`

Klikit war **Mat eo** evit klozañ ar prenestr. Dibabit an trevell, ha klikit war **Seveniñ an trevell**.

## **Steuñviñ an trevelloù dielfennañ**

O vezañ ma kemer amzer dielfennañ hoc'h urzhiataer ha ma vo gwelloc'h mont en-dro an dielfennadur ma serrit programmoù all eo gwelloc'h programmañ un dielfennadur d'un eur ma ne implijit hoc'h urzhiataer. Rankout a ra an implijer krouiñ un trevell en a-raok evit se.

Evit diskwel steuñviñ un trevell dibar pe kemmañ anezhañ, grit ur c'hlik dehou war an trevell ha dibabit **Steuñviñ**. Dont a ra ar prenestr war wel :



### Sifr 8.10. Steuñver

Diskwel a ra an trevell steuñvet, diouzh an dro.

Pa brogrammit un trevell e rankit dibab unan eus an dibarzhioù-mañ :

- **N'eo ket steuñvet** - a ro lañs d'an trevell diwar c'houlenn nemetken.
- **Ur wezh** - a ro lañs d'an dielfennadur ur wezh nemetken, d'ur mare divizet ganeoc'h. Spisait an deiz hag an eur loc'hañ er vaezienn **Loc'hañ Deiz/Eur**.
- Ma tibabit dielfennañ ingal hoc'h urzhiataer bep ar mare, askit al log **Ingal bep ar mare**.

Ma n'hoc'h eus ket c'hoant da zielefennañ ingal hoc'h urzhiataer bep ar mare, askit al log **Ingal bep ar mare** ha resisait munutennoù/eurioù/deizioù/sizhunioù/mizioù/bloazioù er maeziennoù rakwelet. Ret eo deoc'h ivez termeniñ an deiziad kregiñ hag echuiñ er vaezienn **Deiziad kregiñ/Eur**.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr. Evit reiñ lañs d'an trevell, klikit war **Dielfennañ**.

## 8.2.5. Dielfennañ traezoù

A-raok reiñ lañs d'un dielfennadur, bezit sur eo hizivaet BitDefender evit a sell sinadurioù ar meziantoù drouk. Dielfennañ hoc'h urzhiataer diwar-bouez un diaz roadennoù gant sinadurioù dispredet a c'hallfe mirout ouzh BitDefender a ziskoachañ ar meziantoù drouk zo da glask diwar an hizivadur diwezhañ. Evit gwiriañ pegoulz eo bet hizivaet BitDefender ar wezh diwezhañ, klikit war **Hizivaat > Hizivaat** e letrín an arventennoù.



### Notenn

Evit ma c'hallio BitDefender kas da benn un dielfennadur penn-da-benn ez eo ret serrañ an holl brogrammoù zo o vont en-dro bremañ, dreist-holl ar glianted postelerezh (da skouer, Outlook, Outlook Express pe Eudora).

## Doareoù dielfennañ


Reiñ a ra tro BitDefender da zielfennañ 4 seurt diwar c'houlenn :

- **Dielfennadur diouzhtu** - a ro lañs d'un trevell dielfennañ eus an trevelloù a c'haller kavout.
- **Dielfennadur kemperzhel** - grit ur c'hlik dehou war ur restr pe ur c'havlec'h ha dibabit BitDefender Enepvirus 2008;
- **Dielfennadur dre riklañ-lakaat** - riklit & lakait ur restr pe ur c'havlec'h war **barrenn zielfennañ obererezh**.
- **Dielfennadur dre zorn** - implijit dielfennadur dre zorn BitDefender evit dibab war-eeun ar restroù pe ar c'havlec'hioù hoc'h eus c'hoant da zielfennañ.

## Dielfennadur diouzhtu

Gallout a rit dielfennañ hoc'h urzhiataer penn-da-benn pe ul lodenn anezhañ en ur seveniñ an trevelloù dielfennañ dre ziouer pe ho trevelloù dielfennañ deoc'h. An dielfennadur diouzhtu a vez graet eus an dra-se.


Evit seveniñ un trevell dielfennañ, implijit unan eus an hentenoù amañ da-heul :

- Daouglikit war an trevell dielfennañ hoc'h eus c'hoant er roll.
- Klikit war ar bouton  **Dielfennañ** a genglot gant an trevell.
- Klikit war an trevell, ha klikit goude war **Seveniñ an trevell**.

Pa zeu keflusker dielfennañ BitDefender war wel e vez roet lañs d'an dielfennadur. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh "**Keflusker dielfennañ BitDefender**" (p. 69).

## Dielfennadur kemperzhel

Evit dielfennañ ur restr pe un teuliad hep kefluniañ un trevell dielfennañ nevez, e c'hallit implijout ar lañser kendestenn. An dielfennadur kemperzhel a vez graet eus an dra-se.



Sifr 8.11. Dielfennadur kemperzhel


Grit ur c'hlik-dehou war ar restr pe war ar c'havlec'h hoc'h eus c'hoant da zielefennañ ha dibabit an dibarzh **BitDefender Enepvirus 2008**.

Pa zeu keflusker dielfennañ BitDefender war wel e vez roet lañs d'an dielfennadur. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh *“Keflusker dielfennañ BitDefender”* (p. 69).


Gallout a rit kemmañ an dibarzhioù dielfennañ ha gwelet ar restroù danevell er prenestr **Perzhioù** an trevell **Dielfennadur dre al lañser kemperzhel**.

## Dielfennadur dre riklañ ;teurel

Riklañ ar restr pe ar c'havlec'h hoc'h eus c'hoant da zielefennañ ha taolit anezhañ war **Barrenn zielefennañ an obererezh**, evel war ar skeudenn amañ dindan.



Sifr 8.12. Lakaat ar restr da riklañ



Sifr 8.13. Teurel ar restr

Pa zeu keflusker dielfennañ BitDefender war wel e vez roet lañs d'an dielfennadur. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh *"Keflusker dielfennañ BitDefender"* (p. 69).

### Dielfennadur dre zorn

Pal an dielfennadur dre zorn zo dibab war-eeun ar restroù pe ar c'havlec'hioù hoc'h eus c'hoant da zielfennañ gant dibarzh dielfennañ dre zorn BitDefender. An dibarzh-se a c'haller kaout e lañser Loc'hañ Windows zo er strollad programm BitDefender.




#### Notenn

Plaeñ ha brav eo an dielfennadur dre zorn rak gallout a reer kas anezhañ da benn pa vez Windows er mod diarvar.

Evit dibab ar restroù pe ar c'havlec'hioù da zielfennañ gant BitDefender, heuilhit an hent-mañ, eus lañser Loc'hañ Windows : **Loc'hañ** → **Programmoù** → **BitDefender 2008** → **Dielfennadur dre zorn BitDefender**.

Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 8.14. Dielfennadur dre zorn

Dibabit ar restroù pe ar c'havlec'hioù hoc'h eus c'hoant da zielfennañ ha klikit war **Mat eo**.


Pa zeu keflusker dielfennañ BitDefender war wel e vez roet lañs d'an dielfennadur. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh *"Keflusker dielfennañ BitDefender"* (p. 69).

## Keflusker dielfennañ BitDefender

Pa lañsit un argerzh dielfennañ diwar c'houlenn e teu keflusker dielfennañ BitDefender war wel. Heuilhit an argerzhadur e tri zennad evit seveniñ an dielfennadur :

### Tennad 1 diwar 3 – Dielfennañ

Kregiñ a ra BitDefender da zielfennañ an traezoù diuzet.



### Sifr 8.15. O tielfennañ

Gallout a rit gwelet stadegoù an dielfennadur (tizh dielfennañ, amzer dremenet, niver a draezoù dielfennet, kontammet / zo diskred warno / kuzhet h.a.).



#### **Notenn**

Pellik e c'hall padout an dielfennadur. Se zo diouzh pegen kemplezh eo da zielfennañ.


Evit paouez an dielfennadur ur pennad, klikit war **Ehan**. Evit adkregiñ ganti, klikit war **Adkregiñ**.

Gallout a rit paouez an dielfennadur ne vern pegoulz en ur glikañ war **Paouez ha Ya**. Adkavout a reot tennad diwezhañ ar skoazeller.

Gortozit e vefe peurechu dielfennadur BitDefender.

## Tennad 2 diwar 3 - Dibabit an oberoù

Ur wezh peurziefennet e teu ur prenestr nevez, ennañ disoc'hoù an dielfennadur, war wel.



### Sifr 8.16. Oberoù

Gallout a rit gwelet an niver a gudennoù surentez zo war ho reizhiad.

Diskwelet e vez an traezoù kontammet e strolloù, diazezet war ar meziantoù drouk o deus kontammet anezho. Klikit war al liamm a glot gant ur riskl evit kavout muioc'h a ditouroù diwar-benn an traezoù kontammet.

Gallout a rit dibab un ober hollek d'ober evit pep stroll kudennoù a-fet surentez pe dibab oberoù dibar evit pep kudenn.


Gallout a reer diskwel ar parzhioù-mañ el lañser :

Ober	Deskrivadur
<b>Chom hep kas oberoù da benn</b>	Ne vo kaset ober ebet da benn war ar restoù kavet.
<b>Digontammiñ</b>	Evit digontammiñ restoù kontammet.
<b>Dilemel</b>	Dilemel ar restoù kontammet.
<b>Diguzhat</b>	Lakaat a ra ar restoù kuzhet war wel.

Klikit war **Reizhañ** evit arloañ an oberoù spisaet.

### Tennad 3 diwar 3 – Gwelet an disoc'hoù

Ur wezh renket ar c'hudenoù surentez gant BitDefender e teu disoc'hoù an dielfennadur war wel en ur prenestr nevez.



Sifr 8.17. Diverradenn

Gallout a rit gwelet diverradenn an disoc'hoù. Saveteet emgefreak eo a restr danevell er rubrikenn **Restroù marilhañ** eus ar prenestr **Perzhioù** an trevell e dalc'h.



#### **Pouezus**

If required, please restart your system in order to complete the cleaning process.

Click **Exit** to close the results window.

#### **BitDefender Could Not Solve Some Issues**

In most cases BitDefender successfully disinfects the infected files it detects or it isolates the infection. However, there are issues that cannot be solved.

In these cases, we recommend you to contact the BitDefender Support Team at [www.bitdefender.com](http://www.bitdefender.com). Our support representatives will help you solve the issues you are experiencing.

#### **BitDefender Detected Password-protected Items**

The password-protected category includes two types of items: archives and installers. They do not present a real threat to the security of the system unless they contain infected files and only if executed.

To make sure that these items are clean:

- If the password-protected item is an archive you protected with a password, extract the files it contains and scan them separately. The easiest way to scan them is to right-click them and select **BitDefender Antivirus 2008** from the menu.
- If the password-protected item is an installer, make sure that **real-time protection** is enabled before you execute the installer. If the installer is infected, BitDefender will detect and isolate the infection.

If you do not want these objects to be detected again by BitDefender you must add them as exceptions to the scanning process. To add scan exceptions, click **Settings** to open the settings console and then go to **Antivirus > Exceptions** . For more information, please refer to **Objects Excluded from Scanning**.


#### **BitDefender Detected Suspect Files**

Suspect files are files detected by the heuristic analysis as potentially infected with malware the signature of which has not been released yet.

Pa vez bet kavet restroù diskred warno e-pad an dielfennadur oc'h pedet da gas anezho da arnodva BitDefender. Click **OK** to send these files to the BitDefender Lab for further analysis.

## 8.2.6. Diskwel ar renabloù dielfennañ

Evit gwelet disoc'hoù an dielfennañ ur wezh sevenet an trevell, grit ur c'hlik-dehou war an trevell ha dibabit **Renabloù**. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 8.18. Renabloù dielfennañ

Amañ e c'hallit gwelet ar restroù danevell a veze ganet bewezh ma veze sevenet an trevell.

El lodenn-mañ e c'hallit gwelet an danevell a vez ganet bewezh ma vez sevenet un trevell. Pep restr zo enni titouroù war he stad (mat eo/kontammet), deiziad ha pad an dielfennadur hag ur berrzastum.

Daou vouton a c'haller kaout :

- **Dilemel** - a zilam ar restr danevell dibabet.
- **Diskwel** - a zigor ar restr danevell dibabet. Gallout a raio an danevell dielfennañ digeriñ dre ziouer en ho merdeer Web.




### Notenn

Evit diverkañ pe evit gwelet ur restr e c'hallit ober ur c'hlik-dehou ivez war ar restr ha dibab an dibarzh a genglot.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr. Evit reiñ lañs d'an trevell, klikit war **Dielfennañ**.

## Renabloù dielfennañ

An tres da heul a ziskouez ur skouer danevell dielfennañ.



Sifr 8.19. Renabloù dielfennañ

An danevell zo enni titouroù dre ar munud war an argerzhadur dielfennañ danevelloù, evel an dibarzhioù dielfennañ, ar pal dielfennañ, ar riskloù kavet hag an oberoù kaset da benn war ar riskloù-se.

## 8.3. Traezoù lakaet e-maez an dielfennadur

C'hoarvezout a ra e ranker lakaet restroù e-maez an dielfennadur. Da skouer, mat e c'hall bezañ lakaet ur restr arnod EICAR eus un dielfennadur pa'z eer dezhi pe restroù .avi pa vez dielfennet diwar c'houlenn.

Gant BitDefender e c'hallit lakaet traezoù e-maez un dielfennadur pa'z eer dezhi pe e-maez un dielfennadur diwar c'houlenn pe eus an daou. Gant an arc'hwel-mañ e c'hallit digreskiñ pad un dielfennadur ha mirout d'en em rouestlañ en ho labour.

Daou seurt traezoù a c'haller lakaet e-maez an dielfennadur :


- **Hentoù** - ur restr pe un teuliad (gant an holl draezoù zo enni) zo spisaet gant un hent dibar.
- **Astennoù** - an holl restroù o deus un astenn dibar.



### **Notenn**

An traezoù lakaet e-maez un dielfennadur pa'z eer dezho ne vint ket dielfennet, pe e vefe ganeoc'h pe gant un arload.

Evit diskwel pe genel an traezoù e-maez an dielfennadur, klikit war **Enepvirus > Nemedennoù** Dont a ra ar prenestr war wel :



### Sifr 8.20. Nemedennoù


Diskwel a ra an traezoù (restroù, teuliadoù, astennoù) lakaet e-maez an dielfennadur. Evit pep traezenn e verker ha lakaet emañ e-maez an dielfennadur, un dielfennadur diwar c'houlenn pe an daou, pa'z eer dezhi.



#### Notenn

Amañ ne c'haller ket arloañ an nemedennoù spisaet ouzh an dielfennadur kemperzhel.

Evit diverkañ un enmont eus ar roll, dibabit anezhañ ha klikit war  **Dilemel**.

Evit embann un enmont eus ar roll, dibabit anezhañ ha klikit war ar bouton  **Embann**. Dont a raio ur prenestr nevez war wel hag e-se e c'hallit kemmañ an astenn pe an hent da lakaat e-maez hag ar seurt dielfennadur hoc'h eus c'hoant da lakaat e-maez, diouzh an dro. Grit ar c'hemmoù ret, ha klikit goude war **Mat eo**.



#### Notenn


Gallout a rit ivez ober ur c'hlik dehou war un enmont hag implijout dibarzhioù lañser ar berradennoù evit kemmañ pe dilemel anezhañ.

Gallout a reot klikañ war **Nullañ** evit distreiñ d'ar c'hemmoù bet graet e taolenn ar reolennoù, gant ma n'hoc'h eus ket enrollet anezho en ur glikañ war **Arloañ**.

### 8.3.1. Lakaat e-maez hentoù an dielfennañ

Evit lakaat e-maez hentoù an dielfennañ, klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ**. Heñchet e viot a-hed an argerzh ezlakaat gant ar skoezeller kefluniañ a zeuio war wel.


#### Tennad 1 diwar 3 – Dibab ar seurt traezenn



Sifr 8.21. Seurt traezenn

Dibab an dibarzh lakaat e-maez un hent dielfennañ.  
Klikit war **War-lerc'h**.

## Tennad 2 diwar 3 : Spisait an hentoù da ezlakaat



Sifr 8.22. Hentoù da ezlakaat

Evit spisaat an hentoù da lakaat e-maez an dielfennadur, implijout unan eus an doareoù-mañ :

- Klikit war **Furchal**, dibabit ar restr pe an teuliad da lakaat e-maez an dielfennadur, ha klikit goude war **Ouzhpennañ**.
- Skriverezit an hent da lakaat e-maez an dielfennadur en takad testenn, ha goude klikit war **Ouzhpennañ**.



### Notenn


Ma n'eus ket eus an hent merket e teu ur c'hemenn war wel. Klikit war **Mat eo** ha gwirit ez eo mat an hent.

Dont a ra an hentoù war wel en daolenn a-feur ma ouzhpennit anezho. Gallout a rit ouzhpennañ hentoù kement ha m'hoc'h eus c'hoant.

Evit diverkañ un enmont eus ar roll, dibabit anezhañ ha klikit war  **Dilemel**.

Klikit war **War-lerc'h**.

## Tennad 3 diwar 3 : Dibab ar seurt dielfennadur



Sifr 8.23. Seurt dielfennadur

Diskwel a ra un daolenn zo enni an hentoù da lakaat e-maez an dielfennadur hag ar seurt dielfennadur int bet lakaet er-maez anezhañ.

An hentoù dibabet a vez lakaet e-maez an dielfennadur pa'z eer di ha d'an dielfennadur diwar c'houlenn. Evit kemmañ pa vez arloet an nemedenn, klikit war ar bann dehou ha dibabit an dibarzh hoc'h eus c'hoant er roll.


Klikit war **Echuiñ**.

Arabat disoñjal klikañ war **Arloañ** evit enrollañ ar c'hemmoù.

### 8.3.2. Lakaat astennoù an dielfennañ e-maez

Evit ezlakaat astennoù an dielfennañ, klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ**. Heñchet e viot a-hed an argerzh ezlakaat gant ar skoazeller kefluniañ a zeuio war wel.


## Tennad 1 diwar 3 – Dibab ar seurt traezenn



Sifr 8.24. Seurt traezenn

Dibabit an dibarzh ezlakaat un astenn eus an dielfennadur.  
Klikit war **War-lerc'h**.

## Tennad 2 diwar 3 – Spisait an astennoù da ezlakaat.



Sifr 8.25. Astennoù da lakaat e-maez

Evit spisaat pe astennoù lakaat e-maez an dielfennadur, implijit unan eus an doareoù-mañ :

- Dibabit el lañser an astenn hoc'h eus c'hoant da lakaat e-maez an dielfennadur, ha goude klikit war **Ouzhpennañ**.



**Notenn**

Al lañser zo ennañ roll an holl astennoù enrollet en ho reizhiad. Pa zibabit un astenn e teu an deskivadur war wel ma c'haller kaout anezhañ.


- Skrивerezit an holl astennoù da lakaat e-maez an dielfennadur, ha klikit goude war **Ouzhpennañ**.

Dont a ra an astennoù war wel en daolenn a-feur ma ouzhpennit anezho. Gallout a rit ouzhpennañ astennoù kement ha m'hoc'h eus c'hoant.

Evit diverkañ un enmont eus ar roll, dibabit anezhañ ha klikit war **Dilemel**.

Klikit war **War-lerc'h**.

### Tennad 3 diwar 3 : Dibab ar seurt dielfennadur



Sifr 8.26. Seurt dielfennadur

Diskwel a ra un daolenn zo enni an hentoù da lakaat e-maez an dielfennadur hag ar seurt dielfennadur int bet lakaet er-maez anezhañ.

An astennoù dibabet, dre ziouer, zo lakaet e-maez an dielfennadur pa'z eer di hag an dielfennadur diwar c'houlenn war un dro. Evit kemmañ an arload, klikit war ar bann dehou ha dibabit an dibarzh hoc'h eus c'hoant er roll.

Klikit war **Echuiñ**.



**Notenn**

P'emañ ar restr en dispell ne c'hall ket ober drouk na bezañ sevenet pe lennet.


Evit diverkañ ur restr dibabet en takad dispell, klikit war ar bouton **Dilec'hiañ**. M'hoc'h eus c'hoant da assevel ur restr dibabet en e lec'h orin, klikit war **Assevel**.

Gallout a rit kas ur restr eus an dispell da arnodvaou BitDefender en ur glikañ war **Kas**.

**Lañser kemperzhel.** Gant al lañser kemperzhel zo kinniget deoc'h e c'hallit merañ aes ar restroù zo en dispell. An dasparzhioù a c'haller kaout zo an hevelep re hag ar dasparzhioù zo meneget a-raok. Gallout a rit dibab **Hizivaat** evit freskaat an takad dispell.

## 8.4.2. Kefluniadur arventennoù an dispell

Evit kefluniañ arventennoù an dispell, klikit war **Arventennoù**. Ur prenestr nevez a zeuy war wel.



**Sifr 8.28. Kefluniañ an takad dispell**

En ur implijout arventennoù an dispell e c'hallit kefluniañ BitDefender evit seveniñ emgefreak an oberoù amañ da heul.

**Dilemel ar restroù kozh.** Evit dilemel emgefreak ar restroù kozh zo en dispell, askit an dibarzh a genglout. Rankout a rit spisaat pet deiz e rank ar restroù chom en dispell a-raok dilemel anezho ha pet gwezh e rank BitDefender klask ar restroù kozh.



**Notenn**

Bemdez e klask Bitdefender, dre ziouer, ar restroù kozh ha dilemel a ra ar restroù ouzhpenn 10 deiz.

**Dilemel an doublennoù.** Evit dilemel emgefreak doublennoù ar restroù zo en dispell, askit an dibarzh a genglout. Rankout a rit spisaat an niver a zeizioù etre daou enklask doublennoù lerc'h-ouzh-lerc'h.



**Notenn**

Bemdez e klask BitDefender, dre ziouer, doublennoù ar restroù zo en dispell.

**Kinnig emgefreak ar restroù.** Evit kinnig emgefreak ar restroù en dispell, askit an dibarzh a genglout. Rankout a rit spisaat pet gwezh hoc'h eus c'hoant da ginnig ar restroù.



**Notenn**

Bep 60 munut e kinnigo emgefreak BitDefender ar restroù lakaet en dispell, dre ziouer.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr.

## Rann 9. Maltouter

Ar Maltouter a warez hoc'h urzhiataer diouzh an esaeoù kevreañ enkas ha diskas n'int ket aotreet. Tennañ a ra d'ur gward – derc'hel a ray e lagad war ho kevreadenn Genrouedad ha mirout ur roud eus ar programmoù aotreet da vont d'ar Genrouedad hag eus ar re zo da stankañ.



### Notenn

Ur maltouter zo pouezus-bras m'hoc'h eus ur gevreadenn ADSL.

Er mod dre laer e vez "diwelus" hoc'h urzhiataer evit an drougiatoù hag ar breizherien. Gallout a ra ar vodulenn Maltouter dinoiñ ent emgefreak ar "skannadennoù porzh" (froudoù pakadoù kaset d'ur mekanik evit kavout "poentoù moned", a-benn prientiñ un dagadenn alies).

Er rann **Maltouter** eus an dornlevr-mañ emañ ar rubrikennoù-mañ :

- **Alberz eus ar maltouter**
- **Stad ar maltouter**
- **Gwarez an tremenerezh**
- **Arventennoù araokaet**
- **Obererezh ar Maltouter**
- **Takadoù rouedad**

### 9.1. Alberz eus ar Maltouter

Empennet eo bet maltouter Bitdefender da kinnig deoc'h ar gwarez gwellañ evit ho rouedad/ho kevreadennoù Kenrouedad, hep m'ho pefe d'e gefluniañ. Ha pa vefec'h kevreet war-eeun ouzh ar Genrouedad, ouzh ur rouedad nemeti pe ouzh meur a rouedad (Ethernet, diorjal, VPN pe ur seurt all), fiziadus pe n'int ket fiziadus, en em geflunio ar maltouter a-benn en em ober diouzh ar blegenn.

Dre ziouer e tino BitDefender kefluniadurioù rouedad hoc'h urzhiataer ent emgefreak, hag e krou ur profil maltouter dereat. Ouzhpennañ a ra ivez d'ar profil ar rouedadoù dinoet evel takadoù rouedad fiziadus pe n'int ket fiziadus, diouzh o c'hefluniadur.

#### 9.1.1. Petra eo ar profiloù maltouter ?

Ur profil maltouter zo un hollad reolennoù hag a gontroll ar moned d'ar rouedad/Genrouedad eus an arloadoù.

Hervez ar c'hefluniadur rouedad war hoc'h urzhiataer, e krou BitDefender ur seurt profil difer ent emgefreek. Er profil diazez krouet ez eus reolennoù mont d'ar rouedad pe reolennoù diazez mont d'ar Genrouedad, goulennet gant arloadoù ar reizhiad ha parzhioù BitDefender.



### Notenn

Krouet e vez ur profil maltouter nemetañ, petra bennak a vefe an niver a rouedadoù oc'h kevreet outo.

Bez' ez eus tri seurt profiloù diazez :

<b>Profil</b>	<b>Deskriudadur</b>
<b>Kevreadenn eeun</b>	Ennañ emañ ar reolennoù diazez a-fet moned d'ar Genrouedad, erbedet evit ur c'hefluniadur rouedad a aotre ar moned eeun d'ar Genrouedad. Ar reolennoù n'aotreont ket implijerien ar rouedad da vont d'hoc'h urzhiataer, ha n'hoc'h aotreont ket kennebeut da furchal ar rouedad.
<b>N'eo ket fiziadus</b>	Ennañ emañ ar reolennoù moned d'ar rouedad erbedet evit ur c'hefluniadur rouedad stag ouzh ur rouedad ha n'eo ket fiziadus. Ar reolennoù hoc'h aotre da furchal ar rouedad, met mirout a reont ouzh implijerien all ar rouedad da vont d'hoc'h urzhiataer.
<b>Fiziadus</b>	Ennañ emañ ar reolennoù moned d'ar rouedad erbedet evit ur c'hefluniadur rouedad stag ouzh ur rouedad fiziadus. N'eus strishadur ebet war ar moned d'ar rouedad. Kement-se a dalvez e c'hallit mont d'ar pladennoù rannet, da voullerezioù ar rouedad ha da loazioù all ar rouedad. Kement-se a empleg ivez e c'hall implijerien ar rouedad kevreañ ouzh hoc'h urzhiataer ha mont d'ho pladennoù rannet.

Pa glask an arloadoù kevreañ ouzh ar Genrouedad e vez ouzhpennet ar reolennoù dereat d'ar profil. Gallout a rit dibab aotren pe nac'h dre ziouer ar moned d'ar Genrouedad d'an arloadoù n'eus ket bet kefluniet reolennoù evito, pe aotren dre ziouer an arloadoù er roll gwenn ha reiñ hoc'h aotre evit ar re all.

**Notenn**

Evit diferañ politikerezh moned an arloadoù a glask kevreañ ouzh ar Genrouedad evit ar wezh kentañ, kit d'ar rann **Stad** ha lakait al live gwarez. Evit kemmañ ar profil zo anezhañ dija, kit d'ar rann **Tremenerezh** ha klikit war **Kemman ar profil**.

## 9.1.2. Petra eo an takadoù rouedad ?

Un takad rouedad a dalvez un urzhiataer en ur rouedad pe ur rouedad a-bezh distag-krenn diouzh hoc'h urzhiataer, pe er c'hontrol, gouest da zinoiñ hoc'h urzhiataer ha da gevreañ outañ. Evit gwir, un takad zo ur chomlec'h IP pe un hollad chomlec'hioù IP a vez aotreet pe nac'het dezho ar moned d'hoc'h urzhiataer.

Dre ziouer, BitDefender a ouzhpenn takadoù ent emgefreek evit kefluniadurioù rouedad difer. Ouzhpennet e vez an takadoù dre grouiñ reolennoù dereat evit mont d'ur rouedad, a c'haller arloañ ouzh ur rouedad a-bezh, er profil red.

Bez' ez eus daou seurt takadoù :

Seurt takad	Deskrivadur
<b>Fiziadus</b>	<p>An urzhiataerioù eus un takad fiziadus a c'hall kevreañ ouzh hoc'h urzhiataer ha gallout a rit kevreañ outo.</p> <p>Aotreet eo an holl esaeoù kevreañ a zeu eus un takad seurt-se hag an holl esaeoù kevreañ a zeu eus hoc'h urzhiataer d'un takad seurt-se. Ma vez ouzhpennet ur rouedad evel takad fiziadus, e c'hallit mont hep strishadur ebet d'ar bladenoù rannet, d'ar moullerezioù ha da loazioù all ar rouedad-se. Ouzhpenn-se e c'hall implijerien ar rouedad kevreañ ouzh hoc'h urzhiataer ha mont d'ho roadenoù rannet.</p>
<b>Takad n'eo ket fiziadus</b>	<p>An urzhiataerioù eus un takad n'eo ket fiziadus ne c'hallont ket kevreañ ouzh hoc'h urzhiataer ha ne c'hallit ket kennebeut kevreañ outo.</p> <p>Stanket eo an holl esaeoù kevreañ a zeu eus un takad seurt-se, hag ivez an holl esaeoù kevreañ eus hoc'h urzhiataer d'un takad seurt-se. Evel ma vez nac'het an tremenerezh ICMP ha ma vez gweredekaet ar mod dre laer, eo tost diwelus hoc'h urzhiataer evit an urzhiataerioù en takad-se.</p>



**Notenn**

Evit kemmañ un takad, kit d'ar rann **Takadoù**. Evit kemmañ ar reolenn a glot gant un takad difer, kit d'ar rann **Tremenezh** ha klikit war **Kemmañ ar profil**.

### 9.1.3. Mont en-dro ar maltouter

Pa adloc'hit ar reizhiad war-lerc'h ar staliadur, e tino BitDefender ho kefluniadur rouedad ent emgreek, e krou ur profil standart dereat hag ez ouzhpenn un takad diouzh ar rouedad dinoet.



**Notenn**

Ma'z oc'h kevreet war-eeun ouzh ar Genrouedad, ne vo krouet takad rouedad ebet evit ar c'hefluniadur rouedad kevatal. Ma'z oc'h kevreet ouzh meur a rouedad e vo ouzhpennet an takadoù diouzh pep rouedad.

Bewezh ma vez kemmet kefluniadur ar rouedad, pa gevreit ouzh ur rouedad all pe pa ziweredekait ur gevreadenn rouedad, e vez krouet ur profil maltouter nevez hag e vez kemmet an takadoù rouedad hag e-se.

Pa vez krouet ur profil maltouter nevez, e vez enrollet ar profil kozh evit bezañ adkarget ar wezh kentañ ma implijot ar c'hefluniadur rouedad a glot gantañ.

BitDefender en em geflun diouzh kefluniadur ar rouedad. Setu penaos eo kefluniet BitDefender dre ziouer :

- Ma'z oc'h kevreet war-eeun ouzh ar Genrouedad, mat ha ma vefec'h kevreet ouzh rouedadoù all ivez, e vez krouet ur profil kevreañ eeun. A-hend-all e krou BitDefender ur profil maltouter ha n'eo ket fiziadus.



**Notenn**

Evit abegoù surentez ne vez ket krouet ar profiloù fiziadus dre ziouer. Evit krouiñ ur profil fiziadus, e rankit adderaouekaat ar profil zo anezhañ dija. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh "**Adderaouekaat ar profiloù**" (p. 101).

- Ouzhpennet e vez an takadoù diouzh kefluniadur ar rouedad.

Seurt takad	Kefluniadur ar rouedad
Fiziadus	<b>IP prevez hep treuzell ebet</b> - Emañ an urzhiataer e-barzh ur rouedad lec'hel (LAN) ha n'eo ket kevreet ouzh ar Genrouedad. (da skouer, ur rouedad er gêr, krouet da lezel

Seurt takad	Kefluniadur ar rouedad
	<p>izili ur memes familh da rannañ restroù, moullerezioù pe loazioù all).</p> <p><b>IP prevez gant ur c'hontroller domani dinoet</b> - Emañ an urzhiataer e-barzh ur rouedad LAN ha kevreet eo ouzh un domani. (da skouer ur rouedad burev a lez an implijerien da rannañ restroù pe loazioù all e-barzh un domani). Un domani a empleg ez eus un hollad politikerezhioù a ra urzhiataerioù an implijerien diouto.</p>
<p><b>Takad n'eo ket fiziadus</b></p>	<p><b>Diorjal digor (n'eo ket suraet)</b> - Emañ an urzhiataer e-barzh ur rouedad lec'hel diorjal (WLAN). (da skouer, ma'z it d'ar Genrouedad dre ul lec'h moned en ul lec'h foran).</p>




### Notenn

Ne vez ket krouet takadoù gant lod kefluniadurioù rouedad, evel :

- **IP foran (a c'haller ruta)** - Kevreet eo an urzhiataer war-eeun ouzh ar Genrouedad.
  - **IP prevez gant un dreuzell, met gant kontroller domani dinoet ebet** - Emañ an urzhiataer e-barzh ur rouedad LAN, hep bezañ e-barzh un domani, ha kevreañ a ra ouzh ar Genrouedad dre un dreuzell. (da skouer, ur rouedad skol hag a aotre an implijerien da rannañ restroù pe loazioù all).
- Gweredekaet eo ar mod dre laer.
  - Aotreet eo ar c'hevreadennoù VPN (rouedad prevez) hag ar c'hevreadennoù a-bell.
  - Ne vez ket aotreet ar rannañ kevreadennoù Kenrouedad evit an takadoù n'int ket fiziadus.
  - An arloadoù war ar roll gwenn a vez aotreet ar moned dezho ent emgefreak. An arloadoù all, avat, o devez ezhomm eus hoc'h aotre d'o esae kevreañ kentañ.

## 9.2. Stad ar Maltouter

Evit kefluniañ gwarez ar maltouter, klikit war **Maltouter > Stad** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :




### Sifr 9.1. Stad ar Maltouter

Er rann-mañ e c'hallit gweredekaet / diweredekaet ar **Maltouter**, stankañ an holl dremenerezh rouedad/Kenrouedad ha lakaet an emzalc'h dre ziouer pa vez darvoudoù nevez.



#### **Pouezus**

Evit bezañ gwarezet diouzh an tagadennoù Kenrouedad, lezit ar **Maltouter** gweredekaet.

Evit stankañ an holl dremenerezh rouedad/Kenrouedad, klikit war  **Stankañ an tremenerezh**, ha neuze war **Ya** da gadarnaat ho tibab. Evel-se e vo lakaet hoc'h urzhiataer en distro e-keñver holl urzhiataerioù all ar rouedad.

Evit distankañ an tremenerezh diwezhatoc'h, klikit war  **Distankañ an tremenerezh**.

E traoñ ar rubrikenn-mañ e c'hallit gwelet stadegoù BitDefender diwar-benn an tremenerezh enkas ha diskas. Diskouez a ra ar grafik kementad an tremenerezh Kenrouedad e-pad an daou vunut diwezhañ.

**Notenn**

Dont a ra ar grafik war wel, ha pa vefe diweredekaet ar **Maltouter**.

## 9.2.1. Kefluniañ al live gwareziñ

Gallout a rit dibab al live gwareziñ a vo diouzh hoc'h ezhommoù surentez. Dilec'hiit ar reti war ar skeul evit dibab al live a zere.


3 live gwareziñ zo anezho :

Live gwareziñ	Deskrivadur
<b>Mod c'hoari</b>	Arloañ a ra ar reolennoù red hag aotren an holl esaeoù kevreañ na glotont gant reolenn red ebet, hep goulenn digant an implijer. Dizaliañ a reer groñs ar politikerezh-mañ, met talvoudus e c'hall bezañ evit ar verourien rouedad hag ar c'hoarierien.
<b>Aotren erbedet</b>	Arloañ a ra ar reolennoù red hag aotren an holl esaeoù kevreañ diskas gant ar programmoù anavezeta da reizh gant BitDefender (lakaet war ar roll gwenn) hep goulenn netra. Evit an esaeoù kevreañ all e vo goulennet hoc'h aotre diganeoc'h gant BitDefender. Gallout a rit gwelet ar reolennoù tremenerezh a-feur ma vezont krouet er rann <b>Tremenerezh</b> .  Ar programmoù er roll gwenn eo ar re implijetañ e live ar bed (merdeerioù Kenrouedad, lennerioù liesvedia, programmoù flap ha rannañ restroù, servijerioù arvalien hag arloadoù ar reizhiad korvoiñ) M'hoc'h eus c'hoant da welet roll ar programmoù er roll gwenn, klikit war <b>Roll gwenn</b> .
<b>Goulenn</b>	Arloañ a ra ar reolennoù red ha goulenn diganeoc'h evit an esaeoù tremenerezh ne glotont gant reolenn red ebet.

Klikit war **Live dre ziouer** evit lakaat al live dre ziouer (**Aotren**) erbedet.

## 9.3. Kontroll an tremenezh

Evit merañ reolennoù maltouter ar profil red, klikit war **Maltouter > Tremenezh** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :




Sifr 9.2. Kontroll an tremenezh

Er rann-mañ e c'hallit diferañ peseurt kevreadennoù enkas pe diskas zo da aotren/verzañ dre lakaat reolennoù difer evit ar protokoloù, ar porzhioù, an arloadoù ha/pe ar chomlec'hioù a-bell.

Gallout a ra ar reolennoù bezañ ebarzhet ent emgefreak (dre ar prenestr diwall) pe **gant an dom** (klikit war ar bouton **Ouzhpennañ** ha dibabit arventennoù ar reolenn).

### 9.3.1. Ouzhpennañ reolennoù ent emgefreak

Gant ar **Maltouter** gweredekaet, e vo goulennet an aotre diganeoc'h gant BitDefender bewezh ma vo graet ur gevreadenn Kenrouedad :



Sifr 9.3. Kemenn diwall Maltouter

Gallout a rit gwelet an arload zo o klask mont d'ar Genrouedad, an hent moned da restr an arload, al lec'h kas, ar protokol implijet hag ar **porzh** emañ an arload o klask kevreañ outañ.

Klikit war **Aotren** da aotren an holl dremenerezh (enkas ha diskas) krouet gant ar arload-mañ adalek an urzhiataer ostiz lec'hel betek nep lec'h kas dre ar protokol IP kenglot ha war an holl borzhioù. Ma klikit war **Stankañ**, e vo nac'het ar moned d'ar Genrouedad dre ar protokol IP kenglot.

Da-heul ho respont e vo krouet ur reolenn. Arloet e vo ha listennet en daolenn. Ar wezh kentañ ma klasko an arload kevreañ, e vo arloet ar reolenn-mañ dre ziouer.




### **Pouezus**

Aotren an esaeoù kevreañ enkas a zeu eus chomlec'hioù IP pe eus domanioù oc'h sur e c'hallit kaout fiziañs enno.

## **9.3.2. Ouzhpennañ reolennoù gant an dorn**

Klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ ur reolenn** ha dibabit arventennoù ar reolenn. Dont a ra ar prenestr war wel :



#### Sifr 9.4. Ouzhpennañ ur reolenn

Evit ouzhpennañ ur reolenn maltouter nevez, grit diouzh an tennadoù-mañ :

1. Diuzit an arload a vo krouet ar reolenn maltouter nevez evitañ.

Evit diuzañ un arload, klikit war **Furchal**, lec'hiit-eñ, ha klikit war **OK**.

M'hoc'h eus c'hoant da grouiñ ur reolenn evit an holl arloadoù, askit **Arloañ ar reolenn-mañ ouzh an holl arloadoù**.

2. Diuzit ar protokol a vo arloet ar reolenn outañ.

Ur roll gant ar protokoloù stankañ a c'hallit kaout evit ho sikour da ziuzañ ar protokol-mañ-protokol. Diuzit ar protokol (a vo arloet ar reolenn outañ) diwar al lañser disachañ pe diuzit **An holl** evit diuzañ an holl brotokoloù.

En daolenn amañ dindan e vo kavet roll ar protokoloù a c'hall bezañ diuzet gant un deskriadenn verr eus pep hini anezho :

<b>Protokol</b>	<b>Deskriadur</b>
<b>ICMP</b>	ICMP eo an teskanv evit Internet Control Message Protocol – an astenn eus Internet Protocol (IP) eo. ICMP a ra gant pakadoù, enno fazioù, kontrolloù ha kemennadoù titouriñ. An urzhiad PING, da skouer, a implij ICMP da amprouiñ ur gevreadenn Kenrouedad.

<b>Protokol</b>	<b>Deskrivadur</b>
<b>TCP</b>	Transmission Control Protocol - TCP a dalvez da zaou urzhiataer da sevel ur gevreadenn ha da eskemm froudoù roadennoù. TCP a warant e vo kaset ar roadennoù ha gwarantiañ a ra ivez e vo resevet ar pakadoù en urzh m'int bet kaset.
<b>UDP</b>	User Datagram Protocol - UDP zo un doare treuzdougen diazezet war IP hag empennet evit kaout un askorad uhel. Alies e vez implijet UDP gant ar c'hoarioù hag an arloadoù video all.

3. Diuzit ober ar reolenn el lañser a zere.


<b>Ober</b>	<b>Deskrivadur</b>
<b>Aotren</b>	An arload diferet a vo aotreet da vont d'ar rouedad/Genrouedad en degouezhioù diferet.
<b>Berzañ</b>	An arload diferet a vo nac'het outañ ar moned d'ar rouedad/Genrouedad en degouezhioù diferet.

4. Ma'z eo ar protokol diuzet a-raok ur protokol TCP pe UDP, e c'hallit diferañ hag-eñ e rank ar reolenn bezañ arloet ouzh an arload pa ra evel servijer.

Askit **Aotren an urzhiataerioù all da gevreañ ouzh an arload-mañ** evit arloañ an ober-mañ ouzh an holl zarvoudoù rouedad. Evel-se ez aotreet pe e nac'hot ar gwir evit an arload-mañ da zigeriñ porzhioù.

M'hoc'h eus c'hoant hepken da arloañ an ober-mañ ouzh an tremenezh evit ar protokol UDP ha d'an tremenezh ha d'ar c'hevreadennoù evit ar protokol TCP, diaskit al log a zere.

Evit kefluniañ arventennoù araokaet evit ar reolenn, klikit war **Araokaet**. Dont a ray ur prenestr nevez war wel.



**Sifr 9.5. Arventennoù reolenn araokaet**

Gallout a rit kefluniañ an dibarzhioù-mañ :

- **Tu** - dibab tu an tremenerezh.

<i><b>Seurt</b></i>	<i><b>Deskrivadur</b></i>
<b>Er-maez</b>	Arloet e vez ar reolenn ouzh an tremenerezh diskas hepken.
<b>Enkas</b>	Arloet e vez ar reolenn ouzh an tremenerezh a ya e-barzh hepken.
<b>O vont er-maez pe o tont tre</b>	Ar reolenn a vez arloet d'an daou du.

- **Chomlec'h tarzh** - diferit ar chomlec'h tarzh.

Evit diferañ ar chomlec'h tarzh, diuzit ar seurt chomlec'h el lañser ha diferit an elfennoù goulennet. An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

<i><b>Seurt</b></i>	<i><b>Deskrivadur</b></i>
<b>An holl</b>	Arloet e vez ar reolenn ouzh an holl chomlec'hioù tarzh.

<b>Seurt</b>	<b>Deskrivadur</b>
<b>Ostiz</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe an tarzh un ostiz difer. Ret eo deoc'h skriverezañ chomlec'h IP an ostiz.
<b>Rouedad</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe an tarzh ur rouedad difer. Ret eo deoc'h skriverezañ ar chomlec'h IP ha maskl ar rouedad.
<b>Ostiz lec'hel</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe an tarzh an ostiz lec'hel. Ma implijit meur a etrefas rouedad, diuzit an etrefas rouedad a vo arloet ar reolenn outañ el lañser. M'hoc'h eus c'hoant e vefe arloet ar reolenn ouzh an holl ostizien lec'hel, diuzit <b>An holl</b> .
<b>Rouedad lec'hel</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe an tarzh ar rouedad lec'hel. Ma'z oc'h kevreet ouzh meur a rouedad, diuzit ar rouedad a vo arloet ar reolenn outi el lañser. M'hoc'h eus c'hoant e vefe arloet ar reolenn ouzh an holl rouedadoù lec'hel, diuzit <b>An holl</b> .

M'hoc'h eus diuzet TCP pe UDP da brotokol e c'hallit lakaat ur porzh pe un tachad etre 0 ha 65535. M'hoc'h eus c'hoant e vefe arloet ar reolenn ouzh an holl borzhioù, diuzit **An holl**.

- **Chomlec'h kas** - diferit ar chomlec'h kas.

Evit diferañ ar chomlec'h kas, diuzit ar seurt chomlec'h el lañser ha diferit ar roadennoù goulennet. An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

<b>Seurt</b>	<b>Deskrivadur</b>
<b>An holl</b>	Arloet e vez ar reolenn ouzh an holl chomlec'hioù kas.
<b>Ostiz</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe al lec'h kas un ostiz difer. Ret eo deoc'h skriverezañ chomlec'h IP an ostiz.
<b>Rouedad</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe al lec'h kas ur rouedad difer. Ret eo deoc'h skriverezañ ar chomlec'h IP ha maskl ar rouedad.
<b>Ostiz lec'hel</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe al lec'h kas an ostiz lec'hel. Ma implijit meur a etrefas rouedad, diuzit an etrefas rouedad a vo arloet ar reolenn outañ el lañser. M'hoc'h eus c'hoant e vefe arloet ar reolenn ouzh an holl ostizien lec'hel, diuzit <b>An holl</b> .

Seurt	Deskrivadur
<b>Rouedad lec'hel</b>	Ne vez ket arloet ar reolenn nemet e vefe al lec'h kas ar rouedad lec'hel Ma'z oc'h kevreet ouzh meur a rouedad, diuzit ar rouedad a vo arloet ar reolenn outi el lañser. M'hoc'h eus c'hoant e vefe arloet ar reolenn ouzh an holl rouedadoù lec'hel, diuzit <b>An holl</b> .

M'hoc'h eus diuzet TCP pe UDP da brotokol e c'hallit lakaat ur porzh pe un tachad etre 0 ha 65535. M'hoc'h eus c'hoant e vefe arloet ar reolenn ouzh an holl borzhioù, diuzit **An holl**.

- **Darvoudoù rouedad** - m'hoc'h eus diuzet TCP pe UDP da brotokol, diuzit an darvoud rouedad a vez arloet ar reolenn outañ.

Klikit war **OK** da serriñ prenestr an arventennoù araokaet.

Klikit war **Ouzhpennañ** da ouzhpennañ ar reolenn maltouter.

### 9.3.3. Merañ reolennoù

Gallout a rit gwelet ar reolennoù zo bet krouet betek-henn evit ar profil red en daolenn.

Askit al log **Argerzhoù reizhiad kuzh** evit kuzhat ar reolennoù a sell ouzh an argerzhoù reizhiad pe an argerzhoù BitDefender.

Emañ ar reolennoù er roll hervez o urzh kentwir, o kregiñ gant an nec'h, da lavaret eo emañ ar c'hentwir uhelañ gant ar reolenn gentañ. Klikit war **Kemmañ ur profil** evit mont d'an diskwel **Gwel dre ar munud** a-benn cheñch o c'hentwir dre o dilec'hiañ d'an nec'h pe d'an traoñ.

Evit dilemel ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Dilemel ar reolenn**.

Evit kemmañ ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Kemmañ ar reolenn** pe daouglikit war ar reolenn.




#### **Notenn**

Ui lañser kendestenn a c'haller kaout ivez. Ennañ emañ an dibarzhioù-mañ : **Ouzhpennañ ur reolenn**, **Dilemel ar reolenn** ha **Kemmañ ar reolenn**.

### 9.3.4. Kemmañ ar profiloù

Gallout a rit kemmañ ur profil dre glikañ war **Kemmañ ar profil**. Dont a ray ar prenestr-mañ war wel :



### Siffr 9.6. Arventennoù dre ar munud

Rannet e vez ar reolennoù etre 2 rummad : ar reolennoù enkas hag ar reolennoù diskas. Gallout a rit gwelet implij hag arventennoù pep reolenn (chomlec'h tarzh, chomlec'h kas, porzhioù tarzh, porzhioù kas, ober, h.a.)

Evit dilemel ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton **Dilemel ar reolenn**. Evit dilemel an holl reolennoù, klikit war ar bouton **Naetaat ar roll**. Evit kemmañ ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton **Kemmañ ar reolenn** pe daouglakit warni. Evit diweredekaat ur reolenn evit ur mare, hep he dilemel, diaskit al log a glot ganti.

Gallout a rit kreskiñ pe digreskiñ kentwir ur reolenn. Klikit war ar bouton **Uhelaat** da greskiñ kentwir ar reolenn diuzet eus ul live, pe klikit war ar bouton **Izelaat** da zigreskiñ kentwir ar reolenn diuzet eus ul live. Evit reiñ ar c'hentwir uhelañ d'ur reolenn, klikit war ar bouton **Dilec'hiañ d'ar renk kentañ**. Evit reiñ ar c'hentwir izelañ d'ur reolenn, klikit war ar bouton **Dilec'hiañ d'ar renk diwezhañ**.




**Notenn**

Ul lañser kendestenn a c'haller kaout ivez. Ennañ emañ an dibarzhioù-mañ : **Ouzhpennañ ur reolenn, Kemmañ ar reolenn, Dilemel ar reolenn, Uhelaat, Izelaat, Dilec'hiañ d'ar renk kentañ, Dilec'hiañ d'ar renk diwezhañ ha Naetaat ar roll.**

Klikit war **Mat eo** evit klozañ ar prenestr.

### 9.3.5. Adderaouekaat ar profiloù

Gallout a ra an implijerien araokaet adkefluniañ profil ar maltouter a-benn gwellekaat ar gwarez anezhañ, pe e bersonelaat diouzh o ezhommoù. Evit adderaouekaat profil ar maltouter, klikit war **Adderaouekaat ar profil**. Dont a ra ar prenestr war wel :



**Sifr 9.7. Adderaouekaat ar profil**

Gallout a rit kefluniañ an dibarzhioù-mañ :

- **Anv ar profil** - skriverezit un anv nevez en takad testenn.
- **Reolennoù** - diferit peseurt reolennoù zo da grouiñ evit arloadoù ar reizhiad.

An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

<b>Dibarzh</b>	<b>Deskrivadur</b>
<b>Dinoañ emgefreek</b>	Lezel a ra BitDefender da zinoiñ ar c'hefluniadur rouedad ha da grouiñ un hollad reolennoù diazez dereat.

<i>Dibarzh</i>	<i>Deskrivadur</i>
<b>Rouedad fiziadus</b>	Krouiñ a ra un hollad reolennoù diazez dereat ouzh ur rouedad fiziadus.
<b>Kevreadenn Kenrouedad eeun</b>	Krouiñ a ra un hollad reolennoù diazez dereat ouzh ur gevreadenn eeun ouzh ar Genrouedad.

- **Takadoù** - a wir an **Dinoañ emgfreek** da lezel BitDefender da grouiñ takadoù dereat ouzh ar rouedadoù dinoet.

Klikit war **OK** da serriñ ar prenestr ha da adderaouekaet ar profil.




**Pouezus**

Ma tibabit adkefluniañ profil ar maltouter e vo kollet an holl reolennoù hoc'h eus ouzhpennet er rann-mañ.

## 9.4. Arventennoù araokaet

Evit kefluniañ arventennoù araokaet maltouter BitDefender, klikit war **Maltouter > Araokaet** e letrin an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



### Sifr 9.8. Arventennoù araokaet

Er rubrikenn-mañ e c'hallit kefluniañ arventennoù araokaet maltouter BitDefender. Gant an arventennoù araokaet e c'hallit diferañ ar reolennoù evit an tremenezh ICMP (**Arventennoù an tremenezh ICMP**) ha stankañ an tremenezh liesskign, rannañ ho kevreadenn Kenrouedad, pe lakaat hoc'h urzhiataer da vezañ diwelus evit an drougiantoù hag ar breizherien (**Perzhioù**).

#### 9.4.1. Kefluniañ an arventennoù silañ ICMP

El lañser e c'hallit dibab unan eus ar politikerezhioù-mañ evit silañ an tremenezh ICMP :

- **Aotren an holl dremenezh ICMP** - a aotre an holl dremenezh ICMP.
- **Stankañ an holl dremenezh ICMP** - a stank an holl dremenezh ICMP.
- **Personelaat ar silañ ICMP** - a bersonela an doare ma vez silet an tremenezh ICMP. Gallout a reot dibab ar seurtoù pakadoù ICMP da aotren.

An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

Dibarz	Deskrivadur
<b>Heklev</b>	Gant an dibarz-mañ e vez gweredekaet ar c'hemennadoù Respont Heklev ha Goulenn Heklev. Ar Goulenn Heklev zo ur c'hemennad ICMP a gas ur pakad roadennoù d'an ostiz hag a c'hortoz ma teufe ar roadennoù en-dro en ur Respont Heklev. Ret eo d'an ostiz respont d'an holl C'houlennnoù Heklev gant ur Respont Heklev, ennañ ar memes roadennoù dres hag ar re resevet er c'hemennad goulenn. Ar Respont Heklev zo ur c'hemennad ICMP krouet da respont d'ur c'hemennad Goulenn Heklev, ha ret eo evit an holl ostizoù ha routaerioù.
<b>Adkas</b>	Anv zo eus ur c'hemennad ICMP a ro da c'houzout d'un ostiz e tle adkas e ditour routa (evit kas ar pakadoù dre un hent all). Ma klask an ostiz kas roadennoù dre ur routaer (R1) hag ur routaer all (R2) evit tizhout an ostiz, pa vez un hent eeun da gaout adalek an ostiz betek R2, an adkas a gelaouo ostiz an hent-mañ. Ar routaer a gaso c'hoazh an datagramm orin d'e lec'h kas. Koulskoude, ma vez titouroù routa en datagramm, ne vo ket kaset ar c'hemennad-mañ, ha pa vefe un hent gwelloc'h da gaout.
<b>Lec'h kas diziraezus</b>	Anv zo eus ur c'hemennad ICMP krouet gant ar routaer evit reiñ da c'houzout d'an arval ne c'haller ket tizhout ar resever, daoust d'an datagramm kaout ur chomlec'h liesskign. Abegoù ar c'hemennad-mañ a c'hall bezañ ar gevreadenn fizikel ouzh an ostiz ha n'eus ket anezhi (hed didermen), ar protokol pe ar porzh ha n'eo ket oberiant, pe roadennoù bruzunet tra ma vez gweredekaet an dibarz 'arabat bruzunañ'.
<b>Nep seurt pakad all</b>	Pa vez gweredekaet an dibarz-mañ e tremen nep pakad estreget <b>Heklev</b> , <b>Lec'h kas diziraezus</b> pe <b>Adkas</b> .

## 9.4.2. Kefluniañ arventennoù arakaet ar maltouter

Hegerz eo an arventennoù-mañ eus ar maltouter :

- **Stankañ an holl dremenerezh liesskign** - a daol an holl bakadoù liesskign resevet.

An tremenerezh liesskign zo un doare tremenerezh evit ur strollad bennak e-barzh ur rouedad. Kaset e vez ar pakadoù d'ur chomlec'h difer ma c'hall an arvalien liesskign o resev ma'z eo mat dezho.

Da skouer, un ezel eus ur rouedad, dezhañ un tuner TV, a c'hall skignañ ar froud video er mod skignañ (dre e gas da bep ezel eus ar rouedad) pe er mod liesskign (dre gas ar froud video d'ur chomlec'h difer). An urzhiataerioù gouest da verañ al liesskign a c'hall asantiñ d'ar pakad pe e zisteurel. Ma vez asantet e c'hall ar froud video bezañ gwelet gant an arvalien liesskign.

Re a dremenerezh liesskign a c'hall beveziñ loazioù betek re ha kemer re a vann drafet. Dre weredekaet an dibarzh-mañ e vo distaolet an holl bakadoù liesskign resevet. Koulskoude ne erbeder ket gweredekaet an dibarzh-mañ.

- **Gweredekaet ar rannañ kevreadenn Kenrouedad (ICS)** - a weredeka ar rannañ kevreadenn Kenrouedad er mod ICS.



### **Notenn**

An dibarzh-mañ ne weredeka ket ICS ent emgfreek war ho reizhiad. Ne ra nemet aotren an doare kevreañ-mañ betek-gouzout en gweredekafe diwar ho reizhiad korvoiñ.

Ar mod ICS (Internet Connection Sharing) a lez izili ur rouedad lec'hel da gevreañ ouzh ar Genrouedad a-dreuz hoc'h urzhiataer. Talvoudus eo p'ho pezh ur seurt kevreadenn arbennik (da sk. ur gevreadenn diorjal) ha p'ho pezh c'hoant d'he rannañ gant izili all eus ho rouedad.

Rannañ ho kevreadenn Kenrouedad gant izili ur rouedad lec'hel a dalvez e vez bevezet muioc'h a loazioù, hag a c'hall emplegañ riskloù. Implijout a ra ivez darn eus ho porzhioù (ar re digoret gant an izili a implij ho kevreadenn Kenrouedad).

- **Mod dre laer** - a laka hoc'h urzhiataer da vezañ diwelus evit an drougiantoù hag ar breizherien.

Un doare eeun da gavout hag-eñ eo tizhus hoc'h urzhiataer eo kevreañ ouzh e borzhioù da welet daoust ha respont a reont. Graet e vez "Skann porzh" eus an dra-se.

An hiniennoù pe ar programoù drouk n'o deus ket ezhomm da c'houzout hag-eñ ez eus eus hoc'h urzhiataer zoken. An dibarzh **Mod dre laer** a viro ouzh ho mekanik da respont d'an esaeoù a glask kavout peseurt porzhioù zo digor.

- **Evezhiañ ar c'hemmoù er programoù zo ur reolenn diwar o fenn gant ar maltouter** - a gontroll an holl arloadoù a glask kevreañ ouzh ar Genrouedad evit gouzout hag-eñ int bet kemmet abaoe m'eo bet lakaet ar reolenn a gontroll o moned. Ma'z eo bet kemmet an arload, e vo goulennet ouzhoc'h gant ur c'hemenn diwall aotren pe berzañ e voned d'ar Genrouedad.

Peurliesañ e vez kemmet an arloadoù gant hizivadennoù. Koulskoude ez eus ur riskl e vefent kemmet gant drougiantoù zo o fal kontammiñ hoc'h urzhiataer hag urzhiataerioù all eus ar rouedad.



#### **Notenn**


Erbediñ a reomp deoc'h lezel an dibarzh-mañ diuzet ha chom hep aotren ar moned, nemet d'an arloadoù zo bet kemmet goude m'eo bet krouet ar reolenn a gontroll o moned.

Fiziadus e vez an arloadoù sinet, sañset, hag ul live surentez uheloc'h o devez. Askit al log **Dianavezout ar c'hemmoù argerzh evit an arloadoù sinet** da aotren an arloadoù sinet kemmet da gevreañ ouzh ar Genrouedad hep resev kemennadoù diwall diwar-benn an darvoud-mañ.

- **Gweredekaat ar c'hemennoù diwall Wi-Fi** - a weredeka ar c'hemennoù diwall Wi-Fi
- **Apply the same (generic) profile to all new networks** - creates a default (generic) **firewall profile**, named `Generic Network`, and applies it whenever a new network configuration is detected. If you go back to an old network configuration for which a firewall profile exists, the respective firewall profile is loaded instead of the generic profile.

## **9.5. Kontroll ar c'hevreadennoù**

Evit kontrollañ obererezh ar rouedad/Genrouedad (dre TCP hag UDP) rummet dre arload hag evit digeriñ deizlevr maltouter BirDefender, klikit war **Maltouter > Obererezh** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



### Sifr 9.9. Kontroll ar c'hevreadennoù

Gallout a rit gwelet an tremenezh hollek rummet dre arloadoù. Evit pep arload e c'hallit gwelet ar c'hevreadennoù hag ar porzhioù digor, stadedoù diwar-benn an tremenezh a ya e-barzh pe er-maez, hag an niver hollek a roadennoù kaset/resevet.

Gant ar prenestr-mañ e vez diskouezet obererezh ar rouedad/Genrouedad war amzer real. Pa vez serret kevreadennoù pe porzhioù e tamsteuz ar stadedoù a glot ganto, betek steuziañ a-benn ar fin. Heñvel dra evit an holl stadedoù a glot gant un arload a serrit hag a c'han tremenezh pe en deus porzhioù digor.

Klikit war **Stankañ** da grouiñ reolennoù hag a strisha an tremenezh dre an arloadoù, ar porzhioù pe ar c'hevreadennoù diuzet. Goulennet e vo diganeoc'h kadarnaat ho tibab. Gallout a rit mont d'ar reolennoù er rubrikenn **Tremenezh** evit lakaat arventennoù pishoc'h.



#### Notenn

Evit stankañ un arload, ur porzh pe ur gevreadenn, e c'hallit ivez klikañ a-zehou warnañ ha diuzañ **Stankañ**.

Klikit war **Lazhañ** da echuiñ holl instañoù un argerzh diuzet. Goulennet e vo diganeoc'h kadarnaat ho tibab.



**Notenn**

Evit lazhañ un argerzh e c'hallit ivez klikañ a-zehou warnañ ha diuzañ **Lazhañ**.

Klikit war **Ezporzhiañ ar skramm** da ezporzhiañ ar roll d'ur restr .txt.

Evit kaout roll klok an darvoudoù a sell ouzh implij ar vodulenn Maltouter (gweredekaat/diweredekaat ar maltouter, stankañ an tremenezh, gweredekaat ar mod dre laer, kemmañ an arventennoù, arloañ ur profil), pe ganet gant an obererezhioù dinoet gantañ (dielfennañ ar porzhioù, stankañ an esaeoù kevreañ pe an tremenezh hervez ar reolennoù arventennet), askit restr deizlevr ar Maltouter BitDefender a gavot dre glikañ war **Diskouez an deizlevrioù**. Emañ ar restr e renkell Restroù Boutin implijer red Windows, en hent moned : ...BitDefender\BitDefender Firewall\bdfirewall.txt.

## 9.6. Takadoù rouedad

Un takad zo ur chomlec'h IP (pe un hollad chomlec'hioù IP) zo bet krouet ur reolenn arbennik evitañ en ur profil. Gallout a ra ar reolenn-se, pe lezel implijerien ar rouedad da zont hep bevenn ebet d'hoc'h urzhiataer (takad fiziadus), pe er c'hontrol digenvezañ hoc'h urzhiataer diouzh urzhiataerioù ar rouedad (takad n'eo ket fiziadus).

Dre ziuver e tino BitDefender ar rouedad emao'h kevreet outi ent emgefreek, hag ouzhpennañ a ra un takad diouzh kefluniadur ar rouedad.



**Notenn**

Ma'z oc'h kevreet ouzh meur a rouedad e c'hall meur a dakad bezañ ouzhpennet, diouzh ar c'hefluniadur anezho.

Takadoù fiziadus a vez ouzhpennet dre ziuver evit ar c'hefluniadurioù rouedad-mañ :

- **IP prevez hep treuzell** - Emañ an urzhiataer en ur rouedad lec'hel (LAN) ha n'eo ket kevreet ouzh ar Genrouedad.
- **IP prevez gant ur c'hontroller domani dinoet** - Emañ an urzhiataer e-barzh ur rouedad LAN ha kevreet eo ouzh un domani.

Takadoù n'int ket fiziadus a vez ouzhpennet dre ziuver evit ar c'hefluniadurioù rouedad-mañ :





fiziadus (er gêr pe etre mignoned), e c'hallit kaout c'hoant da gemmañ an takad kevelet. Evit gallout rannañ dafar gant implijerien all ar rouedad e rankit kefluniañ ar rouedad evel takad fiziadus.

Evit dilemel un takad, diuzit-eñ ha klikit war ar bouton  **Dilemel an takad**.

## 9.6.1. Ouzhpennañ takadoù

Gallout a rit ouzhpennañ takadoù gant an dorn. Gant se e c'hallit, da skouer, rannañ restroù en ur rouedad diorjal digor gant ho mignoned hepken (dre ouzhpennañ o urzhiataerioù evel takadoù fiziadus), pe berzañ urzhiataer ur rouedad fiziadus (dre e ouzhpennañ evel takad n'eo ket fiziadus).

Evit ouzhpennañ un takad nevez, klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ un takad**. Dont a ra ar prenestr war wel :



**Sifr 9.11. Ouzhpennañ un takad**

Evit ouzhpennañ un takad, grit evel-henn :

1. Diuzit un urzhiataer eus ur rouedad lec'hel pe ur rouedad lec'hel en he fezh hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ evel takad. Gallout a rit implijout unan eus an hentennoù-mañ :
  - Evit ouzhpennañ un urzhiataer difer, diuzit **Urzhiataer** ha pourchasis e chomlec'h IP.
  - Evit ouzhpennañ ur rouedad difer, diuzit **Rouedad** ha pourchasis he chomlec'h IP hag he maskl.

- Furchit ar rouedadoù lec'hel da glask ha da ouzhpennañ un urzhiataer pe ur rouedad.

Evit furchal ar rouedadoù lec'hel, diuzit **Furchal ar rouedad lec'hel** , ha klikit war **Furchal**. Dont a ray ur prenestr nevez war wel, o tiskouez an holl rouedadoù oc'h kevreet outo hag holl izili pep rouedad.

Diuzit er roll an urzhiataer pe ar rouedad hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ evel takad, ha klikit war **OK**.

2. Diuzit el lañser ar seurt takad hoc'h eus c'hoant da grouiñ (fiziadus pe n'eo ket fiziadus).
3. Klikit war **OK** da ouzhpennañ an takad.

## Rann 10. Enepstrob

BitDefender Antispam a implij nevezadennoù teknologel eus ar vegenn ha siloù enepstrob diouzh reolennoù ar greanterezh. Ganto e c'hall skarzhañ ar stroboù a-raok na dizhfent boest-lizheroù an implijer.

E rann **Enepstrob** an dornlevr-mañ emañ ar rubrikennoù-mañ :

- Ober anaoudegezh gant an enepstrob
- Stad an Enepstrob
- Arventennoù Enepstrob
- Lakaat e-barzh an arvalien postelerezh

### 10.1. Ober anaoudegezh gant an enepstrob

Ur gudenn a ya war gresk eo ar Strob, evit an hiniennoù hag an aozadurioù war un dro. N'ho pije ket c'hoant e welfe ho pugale posteloù zo, e riskl emaoç'h da goll ho labour (abalamour ma kollit re a amzer pe ma resevit posteloù pornografek e chomlec'h ho purev), ha ne c'hallit ket mirout ouzh an dud da gas. Ar pep gwellañ e vefe paouez d'o resev. Siwazh, meur a stumm ha meur a vent zo gant ar Strob, ha kalz zo.

#### 10.1.1. Siloù enepstrob

Keflusker Enepstrob BitDefender a implij seizh sil disheñvel evit gwareziñ ho poest-lizheroù diouzh ar STROB : **Roll Gwenn**, **Roll Du**, **Sil strobad arouezennoù**, **Sil Skeudenn**, **Sil URL**, **Sil Heuristik** ha **Sil Bayesian**.



##### **Notenn**

Gallout a rit gweredekaat/diweredekaat pep hini eus ar siloù-mañ er vodulenn **Enepstrob**, rubrikenn **Arventennoù**.

#### **Roll Gwenn / Roll Du**

An darn vrasañ eus an implijerien a gehent ingal gant ur strollad tud pe a resev kemennadoù a-berzh embregerezhioù pe kompagnunezhioù eus ar memes domani. Dre implijout ar **rolloù mignoned/stroberien** e c'hallit didermeañ aes peseurt tud hoc'h eus c'hoant da resev posteloù diganto (mignoned), petra bennak a vefe er c'hemennad, ha peseurt tud n'hoc'h eus ket c'hoant da gaout keloù diganto (stroberien).



### **Notenn**

**Roll Gwenn / Roll Du** a anavezet ivez evel **Roll ar Vignoned / Roll ar Stroberien**.

Gallout a ra ar **rolloù mignoned/stroberien** bezañ meret adalek **Letrin an arventennoù** pe ar **Varrenn ostilhoù Enepstrob** zo e-barzh an arvalien postelerezh implijetañ.



### **Notenn**

Hoc'h aliañ a reomp da ouzhpennañ anvioù ho mignoned hag o chomlec'hioù postel d'ar **Roll Mignoned**. BitDefender ne verz ket ar c'hemennadoù a zeu eus ar roll-se ; ouzhpennañ mignoned ho sikour da lezel ar c'hemennadoù reizh da dremen.

## **Sil arouezennoù**

Stroboù a-leizh a vez skrivet gant arouezennoù kirillek ha/pe aziat. Gant ar sil arouezennoù e vez dinoet ar seurt kemennadoù-se, ha lakaet da STROB.

## **Sil Skeudenn**

Ken diaes eo deuet da vezañ tremen hebiou ar sil heuristek ma vez leuniet muioc'h-mui ar voest degemer gant kemennadoù enno ur skeudenn hepken gant un endalc'had n'eo ket bet goulnnet. Evit talañ ouzh ar gudenn-se ez eus e BitDefender ur **Sil skeudenn** a geñver sinadur skeudenn ar postel gant hini diaz roadennoù BitDefender. Ma klot ar sinadur gant hini an diaz e vo lakaet ar postel da STROB.

## **Sil URL**

An darn vrasañ eus ar stroboù zo enno liammoù ouzh lec'hioù war ar Web. Ar re-se a vez alies pajennoù bruderezh ma c'haller ober prenaadennoù, hag implijet e vezont a-wezhioù evit ar pesketa.

BitDefender a zalc'h un diaz roadennoù ennañ liammoù evel-se. Ar sil URL a geñver holl liammoù URL ur c'hemennad gant re e ziaz roadennoù. Ma klot ul liamm gant re an diaz roadennoù, e vez lakaet ar c'hemennad da STROB.

## **Sil heuristek**

Ar **Sil Heuristek** a ra amprouadoù war holl barzhioù ar c'hemennad (n'eo ket an talbenn hepken, met ivez korf an destenn en html pe er furmad testenn), o klask gerioù difer, frazennoù, liammoù pe doareennoù all eus ar stroboù. Diouzh disoc'hoù an dielfennadur e vez ouzhpennet un notenn STROB d'ar c'hemennad.

Ar sil a zino ivez ar c'hemennadoù lakaet da O TENNAÑ SPLANN D'AR REVELEZH en o linenn danvez hag o enroll evel STROB.



### Notenn

Abaoc'an 19 a viz Mae 2004, e rank ar stroboù gant un endalc'had revel enklozañ ar c'hemenn O TENNAÑ SPLANN D'AR REVELEZH el linenn danvez, dindan boan a dell-gastiz evit bezañ torret al lezenn.

## Sil Bayesian

Ar vodulenn **Sil Bayesian** a urzh ar c'hemennadoù war-bouez titouroù stadegel diwar-benn reveziadennoù lod gerioù er c'hemennadoù lakaet da STROB e-keñver ar re zo lakaet da N'EO KET STROB (ganeoc'h-c'hwi pe gant ar sil heuristik).

Evel-se, ma teu war wel ur ger 4 lizherenn bennak aliesoc'h er stroboù, eo reizh goulakaat e vo sur a-walc'h ur STROB eus ar c'hemennad kentañ gant ar ger-se ennañ. Sellet e vez ouzh holl c'herioù perzhiek ar c'hemennad. Dre genaozañ an titouroù stadegel, e vez jedet pegen gwirheñvel eo e vefe ur STROB eus ar c'hemennad.

Un doareenn dedennus all zo gant ar vodulenn-mañ : gallout a ra bezañ embreget. En em ober a ra buan ouzh ar seurt kemennadoù resevet gant an implijer, hag enrollañ a ra titouroù diwar-benn ar c'hemennadoù-se. Evit mont en-dro en un doare efedus e rank ar sil bezañ embreget dre ziskouez dezhañ standilhonoù eus stroboù hag eus kemennadoù reizh. A-wezhioù e tle ar sil bezañ reizhet ivez pe gemer un diviz fall.



### Pouezus

Gallout a rit reizhañ ar vodulenn Vayesian dre implijout ar boutonioù **Strob** ha **N'eo ket Strob** er **varrenn ostilhoù Enepstrob**.



### Notenn

Bewezh ma reot un hizivadenn :

- e vo ouzhpennet sinadurioù skeudenn nevez d'ar **Sil Skeudenn**.
- e vo ouzhpennet liammoù nevez d'ar **Sil URL**.
- e vo ouzhpennet reolennoù nevez d'ar **Sil NeuNet (Heuristik)**.


Gant se e vo gwellaet efedusted ar c'heflusker Enepstrob.

Evit ho kwareziñ diouzh ar Stroberien e c'hall BitDefender ober hizivadennoù emgefreak.

Lezit an dibarzh **Hizivaat emgefreak** gweredekaet.

## 10.1.2. Mont en-dro an enepstrob

Diskouez a ra ar brastres amañ dindan penaos ez a BitDefender en-dro.



Sifr 10.1. Mont en-dro an enepstrob

Ar siloù enepstrob er brastres amañ a-us (**Roll Gwenn** , **Roll Du**, **Sil Arouezennoù**, **Sil Skeudenn**, **Sil URL**, **Sil Heuristik** ha **Sil Bayesian**) a vez implijet a-gevret gant BitDefender da zidermenañ hag-eñ e vez lezet ar postel-mañ-postel da zont d'ho **poest degemer**.

Kement postel a zeu eus ar Genrouedad a vez gwiriet da gentañ gant ar **Roll Gwenn/Roll Du** . Ma vez kavet chomlec'h ar c'haser er **Roll Gwenn** e vo dilec'hiet ar postel war-eeun d'ho **Poest degemer**.

A-hend-all e tapo ar sil **Roll Du** chomlec'h ar c'haser, hag gwiriañ hag-eñ emañ er roll. Ma'z emañ ar chomlec'h er roll e vo lakaet ar postel da STROB ha dilec'hiet d'ar renkell **Strob** (e **Microsoft Outlook**).

A-hend-all e wirio ar **Sil arouezennoù** hag-eñ eo skrivet ar postel gant arouezennoù kirillek pe aziat. Ma'z emañ kont evel-se, e vo lakaet ar postel da Strob ha dilec'hiet d'ar renkell **Strob**.

Ma ne vez ket skrivet ar postel gant arouezennoù aziat pe kirillek, e vo kaset d'ar **Sil Skeudenn**. Gant ar **Sil Skeudenn** e vo dinoet an holl bosteloù zo enno skeudennoù stag gant un endalc'had strob.

Ar **Sil URL** a glasko liammoù hag o c'heñverio gant diaz roadennoù BitDefender. Ma vez kavet ul liamm en diaz, e vo lakaet un notenn STROB d'ar postel.

Ar **Sil Heuristik** a ray a bep seurt amrouadoù war barzhioù ar c'hemennad, o klask gerioù, frazennoù, liammoù hag doareennoù all eus ar STROB. Lakaet e vo ivez un notenn Strob d'ar postel evel-se.



**Notenn**

Ma tenn danvez ar postel SPLANN D'AR REVELEZH, e vo lakaet da STROB gant BitDefender.

Ar vodulenn **Sil Bayesian** a ziefenno ar c'hemennad pelloc'h gant titouroù stadedel diazezet war pegen alies e teu gerioù difer war wel e kemennadoù lakaet da STROB e-keñver ar re na vezont ket lakaet da STROB (ganeoc'h pe gant ar sil heuristek). Ouzhpennañ a ray ivez un notenn strob d'ar postel.

Lakaet e vez ar c'hemennad da Strob pa vez sammad an notennoù (notenn URL + notenn heuristek + notenn Bayesian) en tu all d'an notenn STROB evit ur c'hemennad (lakaet gant an implijer er rubrikenn **Enepstrob** evel live gouzañvusted).




### **Pouezus**

Ma implijit un arval postel estreget Microsoft Outlook pe Microsoft Outlook Express, ez erbeder deoc'h krouiñ ur reolenn da zilec'hiañ ar posteloù lakaet da STROB gant BitDefender d'ur renkell personelaet. BitDefender a lakay ar rakger [STROB] da zanvez ar posteloù lakaet da STROB.

## **10.2. Stad an Enepstrob**

Evit kefluniañ ar gwarez enepstrob, klikit war **Enepstrob > Stad** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



## Sifr 10.2. Stad an Enepstrob

Er rann-mañ e c'hallit kefluniañ ar vodulenn **Enepstrob** ha gwelet titouroù diwar-benn hec'h obererezh.



### **Pouezus**

Evit mirout ouzh ar stroboù da zont en ho **Poest degemer**, lezit ar **sil Enepstrob** gweredekaet.

Er rubrikenn **Stadegoù** e c'hallit sellet ouzh ar stadegoù a denn d'ar vodulenn Enepstrob. Kinniget e vez an disoc'hoù dre zalc'h (abaoe m'hoc'h eus loc'hoc'h urzhiaer) pe gallout a rit sellit ouzh un diverradur eus an obererezh enepstrob (abaoe m'eo bet staliet ar sil Enepstrob).

Evit kefluniañ ar vodulenn **Enepstrob** eo ret ober evel-henn :

## 10.2.1. Tennad 1 diwar 2 - Lakaat al live gouzañvusted

Gallout a rit dibab al live gwareziñ a vo diouzh hoc'h ezhommoù surentez. Dilec'hiit ar reti war ar skeul evit dibab al live a zere.

Bez' ez eus 5 live gouzañvusted :

<b>Live gouzañvusted :</b>	<b>Deskrivadur</b>
<b>Gouzañvus</b>	<p>Kinnig a ra gwarez evit ar c'hontoù a resev ur bern posteloù kenwerzhel reizh.</p> <p>Ar sil a lezo an darn vrasañ eus ar posteloù da dremen, met ober a ray un toullad "re negativel faos" (Stroboù lakaet da bosteloù reizh).</p>
<b>Gouzañvus da Gerreizh</b>	<p>Kinnig a ra gwarez evit ar c'hontoù a resev un nebeud posteloù kenwerzhel.</p> <p>Ar sil a lezo an darn vrasañ eus ar posteloù da dremen, met ober a ray un toullad "re negativel faos" (Stroboù lakaet da bosteloù reizh).</p>
<b>Kerreizh</b>	<p>Kinnig a ra gwarez evit ar c'hontoù postel standart.</p> <p>Ar sil a verzo an darn vrasañ eus ar stroboù, hag a lezo ar re bozitivek faos hebiou.</p>
<b>Kerreizh da Dagus</b>	<p>Kinnig a ra ur gwarez evit ar c'hontoù a resev ingal un niver bras a stroboù.</p> <p>Ar sil a lezo nebeut-kenañ a stroboù da dremen, met gallout a ra ober re bozitivek faos (posteloù reizh lakaet da Strob).</p> <p>Kefluginn ar <b>roll mignoned / stroberien</b> hag embregit ar <b>c'heflusker deskiñ bayesian</b> a-benn digreskiñ an niver a re bozitivek faos.</p>
<b>Tagus</b>	<p>Kinnig a ra gwarez d'ar c'hontoù a resev ingal un niver bras a stroboù.</p> <p>Ar sil a lezo nebeut-kenañ a stroboù da dremen, met gallout a ra ober re bozitivek faos (posteloù reizh lakaet da Strob).</p>

**Live gouzañvusted :****Deskriudadur**

Ouzhpennañ ho tarempredoù d'ar **roll mignoned** a-benn digreskiñ an niver a re bozitivek faos.

Evit lakaat al live gwarez dre ziouer (**eus Kerreizh da Dagus**), klikit war **Live dre ziouer**.

## 10.2.2. Tennad 2 diwar 2 - Leuniañ ar roll chomlec'hioù

Er roll chomlec'hioù ez eus titouroù diwar-benn ar chomlec'hioù postel a gas deoc'h posteloù reizh pe strobou.



### Roll mignoned


Ar **roll mignoned** zo ur roll eus ar chomlec'hioù postel oc'h prest da zegemer posteloù diganto, petra bennak a vefe o endalc'had. Morse ne vo lakaet posteloù ho mignoned da strob, ha pa dennfe o endalc'had d'ar strob.



#### Notenn


Kement postel a zeu eus ur chomlec'h eus ar **roll mignoned** a vo lakaet ent emgefreek en ho poest degemer ha ne vo ket tretet pelloc'h.

Evit merañ ar **Roll mignoned**, klikit war  (a glot gant ar **Roll mignoned**) pe war ar bouton  **Mignoned** er **varrenn ostilhoù Enepstrob**.



### Sifr 10.3. Roll mignoned


Amañ e c'hallit ouzhpennañ pe lemel enmontoù eus ar **roll mignoned**.

M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ ur chomlec'h postel, askit an dibarzh **Chomlec'h Postel**, skriverezit-efñ ha klikit war . Dont a ray ar chomlec'h war wel er **roll mignoned**.



#### **Pouezus**

Ereadur : anv@domani.com.



M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ un domani, askit an dibarzh **Anv domani**, skriverezit-efñ ha klikit war . Dont a ray an domani war wel er **roll mignoned**.



#### **Pouezus**

Ereadur :

- @domani.com, \*domani.com ha domani.com - an holl bosteloù a zeu eus domani.com a vo lakaet d'ho **Poest degemer** petra bennak a vefe o endalc'had ;
- \*domani\* - an holl bosteloù eus domani (petra bennak a vefe an astenn) a vo lakaet d'ho **Poest degemer** petra bennak a vefe o endalc'had ;
- \*com - An holl bosteloù gant com en o anv domani a vo lakaet d'ho **Poest degemer** petra bennak a vefe o endalc'had ;

Evit dilemel un draezenn eus ar roll, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Lemel**. Ma klikit war ar bouton  **Goulloñ ar roll** e tilamot holl enmontoù ar roll, met diwallit : dibosupl e vo o adtapout.

Implijit ar boutonioù  **Enrollañ**/  **Kargañ** da enrollañ/gargañ ar **roll mignoned** d'al lec'h-mañ-lec'h. Ar restr he do un astenn .owl.

Evit dilemel endalc'had ar roll red pa gargit ur roll enrollet a-raok, diuzit **Goulloñ ar roll red pa garger**.



#### **Notenn**

Hoc'h aliañ a reomp da ouzhpennañ anvioù ho mignoned hag o chomlec'hioù postel d'ar **Roll Mignoned**. BitDefender ne verz ket ar c'hemennadoù a zeu eus ar roll-se ; ouzhpennañ mignoned ho sikour da lezel ar c'hemennadoù reizh da dremen.

Klikit war **Arloañ** hag **OK** da enrollañ ha da serriñ ar **roll mignoned**.



## **Roll Stroberien**


Ar **roll stroberien** zo ur roll eus ar chomlec'hioù postel n'hoc'h eus ket c'hoant da resev postel ebet anezho, petra bennak a vefe e endalc'had.



#### **Notenn**


Kement postel a zeu eus ur chomlec'h eus ar **roll Stroberien** a vo merket evel STROB ent emgrefek ha ne vo ket tretet pelloc'h.

Evit merañ ar **roll Stroberien**, klikit war  (a glot gant ar **roll Stroberien**) pe war ar bouton  **Stroberien** er **varrenn ostilhoù Enepstrob**.



#### Sifr 10.4. Roll Stroberien


Amañ e c'hallit ouzhpennañ pe lemel stroberien eus ar **roll Stroberien**.

M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ ur chomlec'h postel, askit an dibarzh **Chomlec'h Postel**, skriverezit-eñ ha klikit war . Dont a ray ar chomlec'h war wel er **roll Stroberien**.



#### **Pouezus**

Ereadur : anv@domani.com.



M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ un domani, askit an dibarzh **Anv domani**, skriverezit-eñ ha klikit war . Dont a ray an domani war wel er **roll Stroberien**.



#### **Pouezus**

Ereadur :

- @domani.com, \*domani.com ha domani.com - an holl gemennadoù a zeu eus domani.com a vo merket evel STROB ;
- \*domani\* - an holl gemennadoù eus domani (petra bennak a vefe an astenn) a vo merket evel STROB ;
- \*com - an holl gemennadoù a zeu eus un domani gant an astenn com a vo merket evel STROB.

Evit dilemel un draezenn eus ar roll, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Lemel**. Ma klikit war ar bouton  **Goulloñ ar roll** e tilamot holl enmontoù ar roll, met diwallit : dibosupl e vo o adaptout.

Implijit ar boutonioù  **Enrollañ**/  **Kargañ** da enrollañ/gargañ ar **roll Stroberien** d'al lec'h-mañ-lec'h. Ar restr he do un astenn .bwl.

Evit dilemel endalc'had ar roll red pa gargit ur roll enrollet a-raok, diuzit **Goulloñ ar roll red pa garger**.

Klikit war **Arloañ** hag **OK** da enrollañ ha da serriñ ar **roll stroberien**.




#### **Pouezus**

M'hoc'h eus c'hoant da adstaliañ BitDefender ez erbedomp deoc'h enrollañ ar rolloù **Mignoned / Stroberien** a-raok, ha d'o c'hargañ goude ar staliañ.

## **10.3. Arventennoù an Enepstrob**

Evit kefluniañ an arventennoù enepstrob, klikit war **Enepstrob > Arventennoù** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



### Sifr 10.5. Arventennoù an Enepstrob

Amañ e c'hallit gweredekaat/diweredekaat pep hini eus ar siloù Enepstrob ha diferañ darn eus an arventennoù a denn d'ar vodulenn Enepstrob.

Tri rummad dibarzhioù zo da gaout (**Arventennoù Enepstrob**, **Siloù Enepstrob diazez** ha **Siloù Enepstrob araokaet**), aozet en ur roll disachañ, heñvel ouzh lañserioù Windows.



#### Notenn

Klikit war al log "+" da zigeriñ ur rummad pe war al log "-" d'e serriñ.

## 10.3.1. Arventennoù an Enepstrob

- **Merkañ strob en danvez** - an holl gemennadoù sellet evel strob a vo merket STROB en o linenn danvez.

- **Merkañ ar c’hemnadoù eus ar seurt pesketa en o danvez** - an holl gemennadoù sellet evel kemennadoù pesketa a vo merket STROB en o linenn danvez.

### 10.3.2. Siloù enepstrob diazez

- **Rolloù Mignoned / Stroberien** - a weredeka/ziweredeka ar **rolloù mignoned / stroberien**.
  - **Ouzhpennañ ent emgefreek d’ar roll mignoned** - evit ouzhpennañ ar gaserien d’ar roll mignoned.
  - **Ouzhpennañ ent emgefreek da Roll ar vignoned** - kentañ gwezh ma klikot war bouton  **N’eo ket Strob** ar **varrenn ostilhoù Enepstrob**, e vo ouzhpennet ent emgefreek ar c’haser d’ar **Roll mignoned**.
  - **Ouzhpennañ ent emgefreek da Roll ar stroberien** - kentañ gwezh ma klikot war bouton  **Strob** ar **varrenn ostilhoù Enepstrob**, e vo ouzhpennet ent emgefreek ar c’haser d’ar **Roll stroberien**.



#### Notenn

Ar boutoniou  **N’eo ket Strob** ha  **Strob** a vez implijet da stummañ ar **sil Bayesian**.

- **Berzañ an arouezennoù aziat** - a verz ar c’hemennadoù skrivet gant **arouezennoù aziat**.
- **Berzañ an arouezennoù kirillek** - a verz ar c’hemennadoù skrivet gant **arouezennoù kirillek**.

### 10.3.3. Siloù enepstrob araokaet

- **Gweredekaet ar c’heflusker deskiñ** - a weredeka/ziweredeka ar **c’heflusker deskiñ (bayesian)**.
  - **Bevenniñ ment ar geriadur da 200.000 ger** - gallout a rit bevenniñ ment ar geriadur bayesian – Seul vihanoc’h ar vent, seul brimoc’h e vo. Seul vrasoc’h ar vent, seul resisoc’h e vo.



#### Notenn

Ar vent erbedet zo 200.000 ger.

- **Embreger ar c’heflusker deskiñ (bayesian) war ar posteloù a ya er-maez** - a embreg ar c’heflusker deskiñ (bayesian) war ar posteloù a ya er-maez.
- **Sil URL** - a weredeka/ziweredeka ar **Sil URL**.

- **Sil heuristek** - a weredeka/ziweredeka ar **Sil heuristek**.
  - **Berzañ an endalc'hadoù splann** - a weredeka/ziweredeka dinoadur ar c'hemennadoù zo traoù a denn SPLANN D'AR REVELEZH en o linenn danvez.
- **Sil ar skeudennoù** - a weredeka/ziweredeka **Sil ar skeudennoù**.



**Notenn**

Evit gweredekaat/diweredekaat un dibarzh askit/diaskit al log a glot gantañ.

Klikit war **Arloañ** da enrollañ ar c'hemmoù pe klikit war **dre ziouer** da gargañ an arventennoù dre ziouer.


## 10.4. En em lakaat en arvalien postelerezh

BitDefender en em laka war-eeun e-barzh an arvalien postelerezh da-heul war-bouez ur varrenn ostilhoù aes ha plijout :

- Microsoft Outlook
- Outlook Express
- Windows Mail
- Mozilla Thunderbird

### 10.4.1. Barrenn ostilhoù Enepstrob

Emañ ar varrenn ostilhoù Enepstrob e rann uhelañ hoc'h arval postelerezh.



Sifr 10.6. Barrenn ostilhoù Enepstrob




### **Pouezus**

Ar c'hemm etre BitDefender Antispam evit Microsoft Outlook hag Outlook Express / Windows Mail eo al lec'h ma vez dilec'hiet ar c'hemennadoù STROB. Kaset e vezont d'ar renkell **Strob** evit Microsoft Outlook ha d'ar renkell **Elfennoù dilamet** evit Outlook Express / Windows Mail. En daou zegouezh e vezont lakaet da STROB el linenn danvez.

Emañ ar renkell **Strob** krouet gant BitDefender evit Microsoft Outlook er memes live ha traezoù ar **roll renkelloù** (Deiziataer, Darempredoù, h.a.).

Pep bouton eus barrenn ostilhoù BitDefender a vo displeget amañ dindan :


-  **Strob** - Klikit warnañ da gas ur c'hemennad d'ar vodulenn veyesian evit reiñ dezhi da anavezout eo ar postel diuzet ur strob. Lakaet e vo ar c'hemennad da STROB ha dilec'hiet e vo d'ar renkell **Strob**.

Ar c'hemennadoù da zont gant ar memes doarenoù a vo lakaet da STROB.



### **Notenn**

Gallout a rit diuzañ ur postel pe meur a hini.

-  **N'eo ket Strob** - Klikit warnañ da gas ur c'hemennad d'ar vodulenn veyesian evit reiñ dezhi da anavezout n'eo ket ar postel diuzet ur strob ha ne zlefe ket bezañ merket gant BitDefender. Dilec'hiet e vo ar c'hemennad eus ar renkell **Strob** d'ar **Voest degemer**.

Ar c'hemennadoù da zont gant ar memes doarenoù ne vint ket lakaet da SPAM ken.





### **Notenn**


Gallout a rit diuzañ ur postel pe meur a hini.



### **Pouezus**

Oberiant e teu da vezañ ar bouton  **N'eo ket Strob** pa ziuizit ur c'hemennad lakaet da strob gant BitDefender (peurliesañ emañ ar c'hemennadoù-se er renkell **Strob**).

-  **Ouzhpennañ ur strober** - Klikit warnañ da ouzhpennañ kaser ar c'hemennad d'ho **roll stroberien**.



### Sifr 10.7. Ouzhpennañ ur strober

Diuzit **Arabat diskouez ar c'hemennad-mañ ken** ma n'hoc'h eus ket c'hoant e vefe goulennet diganeoc'h kadarnaat pa ouzhpennit ur strober d'ar roll.


Klikit war **Mat eo** evit klozañ ar prenestr.


Ar c'hemennadoù a resevot eus ar chomlec'h-mañ a vo sellet outo evel STROBOÙ.



#### Notenn

Gallout a rit diuzañ ur c'haser pe meur a hini.

-  **Ouzhpennañ ur mignon** - Klikit warnañ da ouzhpennañ kaser ar c'hemennad d'ho **Roll mignon**ed.



### Sifr 10.8. Ouzhpennañ ur mignon

Diuzit **Arabat diskouez ar c'hemennad-mañ ken** ma n'hoc'h eus ket c'hoant e vefe goulennet diganeoc'h kadarnaat pa ouzhpennit ur mignon d'ar roll.


Klikit war **Mat eo** evit klozañ ar prenestr.

Resev a rit atav ar posteloù eus ar chomlec'h-mañ, petra bennak a vefe o endalc'had.



#### Notenn


Gallout a rit diuzañ ur c'haser pe meur a hini.

-  **Stroberien** - Klikit warnañ da verañ ar **roll stroberien** – Ennañ emañ an holl chomlec'hioù n'hoc'h eus ket c'hoant da resev posteloù diganto, petra bennak a vefe o endalc'had.



### Notenn

Kement postel a zeu eus ur chomlec'h eus ar **roll Stroberien** a vo merket evel STROB ent emgefreak ha ne vo ket treset pelloc'h.



Sifr 10.9. Roll Stroberien

Amañ e c'hallit ouzhpennañ pe lemel stroberien eus ar **roll Stroberien**.

M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ ur chomlec'h postel, klikit war ar vaezienn **Chomlec'h postel**, skriverzid ar chomlec'h ha klikit war . Dont a ray ar chomlec'h war wel er **roll stroberien**.



### Pouezus

Ereadur : anv@domani.com.

M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ un domani, klikit war ar vaezienn **Anv domani**, skriverzid an anv domani ha klikit war . Dont a ray an anv domani war wel er **roll stroberien**.



### Pouezus



Ereadur :



- @domani.com, \*domani.com ha domani.com - an holl gemnadaoù a zeu eus domani.com a vo merket evel STROB ;
- \*domani\* - an holl gemnadaoù eus domani (petra bennak a vefe an astenn) a vo merket evel STROB ;



- \*com - an holl gemennadoù a zeu eus un domani gant an astenn com a vo merket evel STROB.

Evit enporzhiañ ur chomlec'h postel eus **Karned Chomlec'hioù Windows / Renkelloù Outlook Express** hag e gas da **Microsoft Outlook / Outlook Express / Windows Mail**, diuzit an dibarzh a zere el lañser disachañ **Enporzhiañ chomlec'hioù postel eus**.

Evit **Microsoft Outlook Express / Windows Mail** e teuy ur prenestr nevez war wel, ma c'hallit diuzañ ar renkell zo enni ar chomlec'hioù postel hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ d'ar **roll Stroberien** . Dibabit-int ha klikit war **Diuzañ**.


En daou zegouezh e teuy ar chomlec'hioù postel war wel e roll an enporzhiadurioù. Diuzit ar re a fell deoc'h kaout ha klikit war  d'o ouzhpennañ d'ar **roll stroberien**. Ma klikit war  e vo ouzhpennet an holl chomlec'hioù postel d'ar roll.

Evit dilemel un draezenn eus ar roll, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Lemel**. Ma klikit war ar bouton  **Goulloñ ar roll** e tilamot holl enmontoù ar roll, met diwallit : dibosupl e vo o adtapout.

Implijit ar boutonioù  **Enrollañ/**  **Kargañ** da enrollañ/gargañ ar **roll Stroberien** d'al lec'h-mañ-lec'h. Ar restr he do un astenn .bwl.

Evit dilemel endalc'had ar roll red pa gargit ur roll enrollet a-raok, diuzit **Goulloñ ar roll red pa garger**.


Klikit war **Arloañ** hag **OK** da enrollañ ha da serriñ ar **roll stroberien**.

-  **Mignoned** - Klikit warnañ da verañ ar **roll mignoned**. Ennañ emañ an holl chomlec'hioù hoc'h eus c'hoant da resev posteloù diganto, petra bennak a vefe o endalc'had.




#### **Notenn**

Kement postel a zeu eus ur chomlec'h eus ar **roll mignoned** a vo lakaet ent emgefreak en ho poest degemer ha ne vo ket tretet pelloc'h.



### Sifr 10.10. Roll mignoned


Amañ e c'hallit ouzhpennañ pe lemel enmontoù eus ar **roll mignoned**.

M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ ur chomlec'h postel, klikit war ar vaezienn **Chomlec'h postel**, skriverezit ar chomlec'h ha klikit war ar bouton . Dont a ray ar chomlec'h war wel er **roll mignoned**.



#### **Pouezus**

Ereadur : anv@domani.com.

M'hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ un domani, klikit war ar vaezienn **Anv domani**, skriverezit an anv domani ha klikit war . Dont a ray an anv domani war wel er **roll mignoned**.



#### **Pouezus**



Ereadur :



- @domani.com, \*domani.com ha domani.com - an holl bosteloù a zeu eus domani.com a vo lakaet d'ho **Poest degemer** petra bennak a vefe o endalc'had ;
- \*domani\* - an holl bosteloù eus domani (petra bennak a vefe an astenn) a vo lakaet d'ho **Poest degemer** petra bennak a vefe o endalc'had ;
- \*com - An holl bosteloù gant com en o anv domani a vo lakaet d'ho **Poest degemer** petra bennak a vefe o endalc'had ;

Evit enporzhiañ ur chomlec'h postel eus **Karned Chomlec'hioù Windows / Renkelloù Outlook Express** hag e gas da **Microsoft Outlook / Outlook Express**

/ **Windows Mail**, diuzit an dibarzh a zere el lañser disachañ **Enporzhiañ chomlec'hioù postel eus**.

Evit **Microsoft Outlook Express / Windows Mail** e teuy ur prenestr nevez war wel, ma c'hallit diuzañ ar renkell zo enni ar chomlec'hioù postel hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ d'ar **roll Mignoned** . Dibabit-int ha klikit war **Diuzañ**.

En daou zegouezh e teuy ar chomlec'hioù postel war wel e roll an enporzhiadurioù. Diuzit ar re a fell deoc'h kaout ha klikit war  d'o ouzhpennañ d'ar **roll mignoned**. Ma klikit war  e vo ouzhpennet an holl chomlec'hioù postel d'ar roll.

Evit dilemel un draezenn eus ar roll, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Lemel**. Ma klikit war ar bouton  **Gouloïñ ar roll** e tilamot holl enmontoù ar roll, met diwallit : dibosupl e vo o adaptapout.

Implijit ar boutonioù  **Enrollañ/**  **Kargañ** da enrollañ/gargañ ar **roll mignoned** d'al lec'h-mañ-lec'h. Ar restr he do un astenn .bwl.


Evit dilemel endalc'had ar roll red pa gargit ur roll enrollet a-raok, diuzit **Gouloïñ ar roll red pa garger**.




### **Notenn**

Hoc'h aliañ a reomp da ouzhpennañ anvioù ho mignoned hag o chomlec'hioù postel d'ar **Roll Mignoned**. BitDefender ne verz ket ar c'hemennadoù a zeu eus ar roll-se ; ouzhpennañ mignoned ho sikour da lezel ar c'hemennadoù reizh da dremen.

Klikit war **Arloañ** hag **OK** da enrollañ ha da serriñ ar **roll mignoned**.

-  **Kefluniañ** - klikit war ar bouton-mañ da zigeriñ ar prenestr **Kefluniañ** ma c'hallit diferañ dibarzhioù evit ar vodulenn **Enepstrob**.



### Sifr 10.11. Kefluniañ

An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

- **Dilec'hiañ ar c'hemennad da Elfennoù dilamet** - a zilec'h ar c'hemennad strob da **Elfennoù dilamet** (evit Outlook Express / Windows Mail hepken);
- **Merkañ ar c'hemennad evel 'lennet'** - a verk an holl gemennadoù strob evel "lennet" evit chom hep direnkañ pa erru stroboù nevez.

Ma'z eo direizh-bras ho sil, e tlefec'h diverkañ roadennoù ar **sil bayesian** hag e adstummañ. Klikit war **Diverkañ an diaz roadennoù enepstrob** da adderaouekaat roadennoù ar **sil bayesian**.

Implijit ar boutonioù **Enrollañ reolennoù ar sil Bayesian** / **Kargañ reolennoù ar sil Bayesian** da enrollañ / kargañ an **diaz roadennoù bayesian** d'ul lec'h bennak. Ar restr he do un astenn `.dat`.

Klikit war an ivinell **Kemennoù diwall** da vont d'ar rubrikenn ma c'hallit diweredekaat ar prenestroù kadarnaat evit **Ouzhpennañ strober** hag **Ouzhpennañ mignon**.



#### Notenn

Er prenestr **Kemennoù diwall** e c'hallit ivez gweredekaat/diweredekaat ar c'hemenn diwall **Diuzit ur postel mar plij**. Dont a ra ar c'hemenn diwall-mañ war wel pa ziuzeit ur strollad e-lec'h ur postel hepken.

- **Skoazeller** - klikit warnañ da loc'hañ **ar skoazeller** ho sikouro da stummañ ar **sil bayesian**, evit gwellaat efedusted BitDefender Antispam. Gallout a rit ivez ouzhpennañ chomlec'hioù eus ho **karned chomlec'hioù** d'ho **Rolloù mignoned / stroberien**.

-  **BitDefender Antispam** - klikit warnañ da zigeriñ al **Letrin merañ** .

## 10.4.2. Skoazeller kefluniañ an Enepstrob


Pa vez sevenet hoc'h arval postelerezh da gentañ war-lerc'h staliadur BitDefender, e teu ur skoazeller war wel evit ho sikour da gefluniañ **Roll ar vignoned** ha **Roll ar stroberien** ha da embreger ar **sil bayesian** a-benn gwellaat efedusted ar siloù enepstrob.



### Notenn

Ar skoazeller a c'hall ivez bezañ loc'het forzh pegoulz dre glikañ war ar bouton  **Skoazeller** diwar ar **varrenn ostilhoù Enepstrob**


## Tennad 1 diwar 6 – Prenestr degemer



Sifr 10.12. Prenestr degemer

Klikit war **War-lerc'h**.

## Tennad 2 diwar 6 - Leuniañ ar roll mignoned.




Sifr 10.13. Leuniañ ar roll mignoned

Amañ e c'hallit gwelet holl chomlec'hioù ho **Karned chomlec'hioù**. Diuzit ar re hoc'h eus c'hoant da ouzhpennañ d'ho **Roll mignoned** (erbediñ a reomp deoc'h o ouzhpennañ holl). Resev a reot an holl bosteloù a zeu eus ar chomlec'hioù-se, petra bennak a vefe o endalc'had.

Evit ouzhpennañ hoc'h holl zarempredoù d'ho Roll mignoned, askit al log **Diuzañ pep tra**.

Diuzit **Dianavezout an tennad-mañ** m'hoc'h eus c'hoant da lammat dreist an tennad-mañ. Klikit war **A-raok** da zistreiñ pe klikit war **War-lerc'h** da genderc'hel.

## Tennad 3 diwar 6 - Dilemel an diaz roadennoù bayesian



Sifr 10.14. Dilemel an diaz roadennoù bayesian


Gallout a rit kavout e krog ho sil enepstrob da goll efedusted. Se a c'hall bezañ abalamour d'un embreger direizh (da skouer, m'hoc'h eus lakaet un toullad posteloù reizh da strob pe ar c'hontrol). Ma'z eo direizh-bras ho sil ez erbedomp deoc'h diverkañ roadennoù ar sil bayesian hag e adstummañ diouzh an tennadoù amañ dindan.

Diuzit **Diverkañ an diaz roadennoù enepstrob** da adderaouekaat roadennoù ar sil bayesian.

Implijit ar boutonioù  **Enrollañ Bayesian**/ **Kargañ Bayesian** da enrollañ / kargañ an **diaz roadennoù bayesian** d'ul lec'h bennak. Ar restr he do un astenn .dat.

Diuzit **Dianavezout an tennad-mañ** m'hoc'h eus c'hoant da lammat dreist an tennad-mañ. Klikit war **A-raok** da zistreiñ pe klikit war **War-lerc'h** da genderc'hel.

## Tennad 4 diwar 6 - Embreger ar sil bayesian gant posteloù reizh



Sifr 10.15. Embreger ar sil bayesian gant posteloù reizh


Dibabit ur renkell enni posteloù reizh. Implijet e vint da embreger ar sil enepstrob.

Bez' ez eus daou zibarzh araokaet dindan roll ar c'havlec'h :

- **Enklozañ isrenkelloù** - evit enklozañ an isrenkelloù en ho tiuzad.
- **Ouzhpennañ ent emgefreak d'ar roll mignoned** - evit ouzhpennañ ar gaserien d'ar roll mignoned.

Diuzit **Dianavezout an tennad-mañ** m'hoc'h eus c'hoant da lammat dreist an tennad-mañ. Klikit war **A-raok** da zistreiñ pe klikit war **War-lerc'h** da genderc'hel.

## Tennad 5 diwar 6 - Embreger ar sil bayesian gant posteloù strobuz



Sifr 10.16. Embreger ar sil bayesian gant posteloù strobuz

Dibabit ur renkell ennañ posteloù strobuz. Implijet e vint evit embreger ar sil enepstrob.



### **Pouezus**


En em asurit n'eus ket a bosteloù reizh er renkell a zibabit, a-hend all e vo digresket un tamm mat efedusted an enepstrob.

Bez' ez eus daou zibarzh araokaet dindan roll ar c'havlec'h :

- **Enklozañ isrenkelloù** - evit enklozañ an isrenkelloù en ho tiuzad.
- **Ouzhpennañ ent emgefreak da roll ar stroberien** - evit ouzhpennañ ar gaserien da roll ar stroberien .

Diuzit **Dianavezout an tennad-mañ** m'hoc'h eus c'hoant da lammat dreist an tennad-mañ. Klikit war **A-raok** da zistreiñ pe klikit war **War-lerc'h** da genderc'hel.

## Tennad 6 diwar 6 - Diverradur



### Sifr 10.17. Diverradenn

Amañ e c'hallit gwelet an holl arventennoù dibabet gant ar skoazeller kefluniañ. Gallout a rit ober kemmoù dre zistreiñ d'an tennadoù kent (klikit war **A-raok**).

Ma n'hoc'h eus ket c'hoant d'ober kemmoù, klikit war **Echuiñ** da serriñ ar skoazeller.

## Rann 11. Kontroll Buhez Prevez

Kontrollañ a ra BitDefender degadoù a “boentoù arvarus” en ho reizhiad ma c’hall ar spiantoù ober reuz. Dielfennañ a ra ivez ar c’hemmoù degaset d’ho reizhiad ha d’ho meziantoù. Efedus eo a-enep kezeg Troia hag a-enep ar binvioù all a vez staliet gant preizherien, a glask lakaat ho puhez prevez en arvar ha kas ho titouroù personel, evel ho niverennoù kartennoù-bank, eus hoc’h urzhiaer da hini ar preizher.


Gallout a ra BitDefender ivez dielfennañ al lec’hiennoù Kenrouedad ha kemenn deoc’h ma’z eus ur riskl pesketa.

Ar rannskrid **Kontroll Buhez prevez** e levr an implijer zo ennañ ar rubrikennoù amañ da heul :

- Statud kontroll buhez prevez
- Arventennoù araokaet – Kontroll identelezh
- Arventennoù araokaet – Kontroll an diaz marilhoù
- Arventennoù araokaet – Kontroll an toupinoù
- Arventennoù araokaet – Kontroll ar skriptoù
- Titouroù reizhiad
- Barrenn ostilhoù Eneppesketa

### 11.1. Statud Kontroll Buhez Prevez

Evit kefluniañ ar C’hontroll Buhez Prevez ha lenn an titouroù a denn d’e obererezh, klikit war **Kontroll Buhez prevez>Statud** en arventennoù al letrín. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 11.1. Statud Kontroll Buhez Prevez

## 11.1.1. Kontroll Buhez Prevez



### Pouezus

Evit mirout ouzh ar meziantoù spier a gontammiñ hoc'h urzhiataer e rank **Kontroll Buhez prevez** chom gweredekaet.

Gwareziñ a ra ar C'hontroll Buhez prevez hoc'h urzhiataer en ur ober 5 kontroll surentez pouezus :

- **Kontroll identelezh** - a warez ho titouroù prevez en ur silañ an tremenezh HTTP o tont er-maez (pajennoù Web) hag SMTP (posteloù) hervez ar reolennoù krouet er rubrikenn **Identelezh**



### Notenn

E-traoù a rannskrid e c'hallit lenn ar **stadegoù a sell ouzh ar c'hontroll identelezh**.

- **Kontroll an diaz marilhoù** - a c'houlenn hoc'h aotre diganeoc'h pa glask ur programm kemmañ an diaz marilhoù evit bezañ sevenet pa vez loc'het Windows.
- **Kontroll an toupinoù** - a c'houlenn hoc'h aotre diganeoc'h pa vez ul lec'hienn Genrouedad nevez o klask lakaat un toupin war hoc'h urzhiataer.
- **Kontroll ar skriptoù** - a c'houlenn hoc'h aotre diganeoc'h pa vez ul lec'hienn Genrouedad o klask gweredekaet ur skript pe un endalc'h oberiat.

Evit kefluniañ arventennoù ar c'hontrolloù-mañ, klikit war  **Arventennoù araokaet**.

## Kefluniañ al live gwareziñ

Gallout a rit dibab al live gwareziñ a vo diouzh hoc'h ezhommoù surentez. Dilec'hiit ar reti war ar skeul evit dibab al live a zere.

3 live gwareziñ zo anezho :

Live gwareziñ	Deskrivadur
<b>Gouzañvus</b>	Gweredekaet eo <b>Kontroll an diaz marilhoù</b> nemetken.
<b>Diouer</b>	Gweredekaet eo <b>Kontroll diaz ar marilhoù</b> hag ar <b>C'hontrol Identelezh</b>
<b>Tagus</b>	Gweredekaet eo <b>Kontroll diaz ar marilhoù</b> , ar <b>C'hontrol Identelezh</b> hag ar <b>C'hontrol Skriptoù</b> .

Gallout a rit personelaat al live gwareziñ en ur glikañ war **Personelaat**. Ar prenestr amañ da heul a zeuio war wel. Dibabit ar restroù pe ar c'havlec'hioù hoc'h eus c'hoant da ziefennañ ha klikit war **Mat eo** .

Klikit war **Live dre ziouer** evit lakaat ar reti war al live dre ziouer.

## 11.1.2. Gwareziñ enepesketa

Ar pesketa zo un obererezh torfedus a vez implijet war ar Genrouedad. Diazezet eo war teknikoù a ijinouriezh sokial hag ar pal anezhañ zo touellañ an dud evit tennañ titouroù personel diganto.

Peurliesañ, an taolioù "pesketa" a zeu gant kasadennoù posteloù a-vras hag a seblant bezañ o tont eus embregerezhioù diazezet mat hag anavezet. Ar c'hemennadoù faos-se a vez kaset gant ar spi e vo un nebeud reseverien da nebeutañ, dezho profil pal ar pesketa, a vo prest da reiñ da c'houzout titouroù prevez.

Kaset e vez ur postel “pesketa” deoc’h peurliesañ evit kemenn deoc’h ez eus ur gudenn bennak war ho kont enlinenn. Peditañ a reer ac’hanoc’h da glikañ war ul liamm zo er postel evit mont war ul lec’hienn Genroudedad zo seblant warni bezañ gwir (ul lec’hienn flodus eo avat) ha titouroù prevez a vez goulennet diganeoc’h war-lerc’h. Gallout a reer, da skouer, goulenn diganeoc’h kadarnaat an niverennoù evit kevreañ ouzh ho kont, da lavaret eo hoc’h anv implijer hag ho ker-tremen, ha pourchas ho niverennoù bank pe ho niverenn surentez sokial. A-wezhioù e lakaer ac’hanoc’h da c’houzout eo bet ehanet ho kont-bank pe war-nes bezañ ma ne glikit ket war al liamm roet deoc’h.

Gant ar besketaerien ivez e vez implijet spiantoù, evel ar spiantoù klavier degaset gant kezeg Troia, evit laerezh diganeoc’h titouroù a denn d’ho kont, war-eeun diwar hoc’h urzhiataer.

Klask a ra ar besketaerien da gentañ tapout an arvalien a ra gant ar servijoù paeañ enlinenn, evel eBay ha PayPal, koulz hag ar bankoù a ginnig pourchasoù enlinenn. N’eus ket pell o deus klasket pesketaerien zo ivez touellañ an dud a implij lec’hiennoù eus ar rouedad sokial evit tennañ titouroù prevez diganto hag implijout o identelezh war-lerc’h.

Evit gwareziñ ac’hanoc’h diouzh ar pesketa pa vezit o verdeiñ war ar rouedad e rank **an enepesketa** bezañ gweredekaet. Evel-se e tielfenno BitDefender pep lec’hienn Genroudedad a-raok mont di ha sachet e vo hoc’h evezh war an disterañ riskl pesketa. Gallout a reer kefluniañ ur roll gwenn ennañ lec’hiennoù Kenrouedad na vint ket dielfennet gant BitDefender.

Evit merañ aesoc’h ar gwarez enepesketa hag ar roll gwenn, implijit ar varrenn ostilhoù enepesketa BitDefender zo enframmet en Internet Explorer. Evit gouzout hiroc’h, sellit ouzh “*Barrenn ostilhoù enepesketa*” (p. 159).

## 11.2. Kontroll Identelezh – Arventennoù araokaet

Gwareziñ ar roadennoù kuzh a sell ouzh an holl ac’hanomp. Al laerezh titouroù zo bet diorroet asambles gant ar Genroudedad hag ar c’hehentiñ hag implijet e vez doareoù nevez evit lakaat an dud da gas o roadennoù prevez.

Ma kouezh ho chomlec’h postel pe ho niverenn gartenn-vank, etre krabanoù torfedourien e c’hallit resev posteloù strobuz a-vil-vern pe adkavout ho kont-bank dibourvez.


Ar vodulenn **Kontroll Identelezh** a skoazell ac’hanoc’h da virout ho titouroù kuzh e surentez. Dielfennañ a ra an tremenerezh HTTP hag SMTP. Klask a ra neuze ar sekañsoù arouezennoù zo bet termenet ganeoc’h ha ma kav anezho e skoilh ouzh ar posteloù hag ar pajennoù Web.


Mirout a ra ar skor liezimplierien pourchaset ouzh implijerien all ar reizhiad da vont d'ar reolennoù bet kefluniet ganeoc'h.

Gallout a reer kefluniañ ar reolennoù prevezded er rannskrid **Identelezh**. Evit mont d'ar rannskrid-mañ, digorit ar prenestr **Arventennoù arakaet Kontroll Buhez prevez** ha klikit war an ivinell **Identelezh**.




### Notenn

Evit digeriñ ar prenestr **Arventennoù arakaet Kontroll Buhez prevez**, klikit war **Kontroll Buhez prevez>Statud** e letr in arventennoù ha klikit war  **Arventennoù arakaet**.



Sifr 11.2. Kontroll Identelezh

## 11.2.1. Krouiñ reolennoù Identelezh

Rankout a reer ebarzhiñ ar reolennoù dre zorn (Klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ** ha dibabit arventennoù ar reolenn). Ar skoazeller kefluniañ a zeuio war wel.

Ar skoazeller kefluniañ zo 3 zennad ennañ.

## Tennad 1 diwar 3 – Dielfennañ ar seurtoù reolennoù ha roadennoù



Sifr 11.3. Dielfennañ ar seurtoù reolennoù ha roadennoù

Skriverezit anv ar reolenn er vaezienn genglotus.

Rankout a rit dielfennañ an arventennoù amañ da heul :

- **Seurt reolenn** - a zielefenn ar seurt reolenn (chomlec'h, anv, kartenn-gred, kod PIN h.a.)
- **Roadennoù ar reolenn** - Titourañ roadennoù ar reolenn.




### **Notenn**

Ma ne skriverezit ket teir arouezenn da nebeutañ e viot pedet da gadarnaat ar roadennoù. Erbediñ a reomp deoc'h skriverezañ teir arouezenn da nebeutañ evit ma ne chomo ket stanket ho posteloù hag ho pajennoù Web dre fazi.

Rineget eo an holl roadennoù enrollet ganeoc'h. Evit muioc'h a surentez, na skriverezit ket an holl roadennoù hoc'h eus c'hoant da wareziñ.

Klikit war **War-lerc'h**.

## Tennad 2 diwar 3 – Dibab tremenezh



### Sifr 11.4. Dibab tremenezh


Dibabit ar seurt tremenezh zo da vezañ dielfennet gant BitDefender. An dibarzhiou-mañ a c'haller kaout :

- **Dielfennañ HTTP** - a zielefenn ar wazh HTTP (web) ha skoilhañ a ra ouzh ar roadennoù zo bet rakwelet e reolenn merañ ar roadennoù.
- **Dielfennañ SMTP** - a zielefenn ar wazh SMPT (postel) ha skoilhañ a ra ouzh ar posteloù o vont er-maez zo enno elfennoù raktermenet e reolenn merañ ar roadennoù.

Gallout a reot dibab arloañ ar reolenn nemet e klotfe roadennoù ar reolenn gant an holl c'herioù pe gant ar chadenn arouezennoù kavet.

Klikit war **War-lerc'h**.

## Tennad 3 diwar 3 - Deskrivadur ar reolenn



### Sifr 11.5. Deskrivadur ar reolenn

Skriverezit un deskrivadur berr eus ar reolenn er vaezienn gengloutus.


Klikit war **Echuiñ**.

## 11.2.2. Termeniñ an nemedennoù

C'hoarvezout a ra ho po ezhomm termeniñ nemedennoù evit reolennoù identelezh dibar. Ma krouit, da skouer, ur reolenn brevezded evit ma ne vo ket kaset ho niverenn gartenn-gred dre HTTP (Web), bewezh ma vo graet gant ho niverenn gartenn-gred war ul lec'hienn eus ho kont implijer, e vo stanket ar bajenn gengloutus. M'hoc'h eus c'hoant, da skouer da brenañ botoù war ur stal enlinenn (a c'haller kaout fiziañs enni, d'ho meno), e rankot ouzhpennañ un nemedenn d'ar reolenn gengloutus.

Evit digeriñ ar prenestr a dalvez da verañ an nemedennoù, klikit war **Nemedennoù**.





Sifr 11.7. Kemmañ ur reolenn

Er rubrikenn e c'hallit kemmañ an anv, deskrivadur hag arventennoù ar reolenn (seurt, roadennnoù ha tremenerezh). Klikit war **Mat eo** evit enrollañ ar c'hemmoù.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr.

## 11.3. Kontroll an diaz marilhoù – Arventennoù araokaet

UI lodenn pouezus-tre eus ar reizhiad korvoiñ Windows zo anvet **Diaz ar marilhoù**. Al lec'h eo ma vir Windows an arventennoù, ar programmoù staliet, an titouroù war an implijer h.a.

**An diaz marilhoù** a vez implijet ivez evit termenañ peseurt programmoù a vez lañset emgefreak pa vez loc'het Windows. Drougimplijet e vez an arc'hwel-mañ gant ar viruzoù pa vez an implijer oc'h adloc'hañ e urzhiataer.

**Kontroll ar marilhoù** a daol evezh ouzh ar marilhoù Windows – Mat eo an arc'hwel-mañ ivez evit kavout kezeg Troia. Kemenn a raio deoc'h kercent ha ma klasko ur programm kemmañ un enmont en diaz marilhoù evit bezañ sevenet pa loc'ho Windows.



Sifr 11.8. Diwall marilhoù

Gallout a reer nac'h ar c'hemmadur-se en ur glikañ war **Ket** pe aotren en ur glikañ war **Ya**.

M'hoc'h eus c'hoant e talc'hfe soñj BitDefender eus ho respont, askit al log **Atav arloañ ouzh an ober-mañ evit ar programm**. Ur reolenn a vo krouet neuze hag an hevelep ober a vo arloet bewezh ma klasko ar programm kemmañ un enmont eus ar marilh da seveniñ pa loc'ho Windows.




### Notenn


Kemenn a raio deoc'h BitDefender pa vo staliet meziantoù nevez zo ezhomm adlañsañ pa vo loc'het hoc'h urzhiataer ar wezh a zeu. Peurliesañ e vez reizh ar programmoù-se ha gallout a reer kaout fiziañs enno.

Posupl eo mont da bep reolenn zo bet tretet er rannskrid **Marilh** evit reoliñ anezho gwelloc'h. Evit mont d'ar rannskrid-mañ, digorit ar prenestr **Arventennoù Kontroll Buhez prevez** ha klikañ war an ivinell **Marilh**.



### Notenn

Evit digeriñ ar prenestr **Arventennoù arakaet Kontroll Buhez prevez**, klikit war **Kontroll Buhez prevez>Statud** e letrín an arventennoù ha klikit war  **Arventennoù arakaet**.



Sifr 11.9. Kontrollañ an diaz marilhaù

Gallout a reot gwelet ar reolennoù zo anezho en daolenn genglotus.

Evit dilemel ur reolenn, dibabit ha klikit dres war ar bouton **Dilemel ar reolenn**. Evit diweredekaat ur reolenn evit ur mare, diaskit al log kenglotus.

Evit kemmañ ober ur reolenn, daouglikit war vaezienn ar reolenn ha dibabit an dibarzh a genglot el lañser.

Klikit war **Mat eo** evit klozañ ar prenestr.


## 11.4. Kontroll an toupinoù – Arventennoù araokaet

Boutin-tre e vez an **Toupinoù** war ar Genrouedad. An toupinoù zo anezho restroù bihan stoket war an urzhiataer. Krouet e vezont gant al lec'hiennoù web evit gouzout hiroc'h war ho poazioù seurfñ.

Peurliesañ e vez aesoc'h merdeñ war ar Genrouedad gant an toupinoù. Da skouer, gallout a reont talvezout da eñvoriñ hoc'h anv hag ho poazioù seurfñ evit ma n'ho po ket da reiñ anezho en-dro.

Gant an toupinoù avat e c'hall bezañ lakaet prevezded ho roadennoù en arvar rak evezhiet e vo ho poazioù merdeñ.

Amañ eo talvoudus-tre an arc'hwel **Kontroll an toupinoù**. Ma'z eo gweredekaet an arc'hwel **Kontroll an toupinoù** e vo goulennet ouzhoc'h reiñ hoc'h aotre bewezh ma klasko ul lec'hienn Genrouedad nevez lakaat un toupin.



Sifr 11.10. Kemenn diwall toupinoù

Gallout a reot gwelet anv an arload zo o klask kas ur restr doupin.

Dibabit **Derc'hel ar respont** ha klikit war **Ya** pe **Ket** hag ur reolenn a vo krouet, arloet ha lakaet e taolenn ar reolennoù.

Skozellañ a ra ar reolenn ac'hanoc'h da zibab al lec'hiennoù a c'haller fiziout enno hag al lec'hiennoù na c'haller ket.




### Notenn

Abalamour d'an toupinoù gwall niverus a gaver war ar Genrouedad e c'hall ar vodulenn **Kontroll an Toupinoù** bezañ lakaet diaes da gentañ. Savet e vo kalz a c'houlennou ouzhoc'h evit a sell degemer an toupinoù nevez war hoc'h urzhiataer. A-feur ma ouzhpennot al lec'hiennoù Kenrouedad a blij deoc'h da roll ar reolennoù e vo aesoc'h deoc'h merdeñ eget a-raok.

Gallout a reot embann pep reolenn eñvoret er rannskrid **Toupin** evit degas kemmoù. Evit mont d'ar rannskrid-mañ, digorit ar prenestr **Arventennoù araoakaet Kontroll Buhez prevez** ha klikit war an ivinell **Toupin**.




### Notenn

Evit digeriñ ar prenestr **Arventennoù araoakaet Kontroll Buhez prevez**, klikit war **Kontroll Buhez prevez>Statud** e letrín an arventennoù ha klikit war  **Arventennoù araoakaet**.



## Tennad 1 diwar 1 – Dibab ar chomlec'h, an ober hag an tu



Sifr 11.12. Dibab ar chomlec'h, an ober hag an tu

Gallout a reot termenañ an arventennoù :

- **Chomlec'h domani** - gallout a rit enlakaat anv an domani a vo arloet ar reolenn outañ.
- **Ober** - dibabit an ober liammet ouzh ar reolenn.

<i>Ober</i>	<i>Deskrivadur</i>
<b>Aotren</b>	Aotreet eo toupinoù an domani-mañ.
<b>Berzañ</b>	Ne vo ket aotreet an toupinoù en domani-mañ.

- **Tu** - dibab tu an tremenerezh.

<i>Seurt</i>	<i>Deskrivadur</i>
<b>O vont er-maez</b>	Arloet e vo ar reolenn ouzh an toupinoù a vez adkaset war-du ar lec'hiennoù .
<b>O tont tre</b>	Arloet e vo ar reolenn ouzh an toupinoù a vez degemeret eus al lec'hiennoù a vezer kevreet outo.
<b>O vont er-maez pe o tont tre</b>	Ar reolenn a vez arloet d'an daou du.

Klikit war **Echuiñ**.



### Notenn

Gallout a reot degemer an toupinoù ha difenn adkas anezho en ur zibab an ober **Difenn** hag an tu **O tont er-maez**.


Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr.

## 11.5. Kontroll ar skriptoù – Arventennoù araokaet

Ar **Skriptoù** hag ar meziantoù all evel **kontrolloù ActiveX** ha **programmigoù Java**, a vez implijet evit krouiñ pajennoù web etreoberiat, a c'haller programmiñ evit kaout efedoù noazus. Gallout a ra an elfennoù Actives X, kaout ur moned a-bezh d'ho roadennoù ha lenn anezho eus hoc'h urzhiataer, dilemel titouroù, pakañ gerioù-tremen ha daspakañ posteloù pa vezit enlinenn. Erbediñ a reomp deoc'h degemer hepken an endalc'hoù oberiat a gavit war al lec'hiennoù a anavezit hag ho peus fiziañs enno.

BitDefender a lez an dibab ganeoc'h da seveniñ pe da herzel ouzh an elfennoù-mañ.

Gant **Kontroll skriptoù** e c'hallit dielfennañ al lec'hiennoù Genrouedad ho peus fiziañs enno pe n'ho peus ket. Goulenn a raio BitDefender ouzhoc'h kadarnaat bewezh ma klasko gweredekaat ur skript pe an holl seurtoù endalc'hoù oberiat.



Sifr 11.13. Kemenn diwall skriptoù

Gallout a rit gwelet anv al loaz.

Dibabit **Distreiñ ar respont-mañ** ha klikit war **Ya** pe **Ket** ha krouet, arloet ha lakaet e vo ur reolenn en daolenn. Ne vo ket mui goulennet ouzhoc'h pa glasko al lec'hienn-mañ kas un endalc'h oberiat.


Pep reolenn eñvoret a c'haller embann el lodenn **Skriptoù** evit degas kemmoù. Evit moned d'ar rannskrid-mañ, digorit prenestr **Arventennoù araokaet Buhez prevez** ha klikit war an ivinell **Skriptoù**.



## 11.5.1. Skoazeller kefluniañ

Un tennad hepken zo er skoazeller kefluniañ.

### Tennad 1 war 1 - Dibab ar chomlec'h hag an ober



Sifr 11.15. Dibab ar chomlec'h hag an ober

Gallout a reot termenañ an arventennoù :

- **Chomlec'h domani** - gallout a rit enlakaat anv an domani a vo arloet ar reolenn outañ.
- **Ober** - dibabit an ober liammet ouzh ar reolenn.

<i>Ober</i>	<i>Deskrivadur</i>
<b>Aotren</b>	Sevenet e vo skriptoù an domani-mañ.
<b>Berzañ</b>	Ne vo ket sevenet skriptoù an domani-mañ.


Klikit war **Echuiñ**.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr.

## 11.6. Titouroù rouedad

Gallout a ra BitDefender diskwel, eus ul lec'h hepken, holl arventennoù ar reizhiad koulz hag an arloadoù enrollet evit seveniñ anezho pa vez loc'het. Gallout a rit evel-se kontrollañ obererezh ar reizhiad hag an arloadoù staliet hag anavezout kontammadurioù a c'hallfe bezañ.

Evit kaout titouroù war ar reizhiad, klikit war **Kontroll Buhez prevez > Titouroù reizhiad** en arventennoù al letrin. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 11.16. Titouroù rouedad

Ar roll zo ennañ an holl elfennoù karget pa'z eo bet ar reizhiad o loc'hañ koulz hag an holl arloadoù disheñvel zo bet karget.

Tri bouton a c'haller kaout :

- **Dilemel** - a zilam an traezoù dibabet. Rankout a rit klikañ war **Ya** evit kadarnaat ho tibab.



**Notenn**

Ma n'hoc'h eus ket c'hoant da gadarnaat ho tibab e-pad an dalc'h red, askit al log **Chom hep sevel ar gouleñ ouzhin e-pad an dalc'h-mañ.**

- **Mont da** - a zigor ur prenestr ma'z eo bet lakaet an draezenn (an**Diaz marilhoù** da skouer).
- **Hizivaat** - a zigor en-dro ar rubrikenn **Titouroù reizhiad.**



**Notenn**

Evit gwelet an holl ditouroù a sell ouzh ur restr kontammet, dibabit anezhi er roll **Titouroù** el lañser **Danevell** . Ma tibabit an dibarzh-mañ, e teuo ur skramm nevez war wel.

## 11.7. Barrenn ostilhoù enepesketa

Gwareziñ a ra BitDefender hoc'h urzhiataer a-enep ar pesketa pa vezit o verdeiñ war ar Genrouedad. Dielfennañ a ra al lec'hiennoù Web ma'z it warno ha kemenn a ra deoc'h pa vez lakaet hoc'h urzhiataer en arvar gant ar pesketa. Gallout a reer kefluniañ ur roll gwenn ennañ lec'hiennoù Kenrouedad na vint ket dielfennet gant BitDefender.


Gant ar varrenn ostilhoù enepesketa BitDefender e c'hallit merañ aes a-walc'h ha gant efedusted ar gwarez enepesketa hag ar roll gwenn.

LAr varrenn ostilhoù pesketa, arouezet gant  **an arlun BitDefender** , zo e rann laez ar prenest Internet Explorer. Klikit warnañ evit digeriñ lañser ar varrenn ostilhoù.



**Notenn**

Ma ne welit ket ar varrenn ostilhoù, klikit war al lañser **Diskwel**, dibabit **Barrennoù ostilhoù** ha gwiriit emañ ar **varrenn ostilhoù BiDefender** ennañ.



Sifr 11.17. Barrenn ostilhoù enepesketa

An urzhiadoù-mañ a c'haller kaout e lañser ar varrenn ostilhoù :

- **Gweredekaat / Diweredekaat** - a weredeka / a ziweredeka ar varrenn ostilhoù enepesketa BitDefender.



**Notenn**

Ma tibabit diweredekaat ar varrenn ostilhoù enepesketa ne vo ket mui gwarezet hoc'h urzhiataer a-enep ar pesketa.

- **Arventennoù** - a zigor ur prenestr ma c'hallit resisaat arventennoù ar varrenn ostilhoù enepesketa.

An dibarzhioù-mañ a c'haller kaout :

- **Gweredekaat an dielfennadur**- Gweredekaat an dielfennadur enepesketa.
- **Goulenn a-raok ouzhpennañ ur roll gwenn** - a c'houlenn an aotre evit ouzhpennañ ul lec'hienn Genrouedad d'ur roll gwenn.
- **Ouzhpennañ d'ar roll gwenn** - a ouzhpenn al lec'hienn Genrouedad red d'ar roll gwenn.



**Notenn**

Ma ouzhpennit ul lec'hienn Genrouedad d'ur roll gwenn ne ziefenno ket BitDefender al lec'hienn evit diskoachañ taolioù pesketa. Erbediñ a reomp deoc'h ouzhpennañ d'ar roll gwenn al lec'hiennoù hoc'h eus fiziañs penn-da-benn enno hepken.

- **Diskwel ar roll gwenn** - a zigor ar roll gwenn.

Gallout a reot lenn roll an holl lec'hiennoù Kenrouedad na vint ket dielfennet gant ar c'hefluskerioù enepesketa BitDefender.

Ma n'hoc'h eus ket c'hoant da zilemel ul lec'hienn eus ar roll gwenn – klikit war ar bouton **Dilemel** e-kichen anv al lec'hienn evit ma vo kemennet deoc'h ma'z eus ur riskl enepesketa war ar bajenn genglotus.

Gallout a rit ouzhpennañ d'ar roll gwenn al lec'hiennoù hoc'h eus fiziañs penn-da-benn enno, evit ma ne vint ket mui dielfennet gant ar c'hefluskerioù enepesketa. Evit ouzhpennañ ul lec'hienn d'ar roll, skriverezit he chomlec'h er vaezienn genglotus ha klikit war ar bouton **Ouzhpennañ**.

- **Skoazell** - a zigor ar restr skoazell elektronek.
- **Diwar-benn** - a ziskwel ur prenestr zo ennañ titouroù a denn da VitDefender, koulz ha da elfennoù skoazell ma c'hoarvez un dra direizh.

## Rann 12. Kontroll ar Gerent

Kontroll ar Gerent a c'hall berzañ ar moned da :

- pajennoù web dizereat.
- ar Genrouedad, e prantadoù zo (evel da goulz al labour-skol).
- ar pajennoù web hag ar posteloù ma'z eus enno gerioù-alc'hwez zo.
- Arloadoù evel c'hoarioù, flap, programoù da rannañ restroù pe re all.



### **Pouezus**

N'eus nemet an implijerien o deus gwirioù merañ a c'hall mont d'ar vodulenn-mañ. Ma vez gwarezet an arventennoù gant ur ger-tremen, ne c'hallont bezañ kemmet nemet ma pourchaser ar ger-tremen. Ur merour ne c'hall ket lakaat ur strobad reolennoù d'un implijer ma'z eus bet lakaet reolennoù dezhañ dija gant ur merour all.

Er pennad **Kontroll ar Gerent** en dornlevr-mañ emañ ar rubrikennoù-mañ :

- **Gwareziñ arventennoù Kontroll ar Gerent**
- **Stad Kontroll ar Gerent**
- **Kontroll Web**
- **Kontroll an Arloadoù**
- **Silañ gerioù-alc'hwez**
- **Taluadoù Web**


### 12.1. Gwareziñ arventennoù Kontroll ar Gerent

Ma n'oc'h ket an hini nemetañ gant gwirioù merañ oc'h implijout an urzhiataer-mañ, ez erbedomp deoc'h gwareziñ hoc'h arventennoù BitDefender gant ur ger-tremen. Dre lakaat ur ger-tremen e virot ouzh an implijerien all o deus gwirioù merañ da cheñch an arventennoù Kontroll ar Gerent hoc'h eus lakaet evit un implijer difer.

Dre ziuver e vo goulennet ur ger-tremen diganeoc'h gant BitDefender pa weredekay Kontroll ar Gerent.

Evit lakaat ar gwarez dre c'her-tremen, grit evel-henn :

1. Skriverezit ar ger-tremen er vaezienn **Ger-tremen**.
2. Skriverezit ar ger-tremen adarre er vaezienn **Adskriverezañ ar ger-tremen** d'e gadarnaat.
3. Klikit war **OK** da saveteiñ ar ger-tremen ha da serriñ ar prenestr.



Sifr 12.1. Lakaat ar gwarez dre c'her-tremen.

A-benn bremañ, m'hoc'h eus c'hoant da cheñch dibarzhioù kefluniañ BitDefender, e vo goulennet ar ger-tremen diganeoc'h. Merourien all ar reizhiad (ma'z eus) a ranko ivez pourchas ar ger-tremen-mañ a-benn cheñch arventennoù Kontroll ar Gerent.




### **Notenn**

Ar ger-tremen-mañ ne warezo ket arventennoù all BitDefender.

Betek-gouzout ne lakait ger-tremen ebet ha n'hoc'h eus ket c'hoant e teufe ar prenestr-mañ war wel adarre, askit al log **Arabat goulenn ur ger-tremen pa weredekaer Kontroll ar Gerent**.

## **12.2. Stad Kontroll ar Gerent**

A-benn kefluniañ kontroll ar gerent evit un implijer diuzet, klikit war **Kontroll ar gerent** > **Stad** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



## Sifr 12.2. Stad Kontroll ar Gerent



### Pouezus

Lezit **Kontroll ar gerent** gweredekaet evit gwareziñ ho pugale diouzh an endalc'hadoù dizereat dre implijout ar reolennoù personelaeet da vont d'an urzhiaer.

## 12.2.1. Diuzañ kontrolloù gwarez

Evit arventennañ al live gwarez e rankit da gentañ dibab ouzh peseurt implijer e vo arloet. Goude-se, keflugnit al live gwarez dre implijout ar c'hontrolloù-mañ :

- **Kontroll Web** - gweredekait ar **C'hontroll Web** da silañ ar merdeñ war ar Genrouedad diouzh ar reolennoù hoc'h eus lakaet er rann **Web**.
- **Kontroll an arloadoù** - gweredekait **Kontroll an arloadoù** evit berzañ ar moned d'an arloadoù diouzh ar reolennoù hoc'h eus lakaet er rann **Arloadoù**.
- **Steuñver implij Kenrouedad** - gweredekait ar **Steuñver implij Kenrouedad** da c'hrataat ur moned d'ar Genrouedad diouzh an dezverkoù hoc'h eus lakaet er rann **Steuñver implij**.

- Klikit war **Berzañ** da verzañ ar moned d'an holl lec'hiennoù web (ha n'eo ket hepken re ar rann **Web**).
- **Sil gerioù-alc'hwez** - gweredekait ar **Sil gerioù-alc'hwez** da silañ ar moned d'ar Web ha d'ar posteloù diouzh ar reolennoù hoc'h eus lakaet er vodulenn **Gerioù-alc'hwez**.
- **Sil Kenrouedad heuristik** - gweredekait an dibarzh-mañ da silañ ar moned d'ar Genrouedad hervez reolennoù raktermenet diouzh ar rummadoù oad.



**Notenn**

Evit tennañ ho mad eus an arc'hwelioù kinniget gant kontroll ar gerent, e rankit kefluniañ ar c'hontroloù diuzet. Evit deskiñ penaos o c'hefluniañ, sellit ouzh ar rubrikennoù da-heul er pennad-mañ.

## 12.2.2. Kefluniañ ar sil Kenrouedad heuristik

Gant ar sil Kenrouedad heuristik e vez dielfennet ar pajennoù Web ha berzet ar re a glot gant dezverkoù un endalc'had a c'hallfe bezañ dizereat.

Evit silañ ar moned d'ar web hervez ur stobad reolennoù raktermenet diazezet war an oad, e rankit diferañ ul live gouzañvusted difer. Riklit ar reti a-hed an derezioù da lakaat al live gouzañvusted e seblant deoc'h dereat evit an implijer diuzet.

Bez' ez eus 3 live gouzañvusted :


<i>Live gouzañvusted</i>	<i>Deskrivadur</i>
<b>Bugel</b>	Kinnig a ra ur moned strishaet d'ar Genrouedad, hervez an arventennoù erbedet evit implijerien dindan 14 vloaz. Berzet e vez ar pajennoù Web a c'hallfe o endalc'had noazout d'ar vugale (pornografiezh, revelezh, drammm, hacking, h.a.).
<b>Krennard</b>	Kinnig a ra ur moned strishaet d'ar Genrouedad, hervez an arventennoù erbedet evit implijerien etre 14 ha 18 vloaz. Berzet e vez ar pajennoù Web dezho un endalc'had revel, pornografek, pe evit an oadourien.
<b>Oadour</b>	Kinnig a ra ur moned divevenn d'an holl bajennoù Web, petra bennak a vefe o endalc'had.

Klikit war **dre ziouer** evit lakaat ar reti war al live dre ziouer.

## 12.3. Kontroll Web

Ar **C'hontroll Web** ho sikour da verzañ ar moned da lec'hiennoù Kenrouedad dezho un endalc'had dizereat. Hizivaet e vo roll al lec'hiennoù berzet gant BitDefender e-pad an argerzh hizivaat boas. Pajennoù enno daveoù (pe liammoù) da lec'hiennoù berzet a c'hall bezañ berzet ivez.


Evit kefluniañ ar c'hontroll Web, klikit war **Kontroll ar gerent > Web** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 12.3. Kontroll Web

Evit gweredekaat ar gwarez-mañ, diuzit al log a glot gant an arc'hwel **Gweredekaat Kontroll Web**.


Diuzit **Aotren ar moned d'ar pajennoù-mañ /Berzañ ar moned d'ar pajennoù-mañ** da welet roll al lec'hiennoù aotreet/berzet. Klikit war **Nemedennoù...** da vont d'ar roll klokaat.

Gant an dorn e rank ar reolennoù bezañ ebarzh. Da gentañ, diuzit unan eus an dibarzhioù : **Aotren ar moned d'ar pajennoù-mañ /Berzañ ar moned d'ar pajennoù-mañ** evit aotren/berzañ ar moned d'al lec'hiennoù web a ziferot er skoazeller. Da c'houde, klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ...** da loc'hañ ar skoazeller kefluniañ.

### 12.3.1. Skoazeller kefluniañ

Un tennad hepken zo er skoazeller kefluniañ.

#### Tennad 1 diwar 1 – Diferañ al lec'hiennoù web



#### Sifr 12.4. Diferañ al lec'hiennoù web

Skriverezit anv al lec'hienn web a vo arloet ar reolenn outi ha klikit war **Echuiñ**.




#### **Pouezus**

Ereadur :

- \*.xxx.com - Arloet e vo ober ar reolenn ouzh an holl lec'hiennoù web a echu gant .xxx.com;
- \*porn\* - Arloet e vo ober ar reolenn ouzh an holl lec'hiennoù web zo porn en o chomlec'h web.
- www.\*.com - Arloet e vo ober ar reolenn ouzh an holl lec'hiennoù web zo com dibenn o anv domani.
- www.xxx.\* - Arloet e vo ober ar reolenn ouzh an holl lec'hiennoù web a grog gant www.xxx., petra bennak a vefe dibenn an anv domani.


Arabat disoñjal klikañ war **Arloañ** evit enrollañ ar c'hemmoù.

Evit dilemel ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Dilemel**. Evit kemmañ ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Kemmañ...** pe daouglikit war ar reolenn. Evit diweredekaat ur reolenn evit ur mare hep he dilemel, diaskit al log a glot ganti.

### 12.3.2. Diferañ nemedennoù

A-wezhioù e c'hallit kaout ezhomm da grouiñ nemedennoù da reolennoù zo. Lakaet hoc'h eus, da skouer, ur reolenn hag a verz al lec'hiennoù zo ar ger "killer" en o chomlec'h (ereadur : \*killer\*). Anavezout a rit ivez ul lec'hienn hec'h anv "killer-music" ma c'hall ar weladennerien selaou sonerezh enlinenn. Evit krouiñ un nemedenn d'ar reolenn, kit d'ar prenestr **Nemedennoù** ha lakait un nemedenn d'ar reolenn.

Klikit war **Nemedennoù...** Dont a ray ar prenestr-mañ war wel :



Sifr 12.5. Diferañ nemedennoù

Klikit war **Ouzhpennañ...** da lakaat an nemedennoù. Dont a ray ar **skoazeller kefluniañ** war wel d'ho sikour da lakaat an nemedennoù.

Arabat disoñjal klikañ war **Arloañ** evit enrollañ ar c'hemmoù.

Evit dilemel ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war **Dilemel**. Evit kemmañ ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war **Kemmañ** pe daouglikit warni. Evit diweredekaat ur reolenn evit ur mare hep he dilemel, diaskit al log a glot ganti.


### 12.3.3. Roll du Web BitDefender

Evit ho sikour da wareziñ ho pugale diouzh an endalc'hadoù Web dizereat en deus BitDefender ur roll du eus al lec'hiennoù berzet. Evit berzañ al lec'hiennoù zo er roll-se, diuzit **Implijout roll al lec'hiennoù berzet gant BitDefender**.

## 12.4. Kontroll an Arloadoù


**Kontroll an Arloadoù** ho sikour da verzañ arloadoù. Ar c'hoarioù, ar meziantoù postelerezh, pe forzh peseurt rummad meizantoù pe drougiantoù a c'hall bezañ berzet evel-se. Ouzhpenn-se e vez gwarezet an arloadoù berzet evel-se diouzh ar c'hemmoù ha ne c'hallont ket bezañ eilet pe dilec'hiet.

Evit kefluniañ kontroll an arloadoù, klikit war **Kontroll ar gerent > Arloadoù** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 12.6. Kontroll an Arloadoù


Evit gweredekaat ar gwarez-mañ, diuzit al log a glot gant **Gweredekaat Kontroll an Arloadoù**.

Gant an dorn e tle ar reolennoù bezañ ebarzh. Klikit war ar bouton  **Ouzhpennañ...** da loc'hañ ar skoazeller kefluniañ.

## 12.4.1. Skoazeller kefluniañ

Un tennad hepken zo er skoazeller kefluniañ.

### Tennad 1 diwar 1 – Diuzañ an arload da verzañ



Sifr 12.7. Diuzañ an arload da verzañ

Klikit war **Furchal**, diuzit an arload da verzañ ha klikit war **Echuiñ**.


Arabat disoñjal klikañ war **Arloañ** evit enrollañ ar c'hemmoù.

Evit dilemel ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Dilemel**. Evit kemmañ ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton  **Kemmañ...** pe daouglikit war ar reolenn. Evit diwreddekaat ur reolenn evit ur mare hep he dilemel, diaskit al log a glot ganti.

## 12.5. Silañ gerioù-alc'hwez

Ar **Silañ gerioù-alc'hwez** ho sikour da verzañ ar posteloù hag ar pajennoù Web zo gerioù difer enno. Evel-se e c'hallit mirout ouzh an implijerien da welet gerioù pe frazennoù dizereat.

Evit kefluniañ ar silañ dre c'herioù-alc'hwez, klikit war **Kontroll ar gerent > Gerioù-alc'hwez** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 12.8. Silañ gerioù-alc'hwez


Evit gweredekaat ar gwarez-mañ, diuzit al log a glot gant **Silañ gerioù-alc'hwez**.

Gant an dorn e tle ar reolennoù bezañ ebarzh. Klikit war ar bouton **Ouzhpennañ...** da loc'hañ ar skoazeller kefluniañ.

### 12.5.1. Skoazeller kefluniañ

N'eus nemet un tennad gant ar skoazeller kefluniañ.

## Tennad 1 diwar 1 - Ebarzhiñ gerioù-alc'hwez



Sifr 12.9. Ebarzhiñ gerioù-alc'hwez

Rankout a rit dielfennañ an arventennoù amañ da heul :

- **Gerioù-alc'hwez** - skriverezit er vaezienn ar ger pe ar frazenn hoc'h eus c'hoant da verzañ.
- **Protokol** - dibabit ar protokol (POP,HTTP) a rank BitDefender dielfennañ evit ar ger diferet.

An dibarzhiou-mañ a c'haller kaout :

Dibarz	Deskrivadur
<b>POP3</b>	Berzet e vez ar posteloù zo ar ger-alc'hwez enno.
<b>HTTP</b>	Berzet e vez ar pajennoù Web zo ar ger-alc'hwez enno.
<b>O v o n t er-maez pe o tont tre</b>	Berzet e vez ar posteloù hag ar pajennoù Web zo ar ger-alc'hwez enno.

Arabat disoñjal klikañ war **Arloañ** evit enrollañ ar c'hemmoù.

Evit dilemel ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton **Dilemel**. Evit kemmañ ur reolenn, diuzit-hi ha klikit war ar bouton **Kemmañ...** pe daouglakit war ar reolenn. Evit diweredekaat ur reolenn evit ur mare hep he dilemel, diaskit al log a glot ganti.

## 12.6. Kontroll an taluadoù Web


Gant **Kontroll an taluadoù Web** e c'hallit aotren pe berzañ ar moned d'ar Genrouedad evit implijerien pe arloadoù zo e-pad ur prantad termenet.



### Notenn

BitDefender a seveno hizivadennoù bep eur, petra bennak e vefe arventennoù **Kontroll an taluadoù Web**.

Evit kefluniañ kontroll an taluadoù Web, klikit war **Kontroll ar gerent > Euroioù** e letrina arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 12.10. Kontroll an taluadoù Web

Evit gweredekaat ar gwarez-mañ, diuzit al log a glot gant **Gweredekaat kontroll an taluadoù Web**.

Diuzit pegeit e vo berzet ar c'hevreadennoù Kenrouedad. Gallout a rit klikañ war kelligoù hiniennel da zibab euroioù, pe klikañ war muioc'h a gelligoù da verzañ prantadoù

hiroc'h. Gallout a rit ivez klikañ war **Diuzañ pep tra** da ziuzañ an holl gelligoù ha da verzañ pep kevreadenn ouzh ar Genrouedad hag e-se. Ma klikit war **Diziuzañ pep tra**, e vo aotreet atav ar c'hevreañ ouzh ar Genrouedad.



**Pouezus**

Al logoù gris a verk ar prantadoù ma vez berzet an holl gevreadennoù Kenrouedad.

Arabat disoñjal klikañ war **Arloañ** evit enrollañ ar c'hemmoù.

## Rann 13. Hizivaat

Kavet hag anavezet e vez meziantoù drouk bemdez. Setu perak eo pouezus hizivaat sinadurioù ar meziantoù drouk.

Ma'z oc'h kevreet ouzh ar Genrouedad dre fun pe DSL e pledo emgefreak BitDefender ganti. Lañsañ a ra argerzhadur hizivaat diaz ar viruzoù bewezh ma vo loc'het hoc'h urzhiataer ha bep eur goude.

Ma vez kavet un hivizadur e viot pedet da gadarnaat e-lec'h ma vo graet emgefreak hervez an dibaboù hoc'h eus dielfennet er rannskrid **Arventennoù hizivaat emgefreak**.[linkend="update.settings.automatic">](#)

A-frip e vo sevenet an argerzhadur hizivaat, da lavaret eo e vo erlerc'hiet tamm-ha-tamm ar restroù zo ezhomm hizivaat anezho. Evel-se ne vez ket miret ouzh an urzhiataer da vont en-dro ha ne c'hall c'hoarvezout kudenn ebet a-fet surentez.

Er rubrikenn Hizivaat zo el levr implijout emañ an dodennoù amañ da-heul :


- **Hizivadur ar c'hefluskerioù enepviruz** - evel ma teu riskloù nevez war wel e rank ar restroù enno sinadurioù viruz bezañ hizivaet dalc'hmat a-enep dezho. Anavezet e vezont ivez gant an anv **Hizivaat Dielfennadurioù Viruzoù**.
- **Hizivadur evit ar c'hefluskerioù enepstrob** - ouzhpennet e vo reolennoù nevez d'ar siloù heuristik hag URL, koulz ha skeudennoù nevez. Gant-se e vo kresket efedusted ho keflusker Enepstrob. Anavezet e vezont ivez gant an anv **Hizivaat Enepstrob**.
- **Hizivadur ar c'hefluskerioù enepviruz** - evel ma teu riskloù nevez war wel e rank ar restroù enno sinadurioù viruz bezañ hizivaet dalc'hmat a-enep dezho. Anavezet e vezont ivez gant an anv **Hizivaat Dielfennadurioù Viruzoù**.
- **Hizivadur evit ar c'hefluskerioù enepstrob** - ouzhpennet e vo reolennoù nevez d'ar siloù heuristik hag URL, koulz ha skeudennoù nevez. Gant-se e vo kresket efedusted ho keflusker Enepstrob. Anavezet e vezont ivez gant an anv **Hizivaat Enepstrob**.

Ar rannbennad **Hizivaat** eus al levr implijout zo ennañ an dodennoù-mañ :

- **Hizivaat emgefreak**
- **Arventennoù hizivaat**


## 13.1. Hizivaat emgefreak

Evit diskwel an titouroù war an hizivadurioù ha seveniñ hizivadurioù emgefreak, klikit war **Hizivaat > Hizivaat** e letrinn an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 13.1. Hizivaat emgefreak

Amañ e c'hallit gwelet pegoulz ez eus bet klasket hizivaat hoc'h urzhiaer ha pegoulz eo bet hizivaet da ziwezhañ, koulz ha titouroù diwar-benn an hizivatur diwezhañ zo bet graet (pe ar fazioù zo bet kavet). Diskwelet eo ivez an titouroù war doare red ar c'heflusker enklask hag an niver a sinadurioù.

Gallout a rit mont da sinadurioù ha da veziantoù drouk BitDefender en ur glikañ war  **Roll ar viruzoù**. Ur restr HTML zo enni an holl sinadurioù a c'haller kaout a vo krouet ha digeriñ a raio en ur merdeer Web. Gallout a reot klask ur sinadur meziant drouk en diaz roadennoù pe klikañ war **Roll viruzoù BitDefender** evit mont d'an diaz sinadurioù BitDefender enlinenn.

Ma tigorit ar rannskrid-mañ pa vez hizivaet e c'hallit gwelet stad ar pellgargañ.

**Pouezus**

Evit bezañ gwarezet a-enep ar riskloù diwezhañ e ranker lezel an **hizivadur emgefreak** gweredekaet.

### 13.1.1. Goulennoù hizivaat

Hizivaat e vez hoc'h urzhiataer p'ho pezh c'hoant en ur glikañ war  **Hizivaat**. Anavazet eo an hizivadur-mañ evel un **Hizivadur diwar c'houlenn**.

Ar vodulenn **Hizivaat** a gevre ouzh ar servijer hizivaat BitDefender ha klask a ra an hizivadurioù a c'haller kaout. Ma vez kavet un hizivadur e viot pedet da gadarnaat anezhañ pe graet e vo emgefreak hervez an dibarzhioù hoc'h eus dielfennet er rannskrid **Arventennoù hizivaat dre zorn**.

**Pouezus**


Ret e vo marteze adloc'hañ hoc'h urzhiataer pa vo peurhizivaet. Erbediñ a reomp deoc'h adloc'hañ kerkent ha ma c'hallit evit bezañ gwarezet ar gwellañ.

**Notenn**

Ma'z oc'h kevreet ouzh ar Genrouedad gant ur gevreadenn RTC (pe RNIS) ez erbedomp deoc'h kemer ar boaz da implijout ingal an hizivadurioù diwar c'houlenn.

### 13.1.2. O tiweredekaet an hizivaat emgefreak

Ma klaskit diweredekaet an hizivadur emgefreak e teu ur prenestr diwall war wel.



Sifr 13.2. Diweredekaet an hizivadur emgefreak

Rankout a rit kadarnaat ho tibab en ur ziuzañ el lañser pegeit hoc'h eus c'hoant da ziweredekaet an hizivadur emgefreak. Gallout a rit diweredekaet an hizivadur emgefreak e-pad 5, 15 pe 30 munut, 1 eurvezh dalc'hmat pe betek adloc'hañ ar reizhiad.




### Diwall

Gant-se e c'hall bezañ ur gudenn surentez pouezus. Erbediñ a reomp deoc'h diweredeakaat an hizivadur emgefreak ar berrañ amzer ma c'haller. Ma ne vez ket hizivaat ingal BitDefender ne c'hallo ket gwareziñ ho reizhiad a-enep ar riskloù diwezhañ.

## 13.2. Kefluniañ an hizivadurioù

Gallout a reer seveniñ an hizivadurioù war ur rouedad lec'hel, war-eeun war ar Genrouedad, pe dre ur servijer proksi. Dre ziuver, klask a ra BitDefender an hizivadurioù bep eur war ar Genrouedad ha staliañ a ra ar re a c'haller kaout hep kemenn deoc'h.

Evit kefluniañ an arventennoù hizivaat ha merañ ar servijerioù proksi, klikit war **Hizivaat > Arventennoù** e letrín an arventennoù. Dont a ra ar prenestr war wel :



Sifr 13.3. Kefluniañ an hizivadurioù

Strollet eo an arventennoù hizivaat e pevar rummad (**Arventennoù lec'hiadurioù hizivaat**, **Arventennoù hizivaat emgefreek**, **Arventennoù hizivaat dre zorn hag Arventennoù araokaet**). Deskrivet eo pep rummad e-unan.

### 13.2.1. Kefluniañ al lec'hioù hizivaat

Evit kefluniañ al lec'hioù hizivaat, implijit dibarzhioù ar rummad **Arventennoù al lec'hioù hizivaat**.



#### **Notenn**

Arabat kefluniañ an arventennoù-mañ nemet ha kevreet e vefec'h ouzh ur rouedad lec'hel hag a stok sinadurioù drougiantoù BitDefender ent lec'hel, pe kevreet e vefec'h ouzh ar Genrouedad dre ur servijer proksi.

Evit ober hizivadennoù fiziadusoc'h ha fonnusoc'h e c'hallit kefluniañ daou lec'h hizivaat : ul **lec'h hizivaat kentañ** hag un **eil lec'h hizivaat**. Dre ziouer eo heñvel an daou lec'h-se : <http://upgrade.bitdefender.com>.

Evit kemmañ unan eus al lec'hioù hizivaat, lakait URL al lec'hienn velezhour lec'hel er vaezienn **URL** a gлот gant al lec'h hoc'h eus c'hoant da gemmañ.



#### **Notenn**

Hoc'h aliañ a reomp da lakaat ar melezhour lec'hel da lec'h hizivaat kentañ ha da lezel an eil lec'h hizivaat digemm betek-gouzout ne vefe ket hegerz ken ar melezhour lec'hel.

Ma vez implijet ur servijer proksi gant hoc'h embregerezh evit kevreañ ouzh ar Genrouedad, askit al log **Implijout ur proksi**, ha klikit war **Merañ ar servijerioù proksi** da gefluniañ arventennoù ar proksi.



#### **Notenn**

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh "**Merañ ar servijerioù proksi**" (p. 180)

### 13.2.2. Kefluniañ an hizivaat emgefreek

Evit kefluniañ an argerzh hizivaat sevenet ent emgefreek gant BitDefender, implijit an dibarzhioù er rummad **Arventennoù an hizivaat emgefreek**.

Gallout a rit diferañ an niver a eurvezhioù etre daou glask hizivadennoù er vaezienn **Koulzad**. Dre ziouer e vez lakaet ar c'houlzad da 1 eurvezh.

Evit diferañ penaos e tle an argerzh hizivaat emgefreek bezañ sevenet, diuzit unan eus an dibarzhioù-mañ :

- **Hizivadenn didrouz** - BitDefender a bellgarg hag a stailh an hizivadenn ent emgefreek.
- **Goulenn a-raok pellgargañ an hizivadennou** - bewezh ma vez un hizivadenn da gaout e c'houlenn ar reizhiad hoc'h aotre a-raok he fellgargañ.

**1** *Notenn*

Goulennet e vo an aotre diganeoc'h a-raok pellgargañ an hizivadenn, zoken ma kuitait ar Greizenn surentez.

- **Goulenn a-raok staliañ an hizivadennou** - bewezh ma vo pellgarget un hizivadenn e vo goulennet hoc'h aotre gant ar reizhiad a-raok he staliañ.

**1** *Notenn*

Goulennet e vo hoc'h aotre a-raok staliañ an hizivadennou, zoken ma kuitait ar Greizenn surentez.

### 13.2.3. Kefluniañ an hizivaat gant an dorn

Evit diferañ penaos e tle bezañ sevenet an hizivaat gant an dorn (hizivaat diwar c'houlenn an implijer), dibarzhit unan eus an dibarzhioù-mañ er rummad **Arventennoù an hizivaat gant an dorn** :

- **Hizivadenn didrouz** - sevenet e vez an hizivadenn gant an dorn ent emgefreek en drekleur, hep emell an implijer.
- **Goulenn a-raok pellgargañ an hizivadennou** - bewezh ma vez un hizivadenn da gaout e c'houlenn ar reizhiad hoc'h aotre a-raok he fellgargañ.

**1** *Notenn*

Goulennet e vo an aotre diganeoc'h a-raok pellgargañ an hizivadenn, zoken ma kuitait ar Greizenn surentez.

### 13.2.4. Kefluniañ an arventennoù araokaet

Evit mirout na vefec'h direnket en ho labour gant hizivadennou BitDefender, kefluginit an dibarzhioù en **Arventennoù araokaet** :

- **Gortozit evit adlañsañ, e-lec'h en goulenn digant an implijer** - Mar bez ret adloc'hañ evit an hizivaat, e kendalc'ho ar produ d'ober gant ar restroù kozh betek ma vo bet adderaouekaet ar reizhiad. Ne vo ket kemennet d'an implijer en deus da adloc'hañ hag e-se ne vo ket direnket en e labour gant hizivadenn BitDefender.

- **Arabat hizivaat ma vez un dielfennadur o vont en-dro** - Bit Defender ne hizivay ket ma vez un dielfennadur o vont en-dro. Evel-se n'en em rouestlo ket an argerzh hizivaat BitDefender gant an trevelloù dielfennañ.



**Notenn**

Ma vez BitDefender o hizivaat e-pad un dielfennadur, e vo paouezet gant an dielfennadur.

- **Arabat hizivaat ma'z eo oberiat ar mod c'hoari** - BitDefender ne ray hizivadenn ebet ma'z eo gweredekaet ar mod c'hoari. Evel-se e vihanait levezon ar produ war askoradoù ar reizhiad pa c'hoariit.

### 13.2.5. Merañ ar servijerioù proksi


Ma implij hoc'h embregerezh ur servijer proksi da gevreañ ouzh ar Genrouedad, e rankit spisaat arventennoù ar proksi evit ma c'hallo BitDefender hizivaat. A-hend-all ez implijo BitDefender arventennoù proksi ar merour en deus staliet ar produ, pe re merdeer dre ziouer an implijer red, diouzh an dro.



**Notenn**

An arventennoù proksi ne c'hallont bezañ kefluniet nemet gant implijerien o deus gwirioù merañ war an urzhiataer, pe gant implijerien gant galloud (implijerien hag a anavez ar ger-tremen evit mont da arventennoù ar produ).

Evit merañ arventennoù ar proksi, klikit war **Merañ ar servijerioù proksi**. Dont a ray ar prenestr **Merour proksi** war wel.



### Sifr 13.4. Merour proksi

Bez' ez eus tri strobad arventennoù proksi :

- **Arventennoù kefluniañ ar proksi (dinoet da-geñver ar staliañ)** - arventennoù kefluniañ ar proksi dinoet da-geñver ar staliañ gant ar gont Merour ; an arventennoù-se ne c'hallont bezañ kemmet nemet ma'z oc'h kevreet gant ar gont-se. M'en deus ezhomm ar servijer proksi eus un anv implijer hag ur ger-tremen eo ret deoc'h o diferañ ar vaeziennoù a glot ganto.
- **Arventennoù proksi an implijer red (diwar ar merdeer dre ziouer)** - arventennoù proksi an implijer red, tennet eus ar merdeer dre ziouer. M'en deus ezhomm ar servijer proksi eus un anv implijer hag ur ger-tremen eo ret deoc'h o diferañ er maeziennoù a glot ganto.



#### **Notenn**

Internet Explorer, Mozilla Firefox hag Opera eo ar merdeerioù Web sammet. Ma implijit ur merdeer all dre ziouer, ne c'hallo ket BitDefender tapout arventennoù proksi an implijer red.

- **Ho strobad arventennoù proksi deoc'h-c'hwi** - arventennoù proksi a c'hallit kefluniañ ma'z oc'h kevreet evel merour.

Setu amañ an arventennoù da ziferañ :

- **Chomlec'h** - skriverezit IP ar servijer proksi.
- **Porzh** - skriverezit ar porzh implijet gant BitDefender da gevreañ ouzh ar servijer proksi.
- **Anv implijer** - skriverezit un anv implijer anavezet gant ar servijer proksi.
- **Ger-tremen** - skriverezit ger-tremen reizh an implijer hoc'h eus skrivet e anv.

Pa glasker kevreañ ouzh ar Genrouedad e vez amprouet pep strobad arventennoù proksi betek ma teuy BitDefender a-benn da gevreañ

Da gentañ ez implijer ar strobad zo ennañ hoc'h arventennoù proksi deoc'h-c'hwi evit ar c'hevreañ ouzh ar Genrouedad. Ma ned a ket en-dro, e vez implijet an arventennoù proksi dinoet e-pad ar staliañ. Erfin, ma ned eont ket en-dro kennebeut, e vo kemeret arventennoù proksi an implijer red diwar ar merdeer dre ziouer, hag implijet e vint evit ar c'hevreañ ouzh ar Genrouedad.

Klikit war **Mat eo** evit saveteiñ ar c'hemmoù ha serriñ ar prenestr.

Klikit war **Arloañ** da enrollañ ar c'hemmoù pe klikit war **Dre ziouer** da gargañ an arventennoù dre ziouer.

# CD Sikour BitDefender

## Rann 14. Gwel a-vras

**BitDefender Internet Security 2008** a vez pourchaset war ur CD loc'hañ (CD sikour BitDefender) a c'hall dielfennañ ha digontammiñ an holl bladenoù galet a-raok ma loc'ho ar reizhiad korvoiñ.

Dleout a rafec'h implijout CD sikour BitDefender bewezh ma ne dro ket mat ho reizhiad korvoiñ abalamour m'eo kontammet gant viruzoù. Se a c'hoarvez peurliesañ pa n'implijet ket ur produ enepviruz.

Hizivaet e vez an diaz sinadurioù viruzoù ent emgefreak, hep emell an implijer, bewezh ma loc'hit CD sikour BitDefender.

CD sikour BitDefender zo ur stumm Knoppix advasterizet eus BitDefender, ennañ diskoulmoù surentez diwezhañ BitDefender evit Linux, el Live CD GNU/Linux Knoppix. Kinnig a ra un enepviruz burev gouest da zielefennañ ha da zigontammiñ ar pladennoù kalet (en ur gontañ ar rannoù Windows NTFS). Gallout a ra CD sikour BitDefender bezañ implijet ivez da assevel ho roadenoù pouezus pa ne c'hallit ket loc'hañ Windows.



### Notenn

BitDefender Rescue CD can be downloaded from this location:  
[http://download.bitdefender.com/rescue\\_cd/](http://download.bitdefender.com/rescue_cd/)

## 14.1. Kefluniadur rekis

A-raok loc'hañ diwar CD sikour BitDefender, e tleit da gentañ gwiriañ hag-eñ e vast ho reizhiad d'an emlegadoù-mañ :

### Doare prosesor

Kenglotus x86, 166 MHz da nebeutañ, met arabat bezañ en gortoz eus un askorad uhel en degouezh-mañ. Un dibab gwellañ a vefe ur prosesor eus ar remzi i686 gant 800 MHz.

### Memor

Memor izek : 512Mo RAM (1 Go erbedet)

### CD-ROM

Loc'hañ a ra CD sikour BitDefender diwar ur CD-ROM, setu e rankit kaout ul lenner CD-ROM hag ur reizhiad BIOS gouest da loc'hañ diwarnañ.

### **Kevreadenn Kenrouedad**

Daoust ma c'hall CD sikour BitDefender bezañ sevenet hep kevreadenn Genrouedad, an argerzhoù hizivaat o do ezhomm ul liamm HTTP oberiat, ha pa vefe dre ur servijer proksi. Setu e RANKER kaout ur gevreadenn Genrouedad evit ur gwarez hizivaet.

### **Spister grafek**

Kartenn c'hrafek standart kenglotus SVGA.

## **14.2. Meziantoù endalc'het**

E CD sikour BitDefender emañ ar pakad meziantoù-mañ :

### **Xedit**

Un aozer restroù testenn eo.

### **Vim**

Un aozer restroù testenn galloudus eo, ennañ un arc'hwel evit lakaat an ereadur war wel, un EIG ha traoù all c'hoazh. Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Vim](#).

### **Xcalc**

Ur jeder eo.

### **RoxFiler**

RoxFiler zo ur merour restroù grafek fonnus ha galloudus.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer RoxFiler](#).

### **MidnightCommander**

GNU Midnight Commander (mc) zo ur merour restroù er mod testenn.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer MC](#).

### **Pstree**

Pstree a ziskwel an argerzhoù zo o treiñ.

### **Top**

Top a ziskwel an trevelloù Linux.

### **Xkill**

Xkill a lam un arval gant e loazioù X.

### **Partition Image**

Partition Image ho sikour da enrollañ ar rannoù er furmadoù reizhiad restroù EXT2, Reiserfs, NTFS, HPFS, FAT16 ha FAT32 en ur restr skeudenn. Talvoudus e c'hall bezañ ar programm-mañ evit saveteiñ.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Partimage](#).

### **GtkRecover**

GtkRecover zo ur stumm GTK eus ar programm recover. Sikour a ra da adaptout restroù.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer GtkRecover](#).

### **ChkRootKit**

ChkRootKit zo un ostilh a dalvez da glask rootkitoù war hoc'h urzhiataer.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer ChkRootKit](#).

### **Nessus Network Scanner**

Nessus zo ur c'heflusker dielfennañ ar surentez a-bell evit Linux, Solaris, FreeBSD ha Mac OS X.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Nessus](#).

### **lptraf**

lptraf zo ur meziant da gontrollañ ar rouedadoù IP.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer lptraf](#).

### **lftop**

lftop a ziskwel ar bann drafet war un etrefas.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer lftop](#).

### **MTR**

MTR zo un ostilh diagnostik rouedad.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer](#).

### **PPPStatus**

PPPStatus a ziskwel stadegoù diwar-benn an tremenezh TCP/IP enkas ha diskas.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer PPPStatus](#).

### **Wavemon**

Wavemon zo un arload da gontrollañ trobarzhelloù rouedad diorjal.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Wavemon](#).

### **USBView**

USBView a ziskwel titouroù diwar-benn an ardivinkoù kevreet ouzh ar bus USB.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer USBView](#).

### **Pppconfig**

Pppconfig a dalvez da gefluniañ ent emgefreek ur gevreadenn ppp trec'haolet.

### **DSL/PPPoE**

DSL/PPPoE a geflun ur gevreadenn PPPoE (ADSL).

### **I810rotate**

I810rotate a weredeka hag a ziweredeka diskas video an dafar i810 war-bouez an ostilh i810switch(1).

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer I810rotate](#).

### **Mutt**

Un arval postelerezh MIME galloudus, er mod testenn, eo Mutt.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Mutt](#).

### **Mozilla Firefox**

Ur merdeer Web brudet eo Mozilla Firefox.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Mozilla Firefox](#).

### **Elinks**

Ur merdeer Web er mod testenn eo Elinks.

Evit gouzout hiroc'h, sellit ouzh [pajenn degemer Elinks](#).

## Rann 15. Penaos implijout CD sikour BitDefender

Er pennad-mañ e tisleger deoc'h penaos loc'hañ ha herzel CD sikour BitDefender, dielfennañ hoc'h urzhiataer evit klask drougiantoù, hag enrollañ roadennoù hoc'h urzhiataer war ur skor lem-laka ma vez ret. Gant an arloadoù a zeu gant ar CD e c'hallit ober trevelloù a-leizh a vefe re hir da zisplegañ en dornlevr-mañ.

### 15.1. Loc'hañ CD sikour BitDefender

Evit loc'hañ ar CD, arventennit BIOS hoc'h urzhiataer dezhañ da loc'hañ diwar ar CD hag adloc'hit an urzhiataer. En em asurit e c'hall hoc'h urzhiataer loc'hañ diwar ur CD.

Gortozit betek ma teuy ar skramm da-heul war wel, ha grit diouzh an displegadennoù da loc'hañ CD sikour BitDefender.



#### Sifr 15.1. Pajenn degemer al loc'hañ

Da-geñver al loc'hañ e vez hizivaet ar sinadurioù viruzoù ent emgefreak. Ur pennad amzer a c'hall mont gant se.

Pa vo echu an argerzh loc'hañ e c'hallot implijout etrefas CD sikour BitDefender.



Sifr 15.2. Ar Burev

## 15.2. Herzel CD sikour BitDefender

Gallout a rit lazhañ hoc'h urzhiataer e surentez dre ziuzañ **Kuitaat** e lañser kendestenn CD sikour BitDefender (klikit a-zehou evit e zigeriñ), pe dre ober gant an urzhiad **Paouez** adalek un dermenell.



Sifr 15.3. Dibabit "Kuitaat"

Pa vez echu gant CD sikour BitDefender serriñ an holl programmoù, e tiskouez ur skramm heñvel ouzh ar skeudenn da-heul. Gallout a rit lemel ar CD evit loc'hañ diwar ho pladenn galet. Bremañ e c'hallit lazhañ hoc'h urzhiataer pe e adloc'hañ.

```

X Window session terminated without errors.
Shutting down.
INIT: Sending processes the KILL signal
Killing processes with signal 15: (init) (aufs) (aufs) (aufs) (aufs)
ald) (hald-addon-acpi) (hald-addon-keyb) (ksoftirqd/0) (logsave) (inetd)
s/0) (khelper) (kthread) (ata/0) (ata_aux) (kseriod) (kpsmouse) (ksuspend)
) (aio/0) Done.
Waiting for processes to finish.....
Killing processes with signal 9: (init) (aufs) (aufs) (aufs) (aufs)
(kblockd/0) (kacpid) (knoppix-halt) (events/0) (khelper) (kthread) (ata/0)
d) (kpsbpt) (pdflush) (pdflush) (kswapd0) (aio/0) Done.
Waiting for processes to finish.....
Syncing/Unmounting filesystems: /sys/fs/fuse/connections /UNIONFS/lib/in
Turning off swap... Done.
Unmounting remaining file systems.
rootfs unmounted

KNOPPIX halted.
Please remove CD, close cdrom drive and hit return [auto 2 minutes].

```

Sifr 15.4. Gortozit betek ma teuy ar c'hemennad-mañ war wel pa serrit ar programm.

## 15.3. Penaos ober un dielfennadur enepviruz ?

Dont a ray ur skoazeller war wel pa vo echu an argerzh loc'hañ. Gantañ e c'hallot ober un dielfennadur klok d'hoc'h urzhiataer. N'ho po nemet klikañ war ar bouton Loc'hañ.



### Notenn

Ma n'eo ket uhel a-walc'h spister ho skramm, e vo goulennet diganeoc'h kregiñ gant un dielfennadur er mod testenn.

Heuilhit an argerzhardur e tri zennad evit seveniñ an dielfennadur :

1. Gallout a rit gwelet stadegoù an dielfennadur (tizh dielfennañ, amzer dremenet, niver a draezoù dielfennet, kontammet / zo diskred warno / kuzhet h.a.).



### Notenn

Pellik e c'hall padout an dielfennadur. Se zo diouzh pegen kemplezh eo da zielfennañ.

2. Gallout a rit gwelet an niver a gudennoù surentez zo war ho reizhiad.

Ar c'hudennoù surentez a vez diskwelet e strolladoù. Klikit war "+" da zigeriñ ur strollad pe war "-" da serrañ ur strollad.

Gallout a rit dibab un ober hollek d'ober evit pep stroll kudennoù a-fet surentez pe dibab oberoù dibar evit pep kudenn.

3. Gallout a rit gwelet diverradenn an disoc'hoù.

M'hoc'h eus c'hoant da zielfennañ lod kavlec'hioù hepken, grit evel-henn :

Furchit ho renkelloù, klikit a-zehou war ur restr pe ur c'havlec'h ha diuzit **Kas da**. Neuze dibabit **Dielfenner BitDefender**.

Gallout a rit ivez kas an urzhiad da-heul evel root, diwar un dermenell. Kregiñ a ray **Dielfenner Enepviruz Bitdefender** gant ar restr pe ar renkell diuzet a vo lakaet da lec'h da zielfennañ dre ziouer.

```
# bdscan /path/to/scan/
```

## 15.4. Penaos hizivaat BitDefender war-bouez ur proksi ?

Ma'z eus ur servijer proksi etre hoc'h urzhiataer hag ar Genrouedad, ur c'hefluniadur bennak a oa d'ober evit hizivaat ar sinadurioù viruzoù.

Evit hizivaat BitDefender war-bouez ur proksi, grit diouzh an tennadoù-mañ :

1. Klikit a-zehou war ar burev. Dont a ray lañser kendestenn CD sikour BitDefender war wel.
2. Diuzit **Termenell (evel root)**.
3. Skrивerezit an urzhiad : **cd /ramdisk/BitDefender-scanner/etc**.
4. Skrивerezit an urzhiad : **mcedit bdscan.conf** da gemmañ ar restr-mañ dre implijout GNU Midnight Commander (mc).
5. Lamit ar merk evezhiadenn dirak al linenn-mañ : `#HttpProxy =` (dre lemel an arouezenn #) ha diferit an domani, anv an implijer, ar ger-tremen ha porzh servijer ar servijer proxy. Da skouer, al linenn a zle bezañ evel-henn :  
`HttpProxy = myuser:mypassword@proxy.company.com:8080`
6. Pouezit war **F2** da enrollañ ar restr red, kadarnait an enrollañ, ha pouezit war **F10** d'he serriñ.
7. Skrивerezit an urzhiad : **bdscan update**

## 15.5. Penaos enrollañ ma roadennoù ?

Lakaomp ne vefec'h ket evit loc'hañ Windows abalamour d'ur gudenn dianav hag ho pefe ezhomm bras da vont da roadennoù pouezus en hoc'h urzhiataer. Aze e c'hallo CD sikour BitDefender talvezout deoc'h.

Evit enrollañ ho roadennoù war ur skor lem-laka, evel ur gartenn vemor flash USB, grit evel-henn :

1. Lakait CD sikour BitDefender el lenner CD, ar gartenn vemor flash el lenner USB, hag adloc'hit an urzhiataer.
2. Gortozit betek ma vo echu loc'hañ gant CD sikour BitDefender. Dont a ray ar prenestr-mañ war wel :



Sifr 15.5. Skramm ar burev

3. Daouglikit war ar rann m'emañ ar roadennoù hoc'h eus c'hoant da enrollañ (da skouer, [sda3]).




### Notenn

Pa implijot CD sikour BitDefender en em gavot gant anvioù rannoù e mod Linux. Neuze, [sda1] a gloto moarvat gant ar rann (C:) e mod Windows, [sda3] gant (F:) ha [sdb1] gant ar gartenn vemor flash.

4. Furchit ho renkelloù ha digorit ar c'havlec'h dibabet. Da skouer, MaRoadennoù, zo ennañ Filmoù, Sonerezh ha Levrioù elektronek.

5. Klikit a-zehou war ar c'havlec'h dibabet, ha diuzit **Eilañ**. Dont a ray ar prenestr-mañ war wel :



Sifr 15.6. Enrollañ roadennoù

6. Skriverezit `/media/sdb1/` en takad testenn a zere, ha klikit war **Eilañ**.

# Goulenn skoazell

## Rann 16. Skoazell deknikel

Strivañ a ra BitDefender da bourchas d'e arvalien ur skoazell brim hag efedus. Ar c'hreizenoù skoazell, a gavot ar roll anezho amañ dindan, a vez hizivaet dalc'hmat gant deskivadurioù viruzoù nevez ha respontoù d'ar goulenoù boutinañ, deoc'h da gaout an titouroù hoc'h eus ezhomm ar buanañ ar gwellañ.

Hor pal pennañ, gant BitDefender, eo ober d'hon arvalien espern amzer hag arc'hant dre bourchas dezho ar produioù ijinekañ er priz dereatañ. Ouzhpenn-se e kredomp e vez diazezet ur c'henwerzh a ra berzh war ur c'hehentiñ mat ha gwellentez ar skoazell d'an arvalien.

Gallout a rit goulenn skoazell er chomlec'h-mañ [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com) pa garit. Evit kaout ur respont buan, lakait ho chomlec'h postel mar plij, ha kement a vunodoù ha ma c'hallit diwar-benn ho produ BitDefender hag ho reizhiad. Klaskit deskrivañ ho kudenn en un doare sklaer ha resis.

### 16.1. Diaz anaoudegezh BitDefender

Diaz anaoudegezh BitDefender zo un diaz enlinenn ma vez kavet titouroù diwar-benn meziantoù BitDefender. Ennañ ez eus, en ur furmad aes da implijout, danevelloù diwar-benn disoc'hoù obererezhioù skipailhoù diorren ha skoazellañ BitDefender a denn d'ar skoazell deknikel ha d'an dizreinañ. Ennañ ez eus ivez pennadoù hollek diwar-benn an diarbenn enepviruz, meradur an diskoulmoù BitDefender gant displegadenoù dre ar munud, ha kalz pennadoù all.

Digor eo diaz anaoudegezh BitDefender d'an dud ha gallout a reer furchal ennañ digoust. An hollad titouroù-mañ zo c'hoazh un doare all da bourchas da arvalien BitDefender an titouroù teknikel o deus ezhomm. An holl c'houlenoù titouroù reizh hag an holl zanevelloù drein a zeu eus arvalien BitDefender a vo lakaet a-benn ar fin e diaz roadennoù BitDefender, kenkoulz hag an danevelloù drein, al labourioù stag, ar follennoùigoù pe ar pennadoù titouroù, da glokaat restroù skoazell ar produioù.

Diaz anaoudegezh BitDefender a c'haller kaour dalc'hmat war <http://kb.bitdefender.com>.

## 16.2. Goulenn skoazell

### 16.2.1. Mont d'al lec'hienn Web "Emservij"

Ur goulenn hoc'h eus d'ober ? Aze emañ hor mailhed war ar c'hrafoù surentez evit ho skoazellañ 24e/24, dre bellgomz, dre bostel ha dre flap, hep mizoù ouzhpenn.

Implijit al liammoù amañ dindan mar plij :

#### **Saozneg**

<http://www.bitdefender.com/site/KnowledgeBase/browseProducts/2195/>

#### **Alamaneg**

<http://www.bitdefender.com/de/KnowledgeBase/browseProducts/2195/>

#### **Galleg**

<http://www.bitdefender.com/fr/KnowledgeBase/browseProducts/2195/>

#### **Roumaneg**

<http://www.bitdefender.com/ro/KnowledgeBase/browseProducts/2195/>

#### **Spagnoleg**

<http://www.bitdefender.com/es/KnowledgeBase/browseProducts/2195/>

### 16.2.2. Ober ur goulenn skoazell

M'hoc'h eus c'hoant d'ober ur goulenn skoazell ha da resev sikour dre bostel, implijit unan eus al liammoù-mañ :

Saozneg : <http://www.bitdefender.com>

Alamaneg : <http://www.bitdefender.com>

Galleg : <http://www.bitdefender.com>

Roumaneg : <http://www.bitdefender.com>

Spagnoleg : <http://www.bitdefender.com>

## 16.3. Titouroù daremprediñ

Ur c'hehentiñ efedus eo an alc'hwez d'un darempred a ra berzh. E-pad an 10 vloaz tremenet eo deuet BITDEFENDER da vezañ brudet hep mar ebet dre strivañ dizehan evit gwellaat e gehentiñ, betek mont en tu all d'ar pezh a veze gortozet gant e arvalien hag e gevelerien. Neuze m'hoc'h eus c'hoant d'ober goulenn pe c'houlenn, deuit e darempred ganimp hardizh.

### 16.3.1. Chomlec'hioù Web

Rann ar gwerzhioù : [commercial@editions-profil.fr](mailto:commercial@editions-profil.fr)  
Skoazell deknikel : [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)  
Teulioù : [documentation@bitdefender.com](mailto:documentation@bitdefender.com)  
Kevelerien ar programm : [partners@bitdefender.com](mailto:partners@bitdefender.com)  
Marketing : [marketing@bitdefender.com](mailto:marketing@bitdefender.com)  
Darempredoù gant ar mediaoù : [pr@bitdefender.com](mailto:pr@bitdefender.com)  
Kinnigoù labour : [jobs@bitdefender.com](mailto:jobs@bitdefender.com)  
Kinnig viruzoù : [virus\\_submission@bitdefender.com](mailto:virus_submission@bitdefender.com)  
Kinnig strob : [spam\\_submission@bitdefender.com](mailto:spam_submission@bitdefender.com)  
Rentañ-kont eus drougimplijoù : [abuse@bitdefender.com](mailto:abuse@bitdefender.com)  
Lec'hienn web ar produ : <http://www.bitdefender.com>  
Dielloù ftp ar produ : <ftp://ftp.bitdefender.com/pub>  
Dasparzherien lec'hel : [http://www.bitdefender.com/partner\\_list](http://www.bitdefender.com/partner_list)  
Diaz anaoudegezh BitDefender : <http://kb.bitdefender.com>

### 16.3.2. Burevioù BitDefender

Prest eo burevioù BitDefender da respont d'ho koulennoù, diwar-benn krafoù kenwerzhel pe traoù all. O chomlec'hioù hag o daveennoù a gavot amañ dindan.

## U.S.A

**BitDefender LLC**  
6301 NW 5th Way, Suite 3500  
Fort Lauderdale, Florida 33308  
<http://www.bitdefender.com>  
Technical support:

- E-mail: [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)
- Phone:

- 1-888-868-1873 (Registered Users Only; accessible in United States only)
- 1-954-776-6262 (Registered Users Only)

Customer Service:

- E-mail: [customerservice@bitdefender.com](mailto:customerservice@bitdefender.com)
- Phone:
  - 1-888-868-1873 (Registered Users Only; accessible in United States only)
  - 1-954-776-6262 (Registered Users Only)

## Alamagn

### **BitDefender GmbH**

Penngarter Europa ar C'hornôg

Karlsdorferstrasse 56

88069 Tettngang

Alamagn

Pgz : 07542/94 44 44

Plr : 07542/94 44 99

Postel : [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)

Gwerzhioù : [sales@bitdefender.com](mailto:sales@bitdefender.com)

<http://www.bitdefender.com>

Skoazell deknikel : [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)

## Rouantelezh-Unanet hag Iwerzhon

One Victoria Square

Birmingham

B1 1BD

Pgz : +44 207 153 9959

Plr : +40 21 2330763

Postel : [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)

Gwerzhioù : [sales@bitdefender.com](mailto:sales@bitdefender.com)

Web : <http://www.bitdefender.com>

Skoazell deknikel : [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)

## Spagn

### **Constelación Negocial, S.L**

C/ Balmes 195, 2ª planta, 08006

Barcelona

Soporte técnico: [suporte@bitdefender-es.com](mailto:suporte@bitdefender-es.com)  
Ventas: [comercial@bitdefender-es.com](mailto:comercial@bitdefender-es.com)  
Pgz : +34 932189615  
Plr : +34 932179128  
Sitio web del producto: <http://www.bitdefender-es.com>

## **Romania**

### **BITDEFENDER**

5th Fabrica de Glucoza St.

Bucharest

Skoazell deknikel : [support@bitdefender.com](mailto:support@bitdefender.com)

Gwerzhioù : [sales@bitdefender.com](mailto:sales@bitdefender.com)

Pgz : +40 21 2330780

Plr : +40 21 2330763

Lec'hienn web ar produ : <http://www.bitdefender.com>

# Geriaoueg

## ActiveX

ActiveX zo ur patrom evit skrivañ programmoù a-benn ma c'hall programmoù all hag ar reizhiad korvoiñ o gervel. Implijet e vez an deknologiezh ActiveX gant Microsoft Internet Explorer da ober pajennoù Web etreoberiat a denn da brogrammoù hag en em zalc'h evel programmoù, kentoc'h eget evel pajennoù statek. Gant ActiveX e c'hall an implijerien ober goulennoù, respont da c'houlennoù, implijout boutonioù hag etrewezhiañ gant ar bajenn Web e meur a zoare. Alies e vez skrivet ar c'hontrolloù ActiveX e Visual Basic.

Brudet eo Active X evit e ziouer a gontroloù surentez, setu e vez dizaliet e implij war ar Genrouedad gant ar vailhed war surentez an urzhiataerioù.

## Meziantoù bruderezh

Ar meziantoù bruderezh a zeu alies gant arloadoù digoust ma tle an implijer asantiñ dezho. O vezañ ma vez staliet ar meziantoù bruderezh-se goude asant an implijer d'an aotre-implijout, n'emaint ket e-maez lezenn.

Koulskoude e c'hall ar bruderezh difoupañ dont da vezañ hegus, ha noazout da askoradoù ar reizhiad e degouezhioù zo. Ouzhpenn-se e c'hall an titouroù dastumet lakaat buhez prevez an implijerien en arvar, ma ne oant ket emskiantek ouzh termenoù an aotre-implijout.

## Diell

Ur bladennig, ur vandenn, pe ur c'havlec'h ennañ restroù zo bet saveteet.

Restr zo enni ur restr pe meur a hini en ur furmad gwasket

## Dor a-dreñv

Anv zo eus un ode e surentez ur reizhiad, lezet e plas a-ratozh gant an diorroerien pe an drezalc'herien anezhi. N'eo ket evit abegoù fall atav. Lod reizhiadoù korvoiñ, da skouer, a vez pourchaset gant kontoù arbennik da vezañ implijet gant teknikourien pe programmerien trezerc'hel.

## Rann loc'hañ

Rann e deroù pep pladenn hag a ro da c'houzout an doare m'eo savet ar bladenn (ment ar rannoù, ha kement zo). Evit ar pladennoù loc'hañ ez eus ivez er rann loc'hañ ur programm hag a garg ar reizhiad korvoiñ.

## Viruz loc'hañ

Viruz hag a gontamm rann loc'hañ ur bladennig pe ur bladenn galet. Ma klasker loc'hañ an urzhiataer diwar ur bladennig kontammet gant ur viruz loc'hañ e vo

lakaet ar viruz da vezañ oberiant er memor. Bewezh ma loc'hot ho reizhiad adalek ar poent-mañ e vo oberiant ar viruz er memor.

### **Merdeer Kenrouedad**

Anv zo eus ur meziant a implijer da welet pajennoù Web. Netscape Navigator ha Microsoft Internet Explorer eo an daou merdeer brudetañ. Merdeerioù grafek int o-daou, da lavaret eo e c'hallont diskwel grafikoù pe testennoù. Ouzhpenn-se e c'haller gant ar merdeerioù modernañ gwelet titouroù liesvedia, en ur gontañ ar son hag ar video, daoust m'o devez ezhomm lugantoù evit furmadoù zo.

### **Linenn urzhiañ**

En un etrefas linenn urzhiañ, an implijer a skriverez war-eeun urzhiadoù el lec'h pourchaset war ar skramm.

### **Toupin**

War ar Genrouedad e reer toupinoù eus ar restroù bihan, enno titouroù diwar-benn urzhiataerioù hiniennel, a c'hall bezañ dielfennet hag implijet gant kemennerien bruderezh evit derc'hel ur roud eus ar pezh oc'h dedennet gantañ hag eus ar pezh a blij deoc'h. Er-metoù-se e tiorroer c'hoazh teknologiezh an toupinoù, gant ar pal siblañ war-eeun ar pezh hoc'h eus lavaret e oac'h dedennet gantañ. Evit kalz tud ez eo ur gontell daoudu. Diouzh un tu ez eo efedus, rak ne welit nemet ar c'hemennadoù oc'h dedennet ganto, met diouzh an tu all, e gwirionez, e talvez ez eer d'ho heul war ar Genrouedad hag ez evezhier war betra e klikit. Evel-just ez eus ur vreuradeg diwar-benn ar vuhez prevez, ha kalz tud a vez displijet pa santont e vez sellet outo evel un "niverenn SKU" (gouzout a rit, ar c'hod barrennoù a-dreñv ar produioù). Daoust ma c'hall ar savboent-mañ diskouez bezañ divoder, ez eo reizhabeget e degouezhioù zo.

### **Unvez pladenn**

Un ardivink a lenn hag a skriv roadennoù war ur bladenn

Un unvez pladenn galet a lenn hag a skriv war ur bladenn galet.

Ul lenner pladennigoù a ya da bladennigoù.

Gallout a ra al lennerien bezañ pe re ziarbarzh (e-barzh un urzhiataer), pe re ziavaez (e-barzh ur voest distag a gevreeer ouzh an urzhiataer).

### **Pellgargañ**

Eilañ roadennoù (ur restr a-bezh peurliesañ) adalek un tarzh pennañ betek un drobarzhell. Alies e vez implijet ar ger da zeskrivañ an argerzh eilañ ur restr eus ur servij enlinenn da urzhiataer an-unan. Pellgargañ a c'hall bezañ ivez eilañ ur restr eus ur servijer rouedad d'un urzhiataer war ar rouedad.

### **Postel**

Postel. Anv zo eus ur servij kas kemennadoù da urzhiaeterioù dre ur rouedad lec'hel pe hollek.

### **Darvoudoù**

Anv zo eus un ober pe un darvoud dinoet gant ur programm. Gallout a ra an darvoudoù bezañ oberoù gant an implijer, evel klikañ war bouton al logodenn pe pouezañ war ur stokell, pe darvoudoù a c'hoarvez gant ar reizhiad, evel an diouer a vemor.

### **Pozitivel faos**

C'hoarvezout a ra pa gav un dielfennadur ur restr kontammet, ha n'eo ket kontammet e gwirionez.

### **Astenn anv restr**

Rann eus anv ur restr, goude ar pik diwezhañ, a verk ar seurt roadennoù stoket er restr.

Kalz reizhiadoù korvoañ a ra gant astennoù anvioù restr, da skouer Unix, VMS, hag MS-DOS. Peurliesañ ez eus eus ul lizherenn da deir lizherenn enno (lod RK kozh na c'hallont ket implijout ouzhpenn teir). Skouerioù : "c" evit kod tarzh e C, "ps" evit PostScript, "txt » evit testenn.

### **Heuristik**

Un hentenn diazezet war ur reolenn evit anavezout viruzoù nevez. N'eo ket soliet an hentenn dielfennañ-mañ war sinadurioù viruzoù difer. Emsav eo an dielfennañ heuristik rak ne vez ket touellet gant un adstumm eus ur viruz zo anezhañ dija. Koulskoude e c'hall a-wezhioù lakaat da ziwall e gaou diouzh programmoù reizh.

### **IP**

Protokol Kenrouedad – Ur protokol a c'haller routa, eus an heuliad protokoloù TCP/IP. Ober a ra war-dro ar chomlec'hiadur, ar routa IP, rannadur hag adaozadur ar pakadoù IP.

### **Programmig Java**

Anv zo eus ur programm Java savet evit mont en-dro en ur bajenn Web hepken. Evit implijout ur programmig en ur bajenn Web, e tleit diferañ anv ar programmig hag ar vent a c'hall implijout (hirder ha ledander – e pikseloù). Pa'z eer d'ar bajenn Web e pellgarg ar merdeer ar programmig diwar ur servijer hag en e seven war mekanik an implijer (an arval). Disheñvel eo ar programmoùigoù diouzh an arloadoù rak renet e vezont gant ur protokol surentez strizh.

Da skouer, daoust ma'z a ar programmoùigoù en-dro war an arval, ne c'hallont ket lenn pe skrivañ roadennoù war mekanik an arval. Ouzhpenn-se, strishaet eo

ar programmoùigoù c'hoazh e doare ma ne c'hallont lenn ha skrivañ roadennoù nemet diwar an domani o herberc'h.

### **Viruz Macro**

Ur seurt viruz kodet evel ur makro lakaet e-barzh un teul. Kalz arloadoù, evel Microsoft Word hag Excel, a embreg yezhoù makro galloudus.

Gant an arloadoù-mañ e c'hallit lakaat ur makro e-barzh un teul ha lakaat ar makro da vont en-dro bewezh ma vez digoret an teul.

### **Arval postelerezh**

Meziant a dalvez deoc'h da gas ha da resev posteloù.

### **Memor**

Takadoù stokañ e-barzh hoc'h urzhiataer. Ar ger memor a verk ar stokañ roadennoù e stumm parzhioù elektronek, hag ar ger stokañ a vez implijet da verkañ ar stokañ roadennoù war bandennoù gwarellek pe bladennoù. Gant pep urzhiataer ez eus ur c'hementad bennak a vemor fizikel, anvet ivez memor bev pe RAM.

### **Anheuristek**

An hentenn dielfennañ-mañ a implij sinadurioù viruzoù difer. Emsav eo an dielfennañ anheuristek rak ne vez ket touellet gant ar pezh a ziskouez bezañ ur viruz, ha gant-se ne laka ket da ziwall e gaou.

### **Programmoù gwasket**

Restr en ur furmad gwasket. Kalz a reizhiadoù korvoñ hag a arloadoù zo enno urzhiadoù a dalvez da waskañ ur restr evit ma'z afe nebeutoc'h a vemor ganti. Da skouer, lakaomp hoc'h eus ur restr testenn ennañ dek arouezenn "esauouenn". Ent reizh e vije ezhomm eus 10 okted.

Padal, ur meziant hag a wask ar restroù a erlerc'h an heuliad esauouennoù gant un arouezenn arbennik evit an heuliadoù esauouennoù, ha gant an niver a esauouennoù erlerc'hiet. En degouezh-mañ ez eus ezhomm eus 2 okted hepken evit an dek esauouenn. Kement-se n'eo nemet un teknik gwaskañ, kalz re all zo.

### **Hent**

An hentoù rik war-du ur restr. Peurliesañ e vez deskrivet an hentoù-se gant ur gwezennadur, eus ar c'hrec'h d'an traoñ.

An hent etre daou boent, evel ar ganol gheñtifi etre daou urzhiataer.

### **Pesketa**

Ar fed kas ur postel d'un implijer en ur ober van da vezañ un embregerezh anavezet, gant ar pal tapout dre laer titouroù prevez a dalvezo da implijout identelezh resever ar postel. Ar postel-se a gas an implijer d'ul lec'hienn Web ma

c'houlenner digantañ hizivaat titouroù personel, evel e c'herioù-tremen, e niverenn kartenn-gred, surentez sokial pe kont-vank, a vez anavezet dija gant ar gwir embregerezhioù. Evel-just ez eo ul lec'hienn faos n'he deus da bal nemet laerezh titouroù an implijer.

### **Viruz liesfurm**

Viruz hag a cheñch furm gant pep restr kontammet gantañ. Evel ma n'o devez ket ur furm hepken termenet-mat, eo diaesoc'h ar viruzoù-se da anavezout.

### **Porzh**

Un etrefas war un urzhiataer ma c'hallit kevreañ un drobarzhell. An urzhiataerioù personel o deus meur a seurt porzhioù. En diabarzh ez eus meur a borzh evit kevreañ pladennoù, skrammoù, ha klavieroù. En diavaez ez eus porzhioù evit kevreañ modemoù, moullerezhioù, logodennoù, ha trobarzhelloù all.

Er rouedadoù TCP/IP hag UDP, ur poent dibenn evit ur gevreadenn boellek. Gant niverenn ar porzh e c'haller anavezout e seurt. Da skouer, implijet e vez ar porzh 80 evit an tremenerezh HTTP.

### **Deizlevr**

Restr hag a enroll an oberoù sevenet. BitDefender a sav un deizlevr, ennañ an hentoù dielfennet, ar renkelloù, an niver a zelloù hag a restroù dielfennet, an niver a restroù zo diskred warno, hag an niver a restroù kontammet.

### **Rootkit**

Ur rootkit zo un hollad ostilhoù meziantel a dalvez d'ar verourien da vont d'ur reizhiad. Implijet e oa bet an termen evit ar reizhiadoù korvoiñ UNIX da gentañ. Sellet a rae ouzh ostilhoù adkempunet a roe gwirioù merour d'an nostanted, hag a dalveze dezho da guzhat o bezañs ha da chom hep bezañ gwelet gant merourien ar reizhiad.

Roll pennañ ar rootkitoù eo kuzhat argerzhoù, restroù, anvioù implijerien ha deizlevrioù. Gallout a reont ivez daspakañ roadennoù adalek un dermenell pe kevreadennoù rouedad, m'emañ ar meziantoù azas ganto.

Ar Rootkitoù n'int ket drouk dre natur. Ar reizhiadoù korvoiñ, da skouer, ha lod arloadoù zoken, a guzh restroù kizidik en ur implijout rootkitoù. Padal, implijet e vezont dreist-holl evit kuzhat drougiantoù pe bezañs un nostant er reizhiad. Pa vezont kenstrollet gant drougiantoù, ez a ar rootkitoù d'ober ur gourdrouz bras evit anterinded ha surentez ur reizhiad. Gallout a reont dielfennañ an tremenerezh, krouiñ dorioù kuzh er reizhiad, gwallegañ restroù ha deizlevrioù ha tremen hep bezañ dinoet.

### **Skript**

Ger all evit makro pe restr batch. Ur skript zo ur roll urzhiadoù a c'hall bezañ sevenet hep emell an implijer.

### **Strob**

Postel pe kasadennoù strolladoù kelaouiñ lakaet da bosteloù na vezont ket goulennet.

### **Spiant**

Forzh peseurt meziant hag a dap e kuzh titouroù an implijerien dre o c'hevreadenn Kenrouedad hep gouzout dezho, evit ober bruderezh peurliesañ. Kuzhet e vez alies ar spiantoù e meziantoù shareware pe freeware a c'hall bezañ pellgarget diwar ar Genrouedad. Koulskoude n'eus spiant ebet en darn vrasañ eus an arloadoù shareware ha freeware. Ur wezh staliet ez evesha ar spiant obererezh an implijer war ar Genrouedad hag e kas an titouroù-se e kuzh da unan bennak all. Ar spiantoù a c'hall ivez dastum titouroù diwar-benn ar chomlec'hioù postel, ha zoken ar gerioù-tremen hag an niverennoù kartennoù-kred.

Heñvel a-walc'h eo ar spiantoù ouzh an trojanoù rak staliet e vezont gant an implijerien war un dro gant ur produ all. Un doare boutin da dapout spiantoù eo pellgargañ lod meziantoù rannañ restroù a gaver hiziv an deiz.

Ouzhpenn ar c'hudennoù a denn d'ar vuhezegezh ha d'an doujañs evit ar vuhez prevez, ar spiantoù a laer ivez loazioù urzhiataer an implijer en ur implijout ar bann drafet pa gasont titouroù dre gevreadenn Kenrouedad an implijer. Abalamour ma implijont memor ha loazioù ar reizhiad, e c'hall an arloadoù a dro en drekleur bezañ kaoz d'an urzhiataer da chom sac'het, hag ober d'ar reizhiad bezañ distabil.

### **Elfennoù loc'hañ**

Kement restr a vo lakaet er renkell-mañ a zigoro pa loc'ho an urzhiataer. Da skouer, ur skramm loc'hañ, ur restr son pa loc'h an urzhiataer, un deziadur, programmoù arloadoù a c'hall bezañ elfennoù loc'hañ. Peurliesañ ez eo ur verradenn war-du ar restr a lakaer er renkell, kentoc'h eget ar restr hec'h-unan.

### **Barrenn stad ar reizhiad**

Barrenn stad ar reizhiad a oa bet degaset gant Windows 95. Emañ e barrenn trevelloù Windows (en traoñ peurliesañ, e-kichen an horolaj). Ennañ ez eus arlunioù bihan evit mont aes da arc'hwelioù ar reizhiad, evel ar pelleiler, ar voullerez, ar modem, ampled ar son, ha kement zo. Daouglikit pe klikit a-zehou war un arlun da welet ha da vont d'ar munudoù ha d'ar c'hontrolloù.

### **TCP/IP**

Transmission Control Protocol/Internet Protocol – Un hollad protokoloù rouedad implijet kalz war ar Genrouedad evit ar c'hehentiñ etre rouedadoù etrekevreet

gant periantoù ha reizhiadoù korvoñ a bep seurt. E TCP/IP ez eus standardoù evit ar c'hehentiñ etre urzhiataerioù hag emglevioù evit kevreañ rouedadoù ha routa an tremenezh.

### **Trojan**

Ur programm distrujer hag a ra van da vezañ un arload reizh. An trojanoù n'int ket viruzoù ha n'en em eiladont ket, met gallout a reont bezañ kaoz da gement a zistruj hag int. Unan eus ar re gorvigellusañ e-touez an trojanoù zo ur meziant a ro da grediñ e tigontammo hoc'h urzhiataer, hag a laka viruzoù e-barzh hoc'h urzhiataer e-lec'h ober se.

Dont a ra an termen eus istor brudet an Ilias skrivet gant Homeros, ma kont penaos e ra ar C'hresianed ur prof a "beoc'h" d'o enebourien, an Droianed : ur mell marc'h koad. Goude bezañ lakaet ar marc'h e-barzh o c'hêr e verz an Droianed eo leun a soudarded c'hresian hag a zigor dorioù kêr, o lezel an dagerien da aloubiñ Troia.

### **Hizivaat**

Stumm nevez eus ur meziant pe eus ur periant, zo da gemer plas ur stumm koshoc'h eus ar memes produ. Ouzhpenn-se e wir alies ar programmoù hizivaat hag-eñ ez eus ur stumm koshoc'h staliet war hoc'h urzhiataer dija. Ma'z emañ kont evel-se ne c'hallit ket staliañ an hizivadenn.

BitDefender en deus ur vodulenn arbennik evit an hizivaat. Gant ar vodulenn-se e c'hallit klask hizivadennoù gant an dorn pe hizivaat ent emgefreak.

### **Viruz**

Programm pe tamm kod a vez karget en hoc'h urzhiataer hep gouzout deoc'h hag a ya en-dro a-enep ho krad. Gallout a ra an darn vrasañ eus ar viruzoù en em eiladiñ. Krouet eo bet an holl viruzoù gant tud. Aes a-walc'h eo fardañ ur viruz eeun a c'hall en em eiladiñ adarre hag adarre. Ur viruz eeun evel-se zo dañjerus memes tra abalamour ma implijo buan an holl vemor zo da gaout ha ma harzo ar reizhiad hag e-se. Viruzoù dañjerusoc'h c'hoazh eo ar re a c'hall en em ledañ dre ur rouedad ha tremen a-dreuz ar reizhadoù surentez.

### **Termenadur ur viruz**

Sinadur binarel ar viruz, implijet gant an enepviruz da zinoiñ ha da skarzhañ ar viruz.

### **Preñv**

Ur programm hag en em skign war ur rouedad, hag a struj a-feur m'en em skign. Ne c'hall ket en em stagañ ouzh programmoù all.